

Ar Pevar Mab Emon

lesanvet

AR PEVAR MARC'H LIMON

adaozet gant P. BOURDELLEZ,
skeudennet gant E. KERVELLA.

SKOL - niv. 36 - 37 - 38

1967

Ar Pevar Mab Emon

lesanvet

AR PEVAR MARC'H LIMON

adaozet gant P. BOURDELLEZ,

skeudennet gant E. KERVELLA.

SKOL - niv. 36 - 37 - 38

1967

T U O A R C ' H O A R I

- I- CHARLAMAGN, Impalaer Roman, ha Roue Frañs,
Ar Priñs Lohier e vab
An Daouzek Tad a Frañs :

An Duk a Nêm
Ojer Danat
Richard a Normandi
Salaun, Roue Breizh
Rolant
Olier, h.a.

Kerent ar Rouanez :

Bertelod
Ganelon
Foukez a Vorilhon
Ripuz
Grifon
Hernier

Idelon
Galeran
Izakar
Gidelon
Henori
Beranjer

Ar re-mañ a c'hell bezañ gwisket damheñvel,
ha kemer an eil lod egile... hag ivez lec'h an
Tadoù a Frañs n'eo ket roet amañ o anv.

- II- BEUVED, duk Egremont

An Dukez
Mojiz, o mab
Foson, dijentil
Fanon, dijentil
Renier, dijentil
Daou skouedour

Jerald a Rousilhon, breur da Veued
Duk Nanteilh, breur da Veued

- III- EMON, duk Dordon, breur da Veued

An Dukez
o fevar mab :
Renod
Alard
Gichard
Richard

Un ofiser



Mae am eus an enor da vezan Roue Itrañs
Kag Impalaer Roman dre ar wir Providañs

IV- YDN, Rous Gwaskogn

Javze
Hektor
Anjou
Anton
Mombendal
Goustard, sekretour
Ur floc'h bihan
Ar Brihaez Klere, s'hoer d'ar Rous Ion, ha pried Renod
Emonig (diu wach, da gentañ war-dro pemp bloaz)
Ionig (d'an ail, war-dro dek vloaz)

V- AR RAMZ

Daou vasoner
Ur mestz-mesoner
Daou darbarer

Bouggoge, Rous Sarazin
Eskoforz, Ppife Sarazin
Tri Soudard Sarazin

Ur manec'h
Ur porzhier
Ur c'hlesker bara

Tri Baron a Vre-Alemagn
An Arc'heskob Turpin

ha tri marc'h : ur Boiard ruz pe du, ur Boiard gwenn, ha marc'h Rolant.

Ar pezh a rafe 74 a dud (hep kontañ ar "roffsed").

Met adalek al lodenn gentañ ez eus 3 den lazhet, ha goude vo lazhet ha krouget c'hoazh meur a hini all.

A-hand-all, ez eus tud ar c'hoazi ne gomzar anezhe nemet ar penn kentañ (eval Jerald a Rousilhon ha duk Nantailh), pe er c'hreiz (eval ar Ramz hag ar Sarazined), pe er penn diwezhañ (eval an Arc'heskob ha Baroned Bro-Alemagn).

An hini a vo bet lazhet dindan un anv n'en deus eta nemet adsevel bev dindan un anv all, hag e vo gallet c'hoazi ar pezh, brav ha mat, gant un tregont bennak a dud.

))o((

L O D E N N G E N T A Ñ

L O H I E R L A Z H E T G A N T B E U V E D

K E N T A Ñ T A O L E N N

(e palez Charlamagn, e Pariz)

DIVIZ - CHARLAMAGN, Impalaer ha roue Frañs, azezet war e dron,
Ar Priñs LOHIER, e vab,
An Daouzek Tad a Frañs, hag holl Lez ar Roue.

CHARLAMAGN

Me am eus an enor da vezañ Roue Frañs
Hag Impalaer Roman dre ar wir Brovidañs.

An istor a zesk dimp, pa zeuis er bed-mañ
e voe un tarzh-kurun a lakaas da grenañ
an douar en e bezh, an tempest da yudal...
Kement-se a oa sur ur sin dreist-ordinal
e raje ar bugel d'e holl enebourien
spontañ dirak e fas, krenañ gant an derzhienn.

Me am eus resevet e tro-pad va buhez
Grasoù dispar-meurbet roet din gant Doue :
Me a zo bet sakret Impalaer souveren
gant ar Pab Bonifas, war an holl bobl Romen.

Rak-se e lavaran, hep lorc'h nag arogañs
on Impalaer Roman ha Roue eus a Frañs.
Hennezh 'zo un enor, mar boe hini biskoazh,
ha n'en deus ket e bar, 'vit bete vremañ c'hoazh !

Met bepred, m'hen añzav, emañ va holl fiziañs
ennoc'h-hu, Aotronez, Kentañ Pennoù a Frañs.
C'hwi evel pilieroù am zalc'h divrall bepred,
lugernus va c'hurunenn ha va septr en e sked.
Hag e prometan deoc'h, keit ma vin e buhez
em bo evidoc'h holl bepred gwir garantez.

AN DUK A NÊM

Doue d'ho kendalc'ho niver a vloavezhioù
da souten an Iliz ha da ren ho pobloù !

AR PRIÑS LOHIER, mab d'ar Roue

Va Zad ha va Roue, ur ger a lavarin
dirak an Tadoù Frañs, mar bez aotreet din.

Biskoazh Pompe, Mark-Anton, na kennebuit Kaezar,
impalaer na roue, na d-int bet deoc'h-hu par.
Pa fallfe deoc'h bremañ sevel peder arme
he kacout tregont mil den e pep hini 'nezhe,
e nebeut a amzer en em gavfent ganeoc'h
rak sujaded hoc'h eus hag a zo feal deoc'h.
Hogen, mar hoc'h eus darn hag a zo tud doujus,
hoc'h eus ivez re all hag a zo re lorc'hus,
evel mar d-eo Beuved, an duk a Egremont.
Hennezh 'zo laun a lorc'h hag a re c'hoazh e gont
na brizfe ket na tribut na doujañs deoc'h rentañ.
Ne fell dezhañ sujaf d'ho kalloud a nap tra.

GANELON

Actrou, gwir a lavar ho mab ar Priñs Lohier.
An duk Beuved a zo dizouj en ho keñvez.
Fellout a re dezhañ ehon a peoc'h en e vro
hep sujediñ da zen, skrido nap a garo !

AR ROUE

Neuze, m'hen tou amañ dre'n Actrou Sant Denez,
a vo izalaet dezhañ e lorc'hentez !

NËM

Impalaer Charlamagn, nu gredan ket 'velkent
a ve an duk Beuved ken dalc'het en e benn
da nac'h biken rentañ doujañ d'ho Majestez
evel ma rae e dud etev a re da re.
N'hoc'h eus evit gouzout nemet kas darn 'ho tud
da vont betek anef da c'houlenn an tribut
hag ar sujediñ digant an duk Beuved...

AR ROUE

Hoc'h ali, duk a Nëm, eo a vezo heuliet...
Fouez a Vovilhon, ha c'hwi Kont Ganelon,
it eta em anv evel va daou vignon,
ha c'hwi, Lohier va mab, a gomzo em rakad.
Divorc'het ha dichek lavazit da Beuved
mar fellfe dezhañ nac'h paeñ din an tribut
evel ma o deus grêt a bep amzer a dud,
e lekain an diemantr war e hall zouerou,
en lekain er prison karget a chadennoù...
Mar ne deu da blegañ, m'hen tou faiz a Charlez,
en devo ur c'heuz bras ar rest eus e vuhez.



Beuved gant Kannadourien Charlamagn

E I L T A O L E N N

(E kastell Egremont)

KENTAÑ DIVIZ : BEUVED hag e aotrounez

BEUVED

Me 'zo duk galloudek ha mestr en Egremont,
a c'hell hep lorc'h ebet ober sklaer-mat va c'hont
ez on mestr hag aotrou e-barzh va dukelezh.
Setu 'vat roue Frañs, an Impalaer Charlez
a fell dezhañ enebañ ha dislâret war se
war zigarez em eus en anzavet roue !
Met mar deo impalaer hag ivez roue Frañs
ne d'eo ket e-unan, daoust d'e holl arogañs,
en deus bet gonezet an holl enorioù-se :
rak me ha va breudeur ha kalz eus hon lignez
hon eus e sikouret en e holl vrezelioù
ha risklet en danjer hor c'horfoù, hor madoù...
Rak-se va mignoned, me 'lavar deoc'h amañ
em eus divizet mat e pep tra er wech-mañ
e nac'hin paeañ trueaj d'an Impalaer Charlez
pa dlefe koustout din kement-se va buhez.

FANON, Kentañ dijentil

Dismegañs e vefe asantiñ ve lakaet
truach war ho tukelezh, peogwir hoc'h eus-en bet
evit ho kalonegezh hag ho lealded vras...
Rak mar doc'h galloudek, c'hwi hoc'h eus breudeur c'hoazh
a zo barrek da zerc'hel penn d'ar roue Charlez...
Mar klaskfe heg ouzhoc'h, en em gavfe diaes !

FOSON, an eil dijentil

Me a ginnigo deoc'h, Aotrou, a galon vat,
risklañ buhez va c'horf hag ivez va holl wad
d'ho sikour da vezañ mestr souveren 'n ho kontre...
Met setu Fransizien o tonet ho pete !

EIL DIVIZ : Ar Gannadourien o tont tre : FOUKEZ, GANELON, HENORI, BERANJER,
IZAKAR, IDELON

LOHIER

Salud deoc'h, Aotrou Beuved, 'zo duk en Egremont !
Ni 'zo deut ho pete, ur priñs nobl ha daou c'hont...

BEUVED
Ha pe voc'h deut ouzhpenn, me ne ran van ebet !
Lavarit prim ar pezh hoc'h eus da lavarret.

LOHIER
Kalcou 'n deus bet ve zad, hag a-berzh kalz a dud
e felle deoc'h-hu nac'h pesañ dezhañ tribut
na kennebeut stouñf' direk e Vajestez
evel ma ras ho tud atav a re da re...
Kerzet on da vezkañ berr-ha-berr an termen
evidoc'h da besañ truzaj bremañ-souden.
Pe ma vankit da zont da zoujañ dirzañ
e vo gwallet ha flestret a bep tu ar vro-mañ
ha graet deoc'h schuñf' truzus ho puhez.
Soñjit petra hoc'h eus da lavarout war as !

BEUVED
Klevit avat, Lohier, gouzout a rit avat,
dirak ar gêr a Rom pe voe lazhet va zad,
me ne zaleis ket da vonet da c'hoari
en un toull na fourje nemeur a dud o fri !
Pa'n em strinkis e-kreiz an emgann dirollat
e tegasis ganin rous al Lombardad,
en rentis prizoniad da rous frañs ho tad,
hag a brometas neuze a komzoù fraez ha mat
da c'hopr, hiviziken, reiñ din va dukalezh
dizalc'h a bep truzaj ha pep sujedigezh.
Roet en deus a c'her, ha deoust d'ho kourdrouroù
e fell din chom divestr hag hep pesañ talloù.

FOUKEZ
Sujit d'ar rous, Beuved, kerkoulz hag ar re all,
pe e ranket marvel en ur prison tañval.

FANON
En Egremont ez eus a-leiz dir hag houarn,
da reiñ deoc'h, mar bez ret, a-dreuz ho tiskouarn.

IDELON
N'eus dent en ho kenou, pe ve keit ha va biz
mar tostait ouzhin, na dreilhfen evel piz !

LOHIER
Roit dimp ho respont evit distreiñ d'ar gêr
ha zoit-en buan, rak an termen 'zo berr.

BEUVED
Va respont a zo skleer hag a zo evelhen :
tao'hit diwez va zoc, n'oc'h nemet un torr-pann !

LOHIER
Petra, den divergont, evelse eo dit-te
Komz gant seurt dismegaffs dirak Mab de Roue ?
Hogen ya, ma hen tou dre feiz a Sifris Lohier,
Chench a zi ton da gomz a-berzh nebeut amez !

BEUVED
O ! Klevit 'ta Lohier, klevit ha klevit skleer;
panevet e respetan ho tad an Impalaer,
me a walc'hfe buan va daouarn en ho kwad.
Tromplet oc'h un nebeut ganin, va c'hamarad !
Ya, me hen tou bremañ dre va brec'h fulorut,
ha dre va c'hleze lemm ha va c'halon tanet,
me a vo bruzunet munut 'val kig-pastez,
kent ha ma sujîn-me birviken d'ar Roue !

LOHIER
Ne spontomp ket avat ouzh ho klevout, Beuved !

BEUVED
Krogit en divergont, m'ho ped, va soudarded !
hag e vo lakeet da fuzast 'n ur prison.
Ni a welo neuze piv a baseo ranson !

UR SKOUEDDOUR (o tostait ouzh Lohier)
Me e groge ennañ, Actrou Duk..

LOHIER
Ne ri ket !
Ha mar klaskoz tostait, e vezi distoket !
(E lezhañ a ra gent un taol kleze)
Me a raio skol dit, va faotr, gent va c'hleze,
d'az teekiñ da lakeat an darn war veb rous !

BEUVED
Kastiz, va soudarded, war an dan digalon
a lezh unan va zud 'berzh va zi direzon !

LOHIER
Mar deo kann a fall deoc'h, ho c'hoant a vo torret !
Evel loened kriiz, 'n em gannomp, mignonad !

BEUVED
Me blanto bete 'x gwad annoc'h va c'hleze gwenn !
Delit !... Kemerit-en avit ho krosz-nouenn !

LOHIER (beuzet en a wad ha dare de vorval)
A ! A ! muntrez Beuved ! Skoet on em c'halon !
Gwerzhit dezhañ va marv, Foukeaz ha Ganelon ! (Mezval a ra)

EIL SKOUEDDOUR BEUVED

Ret eo o lazhañ holl hep pardonñ hini !
Setu war an douar dija diskaret tri !

PEVAR GANNAD ar ROUE, o fevar

Aotrou an duk Beuved, trevezz ! mar plij geneoc'h...
Ret mat eo dimp plegañ hag en em rentañ deoc'h.
Ne d-omp ket evidoc'h, gwelout a zeomp se.
Rek-se, ni hoc'h asped, list ganimp hor buhez !

BEUVED

Ho puhez 'roin deoc'h, nemet gant an diviz
e vo ret deoc'h asantiñ da vonet war ho kiz,
da gas geneoc'h raktal ha da rentañ er gêr
d'ho Mestr ar Roue Frañs, korf e vab ker Lohiaz,
rak evit testeni ne ran forzh anezhañ
e ran rentañ e vab an doare-se dezhañ.
Maz ne rit kement-se, m'hen tou feiz a Veuved,
em bo-me ho puhez, ha ne varc'hatin ket !

FOUKEZ

Ni 'bromet deoc'h, Aotrou, feiz a varc'hegerien,
e zaimp penn da benn hevez ho kourc'henn.

BEUVED

It 'ta diwar va zro, ha na zalc'het ket !
N'eo ket me, va zud vat, 'zo bet ouzh ho kerc'het !
(mont a ze e-meez gant e dud)

GANELON

O besj damantus evidomp, aotronez !
Penae a kredimp-ni mont dirak ar Roue
da gas dezhañ e vab gouliet er giz-mañ ?
Rannañ 'ray e galon pa welo anezhañ.

FOUKEZ

Eomp an hent koulskoude pa'z eo ret dimp monet.
Lakeomp ar c'horf peour 'n e c'hourvez en arched.
(mont a raont e-meez)

TREDE TADLENN

(E kastell Dazdon)

DIVIZ : An duk EMON, e wreg hag o fevar mab

EMON

Klevit, va fried kaezh ha c'hwi va bugale,
ma levarin un dra e zo em bolontez.

Trugerekaomp Doue hor Salver benniget
bremañ emomp e peoc'h hag e pasianted.
Bezhañ hon eus ivez madoù ha pourvezañs,
peadra da zerc'hel hon stad hag hon noblañs.
Met ar pezh a re din dreist pep tra levez
eo hon eus bet ar c'hres da vzañ bet ganet,
maget e doujañs Doue, savet 'n e garantez,
pevar mab hag o devo enor ha brud un deiz.
Ya sur, va bugale, hep dont da vrabañsal,
mar e vevit dalc'hmat evel gwir dud leal,
e vefot din un deiz da vout degemeret
e palez ar Roue e-touez an holl briñsed.
Poent eo, va fried kaezh, - ne vank netra d'ê ken -
Tremen hor pevar mab evit marc'hegerien.

AN DUKEZ

Aotrou an Duk Emon, va c'harantez parfat
gwir ha reizh e kavan ar pezh a leverat.

EMON

Ar c'houlz a zo 'vidoc'h bremañ, va bugale,
da c'houzout daoust ha c'hwi a zo e bolontez
da resev ho pavar urzh ar Varc'hegerien,
ma c'hellfet mont goude dispont a pep tachenn.

RENDO

Dre ma'm eus an enor da vezañ 'r mab-henañ,
'Kredan sevel va mouez evit komz da gentañ.
Rak-se, va zad, va mamm, 'tisklaerian deoc'h ho taou,
en anv va breudeur hag hep lavarout gac,
n'hor boe e nep amzer ha n'hor bo bizviken
ken bolontez nemet da heuilh ho kourc'henn.
Hag evel-se, va zad, mar hoc'h eus bolontez
da vont betek Pariz da saludiñ 'r Roue,
pedit-en d'han ober bremañ marc'hegerien,
Ni a yelo d'ho heul gant levezon serton.

EMON

Kenavo, va fried, ni a ya da Bariz,
met kentañ ma c'hellimp e teuimp war hor giz.

AN DUKEZ

Kenavo, va bugale, kenavo, va fried.
Doue d'ho kendalc'ho e buhez ha yec'hed !

PEVARE TAOLENN

(E palez Chazlamagn)

KENTAN DIVIZ : Ar Roue ha tud e lez a zeu e-barzh dre un tu. Emon hag a vugale a zeu goude dre un tu all.

AR ROUE
Trubuilhet ha nec'het am gwelit, va zud ker,
pa n'eo ket c'hoazh degouezhet va mab Lohier ar gêr.

EMON
Salud deoc'h gant doujañs, va Friñs ha va Roue !
Setu deuet ganin ivez va bugale
da ginnig o doujañs dirak ho Majestez,
d'ho pediñ d'o degemer evel marc'hegerien
hag e vint anaoudek deoc'h-hu da virviken !

AR ROUE
Bezit sur, duk Emon, vefot atav deut-mat
Koulz hag ho pugale, dirak va daoulagad.
Seblantout a ra din ez int tud a galon,
hag eveldeoc'h tud fur, tud leal ha gwirion.
Rak-se, mar fell dezhe bezañ marc'hegourien,
me o degemero eta bremañ-souden.
(Mont a raont holl e-maez nemet Gidelon)

EIL DIVIZ : ar gannaded o tistreiñ eus Egremont, gant korf Lohier.

GIDELON
Lavenez a wir galon p'ho kwelan, Aotronez !
Met piv ar c'horf marv a zougit evels ?

GANELON
Siwazh, va c'hendeiz ker, kontrol d'ar jodüstad
a zo e penn hor beaj, gonimp-ni c'hoarvezet !

GIDELON
Na piv ar c'horf marv a zougit an arched ?

FOLKEZ
Lohier, mab ar Roue, bet muntret gant Beauved.

GIDELON
O den kriz ha fallakc ! penaos, ha posubl ve
a vez-te bet ken fall lazhañ Mab ar Roue ?
O ! bet ac'h eus eno ur barrad follentaz
a vezo a dra sur rivin da diegezh !

- Ne pebezh kalou kriz, pebezh tristidigezh
a zegouezho ambrer gant ar Roue Charlez !

TREDE DIVIZ : ar Roue, tud e lez. EMON, e bevar Mab, pap a groez gante
an o c'hevc'han.

AR ROUE
Abaoe ma'z on roue, biaskaazh n'on bet leouan
o reiñ da zen abet urzh ar Varc'hegerien
evel ouzh an reiñ deoc'h, va fevar mignon ker.
C'hwil 'souteno va zron evel povar biliez.

EMON
Ni ho trugareka, va bugale ha me
evit an enor bras hoc'h eus grest dimp fetez.

RENON
Ni ho trugareka, Impalaer galloudus
pa'z ac'h an hor c'hefvez bet ken madalazhus,
hag a bromet d'hon tro evel gwir varc'haisn
lakeat korf ha buhez 'n ho servij da viken.

AR ROUE
A ! Setu Gidelon ! Patra 'zo a nevez ?

GIDELON
Nevezinti a-walc'h a zo sur, va Roue.

AR ROUE
Ha gwelet hoc'h eus Lohier o tistreiñ war e c'hiz ?

GIDELON
Ya, gwelet sur, Aotrou, an un doare iskie !
O ! perak n'on ket mut ! Neuze ne rankan ket
diaklaeriañ dirazoc'h ar spontusañ torfad !

AR ROUE
Lavazit din buan ar pezh 'zo c'hoarvezet !

GIDELON
Lazhet ho mab Lohier gant ar muntret Beauved,
hag ar rest eus ho tud. Ne van nemet pevar
degouezhet e Pariz gant hirvoud ha glac'har,
ha gante, 'n un arched, korf ho mab ker Lohier.

OUER DANAT
O ! setu e gorf paour o tagouzhout ar gêr !

AR ROUE, (hazpet war zeou skouedour, a doeta da sellout ouzh korf a vab)

Siwazh, va mab henañ, va brasañ esperañs,
me 'soñje ho kwelout roue ha mestr e Frañs !
Roue hag Impaler a sonjen ho kwelout,
ha va holl levanez 'zo troet e hirvoud !
(Sevel a ra ar pallenn)
O ! n'eo ken e gorf peour nemet gouli ha gwad !
Rannet eo va c'halon, siwazh, gant ar glac'har !
Me a garje bezañ e kalon an douar...

RICHARD A NORMANDI

O Roue, hor gwir dad, sioulait ho kañvoù,
ho pezit esperañs e Krouer an Neñvoù.
Gwir eo hoc'h eus abeg da vezañ glac'har
pa 'z eo lazhet ho Mab gant al lozc'hus Beuvad.
Hogen galloud hoc'h eus, a drugarez Doue,
da lakaat e glac'har, kent eget pevar deiz,
an traitour-se d'e dro, e gërioù, e gestell.
Mar kirit, va Roue, ne bado ket se pall !

SALAÜN A VREIZH

Ho klac'har a zo reizh; met, Aotrou, me 'esper
n'en em lâzfat ket re da vont d'an dizesper.
Pe'z eo marv ho mab, eo ret tennañ kastiz
eus an hini 'zo bet kiziek d'e varv kriz.

EMON

Me 'oar ervat, siwazh ! ez eo Beuvad breur din...
Dirak va Impaler koulekaoude 'anzavin
e tile an torfedour bezañ kastizet garv
pa'n deus d'ar Priñs Lohier roet taol ar marv.

RENOD

Selaouit, Impaler, ha c'hwil holl, Aotronez,
me lavarin un dra e zo em bolontez.
Ne garfen ket hen nac'h; va sontr an duk Beuvad
a zo un dan lozc'hus ha re brim kounnaret.
Koulekaoude e kreden na lazhe ket Lohier
nemet an deus hemañ komzet kalz re fier.

CHARLAMAGN

Tev din gant kement-se ! 'M eus eon 'out divergont
hag e vi te lozc'hus kerkoulz ha da sontr !
Hogen eo hen tous da Zous ha d'ar Sent :
Beuvad e gestizin an despad d'e gozent !

GANELON

Aotrou, preet eo pep hini da sentin ouzha ho c'hoant ;

N'hoc'h eus emañ raktal nemet hen disklariañ,
e walfot a bep tu un arme c'halloudek
sevet war ho koulenn, raktal o teredek !

GALERAN

Asur mat e verit an den lore'hus Beuvad
bezañ bev-buhezek didruez diframmet,
ha lakaet e gërioù e tan hag e ludu
a-benn e gastizañ 'vit un torfed ken du !

AR ROUE

Priñsed hag Aotronez, kesit hep daleal
korf va mab ket Lohier d'an Iliz ketadral.
Ha goude, me hen tou dre eour va c'hurunenn
e vo izelest da Veuvad e gribenn.

PEMPVET TAOLÉNN

(En Egremont)

DIVIZ : BEUVED ha tud e lez

BEUVED

Tromplet bres eont o d'acu, koulz ar mab hag en tad,
o soñjal dre c'hourdrouzoù donet d'am demesat,
rak me e dou emañ, pa vezañ dirolllet
na ran van ebet ken a gement 'zo ar bed !
Gouzañ lazheñ va zud dirazon ? - Keuz em eus
pa ne 'm eus o ledet holl a-hed hag a-drouz,
da ziskouez da Charlez ha d'e Dadoù e Frañs
n'em eus evit e c'halloud 'met fas ha diougañ !

RENIER

Me 'lavaro un dra hag a zo gwirionez :
re feuls e vazer bet kalz diouzh an d'acu gostez.
Setu an eil komz feuls 'zo tennet da sben
me'z eus chomet pevar marv war an dachenn.
Me 'garje kaout ur vrec'h torret a daou-hanter
ho ne vije ket bet lazhet ar Priñs Lohier.

FANON

Petra 'ta, kalon wak. Kronañ 'rez 'vit da lër ?
Kig ha gwad eo ivez peotred an Impaler !
Tud int kerkoulz ha ni, netra dezhe da goll
'met ur vuhez hapken, evel m'en deus an holl.

FOSON
O ! n'eus ezhom ebet da douetiñ e se !
Bezef hor be brezel sur e-walc'h hep dale.
Rak-se, Aotrou an Duk, me 've ali fenezh
daougementiñ ar gward, serrif ar perzhier kloz...

BEUVED
Abred eo c'hoazh, va mignon ! abred eo c'hoazh da se !
Na vo ket kement-all a harr war ar Rous !..
- Me 'gerfe e teufe, komzet neb a gero !
Rak ma teu 'n Impaler Charlamagn en hor bro
en do gwadigennoù evel 'n deus bet e vab,
rak pa fuloran-me, me ne ran ket a c'hoap ! -
Me am eus c'hoazh tri breur, 'zo koulz ha me duked,
hag hon sikouro mat hep nep douetañs ebet.
Renod hag e vredeur zo ivez va nizien,
ha mar kesan kannad eus va ferzh d'o goulenn
e tegasint din prim ur vandenn soudarded
a zalc'ho penn da Charlez ha d'e holl ganfarded.

RENIER
Biskoazh ne vos gwalet un arme ken pounner
evel war zouar frañs bremañ a zastummer :
Richard a Normandi a zeges Normaned,
ar Roue Saleün a zeges Bretoned,
Ojer Danet ivez a ro e varkizien,
en ur ger, pep hini a bourvez e vandenn.

BEUVED
Ni 'bourvezo saladenn a-barzh ma vint erzu,
a vo seizonet a bebr ha gwinegr ruz !
C'hwil, va daou zijentil, it davet va breudeur,
dezhe da zont amañ hep re dale nemeur...
C'hwil Renier, it davet Jerald a Rousilhon;
It davet duk Nanteilh, c'hwil va mignon Foson,
rak ezhom bras am eus e teufent d'am sikour
gant e holl soudarded, enep va enebour.

RENIER ha FOSON
Mont a reomp en hent, Aotrou, pa'z eo ho kred,
rak an smez 'zo bezz, goud ouzomp se ervat !
(Mont a reont e-maez)

BEUVED
Va breur Emon avat, n'am eus ket ar gredenn
e talvezfe netra monet d'en degemenn :
Hennezh a gren kement rak komzoù ar Rous
evel me ra an delioù gent an evel ar gouez.-

..Hogen e vugale 'zo pevar den diaspont
a rofe din sikour, ma gred, e wir galon -
- Siwazh, va mab Mojiz e zo set e beej,
kelonekañ brezelour 'zo bet kavet biskoazh.
Ma va pevar Mab Emon amañ da haul hennezh,
ar re-se e wir galon 'zalc'hfe penn ouzh Charlez !

FANON
N'ho pst ket a drubuilh, Aotrou an duk Beuved,
peogwir hoc'h eus breudeur, kerant ha mignoned.
Eomp holl da lakaat hon armoù e stad vat.
Gwell eo bezañ abred eget ra ziwezhet.

C'HWEC'HVET TAOLENN

(E palez Charlamagn)

DIVIZ : an Duk EMON hag a vugale.

EMON
Arza va bugale, pa omp amañ hor pemp,
e kevan 'vefe mat bremañ ma'n em glevfemp
diwar-benn ar gwalldeol a zo bet c'hoarvezet
etre tud ar Rous hag hoc'h contr Beuved.
A-vec'h ma kredan-me digorif va genou
da lavarout netra war hevelep kelou !
Mar sikouran va breur, Charlez e gounnere;
hogen mar ne ran ket, ar bed ma zemallo !
Trubuilh 'zo em spered pa sonjan en afer,
nac'het an o c'houzout petra zo da ober...
Rak-se, evit mirout na vefemp tamallet
gant den nag a bep tu, am eus eta soñjet
gwellañ 'vefe d'ober a vefe mont d'ar gêr
ha diwall na soursifemp a netra en afer.

RENOD
Va diviz-me, va zad, 'zo kontrol d'hoc'h hini !
Rak me a fell din mont, hep dilerc'h na diegi
gant holl nezh va divrec'h da sikour va contr
amañ bremañ raktal, azezek Egremont !
E palez Charlamagn ez eus marc'hagourien,
o gwir anv avat, a vefe : treitourien !
Tud fall ha dileal, en doare ma komzont
evit treiñ ar Roue e-enep va contr.

EMON
O' ve mab kex Renod, ha posubl ve penaos
e ve c'hwil ez c'hentañ 'drubuilhe ve repos !
Soñjit en ho kalon, m'ho ped, va bugale,
oc'h graet marc'hagourion bremañ gant ar Roue !

GICHARD
E-barzh ar wir lezenn dre zorn Doue skrivet
sentim ouzh tad ha mamm a zo gourc'hemennet.
Rek-se, va breur Renod, ra sentim ouzh hon tad,
komz a ra dimp emañ gant komzoù fur ha mat.
Eomp d'ar gêr gantañ, ha neuze war hon pouez
e walimp petra ray an Impalaer Charlez.

RENOD
Me 'zispennfa va c'hig va-unan gant va dent
kent eget ma vankfen da sikour va c'herent.

RICHARD
Penevet 'balamour ma tle pep gwir vogel
Keout evit a dad ur resped naturel,
me'z aje va-unan da Egremont fetuz
da sikour va eontz a-enep da Charlez.-
- Met sentomp : eomp d'ar gêr. Neuze ni a welo
hep ober tamm seblant, peseurt c'hoari a vo.

EMON
Eomp 'ta, me ho ped, buan, va bugale,
an em silomp ac'han, hep gouzout d'ar Roue.

SEIZHVET TADLENN

(En Egremont)

DIVIZ : BEUVED hag e dud - Jerald a Rousilhon ha duk Nanteilh

BEUVED
Douet mat, va breudeur, ra vefot holl em zi !
Me ye de boket deoc'h a hini da hini.
Ne douetan ket hoc'h aus, va breudeur, antantet
evit pebzh sikour em aus ho kemennet ?

JERALD
En em sikour e diaomp, me e oar ervat se...
Re zivergant oc'h bet, duk Beuved, koulskoude.

Evit ar Roue Frañs da c'houlenn digeneoc'h
tribut ha sujedigezh, ne oa ket dleet deoc'h
dout da lazhañ e vab dre ur barrad kounner
hag ober da bever den dougan a gorf d'ar gêr.
- Hag e fell deoc'h bremañ reiñ brezel d'ar Roue ?
C'hoazh e va meur a dra da lavarout war se !
Hoc'h-unen az oc'h test pet gwec'h en deus trec'het,
pet bro ha pet brezel en deus bet gonezet...
...Ne d-omp netra dezhañ, pa vo lavaret gwir,
mui eget kleze koad e-kichen kleze dir.

BEUVED
Me oar ervat em aus graet un taol fallentaz
e vezañ em c'hounnar lazhet mab ar Roue.
Met n'eus den a gounnarje asur kement ha c'hwil
ma vijs kannot deoc'h ur seurt a'frontiri...
- Lazhañ unan 'va zud aze dirak va fes !
Ha ne gavit-hu ket e oa deuet poent bras
diskouez 'oan mestr er gêr ?

NANTEILH
- Gwir a lavar Beuved !
Mar bezomp re gentil e vezimp gwallgezet
gant ar Roue Charlez e lies doareoù
ha taolet war hor c'hein niver a druschoù.
Gwir eo sur : ar Roue 'zo un den galloudek
...met piv mui egedomp en deus en sikouret ?
E ziwallet hon eus a gwir varc'hegerien.
Ni a zo penn-abeg mar toug ur gurzenn.
- Ha bremañ e ra dimp sujañ, dcujañ, plagañ,
'vel tud n'o dijet ket rantet servij dezhañ !
Stoum a reimp outañ daoust d'e holl c'hourdrouzoù;
ni a oar koulz hag en c'hoari gant an armoù !

JERALD
Me ne varc'haten ket da reiñ sikour d'am breur.
Koulskoude em aus son na gleskfemp hor gwalleur.

E I Z H V E T T A O L E N N

(E palez Charlemagn)

DIVIZ : Ar Roue hag Actronez e lez.

AR ROUE
Ne pegoulz 'ta, va zud, priñsed ha baroned,
e vo prest an arme da gastizañ Beauved ?
Prometif 'tan dezheñ, mar d-on-me Roue Frañs,
e rin-me e stagañ e kroug ouzh ur potaño,
pe c'hoazh e roin urzh ma vezo difrommet
evit diskouez ekouer vat dre holl d'am eujoded !

IZAKAR
Mall a zo warnomp holl monet da Egremont
da gastizañ Beauved, ar muntrez divergont...
...Mat me 'levao deoc'h un dra ne ouzoc'h ket :
Emon hag e vibien a zo an em dennet
hep levezout nep ger, e-maez eus ar palez.
Ne ouzon ket hag i n'o defo bolontez
da vont da Egremont evit sikour Beauved
abalemour ma'z int kerent ha mignoned.

AR ROUE
M'hen tou d'an duk Emon, ya mar d-on me Roue,
e rin dezheñ un deiz paeañ kor kement-se !
...Bremañ, Ojer Danat, it e penn an arme :
Krogit er Flemmunn Aouz, a zo gwir vanniell Frañs.
Bot em eus a-viskoszh ennooc'h kalz e fiziañe.
C'hwil a oar pell a zo lazenned ar brezel.
Kerzhit er penn a-reak, va jeneral fidal.

OJER DANAT
Pa roit din ar garg, Aotrou an Impaler,
e penn-kentañ 'n arme, e rin-me va dever.
Me oar ervat eo Beauved, an duk a Egremont,
un den eus va lignez, dre ma'z eo va eontr.
Gouzout a ren ivez n'eo nemet ur muntrez
hag ur fallekr lazhet gantañ ar priñs Lohier...
...Displegit ar banniell ! Sonit taboulin c'hoazh !
da lekaat tan e kalon an holl, bihan ha brae !
Eomp bremañ an hent an anv an Dreinded !
Kestiz, va mignoned, war ar muntrez Beauved !

E I L L O D E N N

MARV BEUVED HAG HINI BERTELOO

KENTAÑ TAOLENN

(En Egremont)

KENTAÑ DIVIZ

BEUVED Mignoned, pa omp lezet e peoc'h beta vremañ
Deomp da chaseal 'vit en em ziduañ.

RENIER Peadra 'zo, Aotrou, de ober ur chase,
N'eo ket avat d'ar blaizi, kennabeut d'ar moc'h gouez !
Biskoazh ne vos gwelet un arme ken pounner
Eval ma zo kempat, Aotrou, dirak ho kêr.

EIL DIVIZ

BERTELOD, o tont tre.
Me ho salud, Beuved, ha c'hwi holl, aotronez !
Deut on da zegemenn deoc'h ur c'halou nevez :
Charlemagn, roue frañs hag ivaz Impalaer
Zo degouezhet fetez amañ dirak ho kêr,
Zo degouezhet 'n ho pro gant deou ugent mil den,
Ken soudarded war droed ha ken marc'hagourin.
Degemenn a ra deoc'h eo deuet da lakaat
Ar peve en ho kêr da ruziañ gant ar gwad.
Mar hoc'h aus tenn kalon, eo poent deoc'h em zifenn
Rak ar wech-mañ eo deut an deiz hag an tamen
Da gastizañ warnoc'h marv e veb Lohier -
- Setu va c'hefridi disklaeriet bezz ha berr !

BEUVED Hala 'vat, Bertelod, 'met louzañ va deouarn
Me rofe deoc'h-hu buan a-dreuz ho tiskouarn !
Leverit d'ar roue, war plij, e berr gouzod,
E ran goap anezhañ, 'val a fank va botoù !
Hag e-pad war d-oc'h yec'h, it d'ar yezz buan met,
Ha na chomit ket palloc'h amañ da velbouzet !

BERTELOD
Ne spontomp ket nemeur direk ho kourdrouzoù :
Emañ Charlez o tont da verreat ho teodoù.
Gwalleürus e vo deoc'h ar mmed hag an deiz
Me walc'hjot ho taouarn e gwad Mab ar Roue !

BEUVED
Me a zabrje va c'hig hag a vrevje va fann
Kent ma teujen da c'houzañv ac'hanoc'h birviken !
(Mont a ra Bertelod a-maez)

TREDE DIVIZ

JERALD, goude bezañ chomet sioul ur pennadig.

Birviñ a ra va gwad, va izili e gren.
Me 'lavar, Aotronez, e vo start an afer !

BEUVED
Me c'hell, mui agedoc'h krenañ sur, va breur ker,
Rak me eo an hini an deus lazhet Lohier...
Gwir eo sur, Charlamagn a zo e Frañs Roue.
Hogen c'hoazh e tougomp, c'hwi va breudeur, ha me,
Dre holl war hor c'horfoù merkoù an taolioù lañs
Resevet evit souten e gurunenn a Frañs !
Hag evit hon gopraat da genderc'hel e stad
Fell dezhañ e vefemp ekabel dinden e droad !

NANTEILH
Ni 'rayo da Charlez un emgann vo ken tenn
Ma kollo o buhez ouzhpenn tregant mil den.

JERALD
A ! va breudeur gwirion, e galon ho pedan
Da salaou an ali a roan deoc'h bremañ.
Ar Roue 'n deus ar gwir ha ni hon eus ar gaou.
Ha pa'z eo bet an tabut hep mui ken stre deou,
P'en deus an duk Beuved lazhet ar priñs Lohier
Ha pa'z eo evelse deut da vazañ muntrer,
Perak lekaat ar gêr e tan hag e ludu ?
Perak gant gwad an dud liavañ 'r geot glas e ruz ?
Rak-se, mar am c'hredit, e kaset hepdale
Dazn ho marc'hegerien da gaout ar Roue
Rak piv bennek an deus ar Roue da barti,
Ne c'hell ket esperout bevañ re zisoursi !
An Impalaer, me gred, a zo un den leal
Hag hon degemezo en e c'hrae vat rektal.

BEUVED, goude bezañ chomet sioul ur pennadig.

Ma vijac'h un ali, va breudeur, ganin-me,
Biken n'en em rentjamp m'hen asur, d'ar Roue.
Met peogwir e fell deoc'h, ne dalv ket marc'hata...
- C'hwi, va deou zijantil, salaout an dra-mañ :
It eta eus va ferzh hag a-berzh va breudeur
Bramañ-souden raktal betek an Impalaer,
Ha lavarit dezhañ ne stoumimp ket pelloc'h;
'Oc'h kaset eus hon ferzh evit gouenn ar peoc'h.
Lavarit dezhañ c'hoazh em eus kalz a c'hiao'her
Bezañ lezhet e vab en ur barrad kounnar,
Hag on prest, en ur ger, da zigoll e varv
D'e dad, ar Roue Frañs, en doare ma karo.

RENIER
Aotronez, leouen-bras e raimp kement-se.
Rak-se eta, Foson, deomp davet ar Roue.

FOSON
Peil 'zo ne ris beaj gant kement all a joa,
Gant ken bras lavenez, evel ma ran hemañ !

E I L T A O L E N N

(E Palez Charlamagn)

KENTAÑ DIVIZ

Bertelod o tistreiñ eus Egremont

CHARLAMAGN
Ac'hante, va niz ker, petra 'lavar Beuved ?

BERTELOD
Biskoazh n'am eus gwalet un den ken aheurtet;
Kroget en deus raktal kement d'am gourdrouziñ;
Ma kreden e karje va mougañ 'vel ur c'hi.
Lavarit an deus din : "E-barzh e bezz gomzoù,
E ree goap ac'hanoc'h 'vel a fank e votoù".

CHARLAMAGN
N'eus eta tu na tro, evel ma walan mat
Nemet dre ar marv, da zonet d'en douasaat !

EIL DIVIZ

FOSON, o tont er palaz, ur bod gles en e zorn.

Jezuz-Krist, Mab Doue, gwir Despriner ar bed,
D'ho miro e peoc'h, Aotrou, hag ivez e yec'hed.

A ! Perak n'em sus-me komzoù flour Kikeron
Hag ivez ar furnez ar Rous Salomon
Hag un teod alacourat, da gomz d'an Impalaer !
A-berzh an duk Beuved ha decu sus e vzeudeur
Ez omp-ni bet karget da zonet ho pte
Evit an em strinkañ da dreid ho Majestez,
D'ho pedif en anv Doue, 'vit ma tourvezot c'hoazh
Kerut ar vedelezh d'o rosev an ho kres,
Beuved en deus keuz bras, anzav 're e dorfed.
Pinienn e raio evel ma vo merket.
Nanteilh ha Roueilhon, an eil hag egile,
A bromet bezañ sentus bepred d'ho Majestez

CHARLAMAGN

Birviken ne kredjen e vijec'h ken hardis
Da zonet davodon gant ur seurt kefridi !
Tee'hit dirak va fas ha na zalcit ket.
N'hell un tad pardonif da hevalep torfed !

NEM

Kredif a ran, Aotrou, e va ar pardon-se,
Talvoudus bras meurbet d'an eil ha d'egile.
Ne gavfet e nep lec'h dre ar rouantelezh
Kreffoc'h eget Beuved hag e gerentiazh,
Donet e-benn oute a zo start ha poanuis,
Hag ur peoc'h mat, Aotrou, a vefe talvoudus.

RICHARD a NORMANDI

Bez' emaint pevar breur, ha duket e-fevar,
E kement ma kerzhont na gavont ket o far.
Pa ginnig an digoll, pardonit da Veuved
Hag e vo feal deoc'h en amzer da zonet.

CHARLAMAGN

A ! Beuved den lozc'hus, piv en dije kredet
E teufez evelse da drubuilh va spored !
Me 'm bos da enoret, kerkoulz ha da lignez,
Hag em bos euidout bepred bet kerantez.
Koulskoude e welan out bet ken dinatur
Da drempañ da zocuar e gwad va c'hrouadur !...

- Pa welan izalest lozc'h Beuved hag e vzeudeur
N'hellan ket bezañ kriz, aotronez, 'n o c'heñver.
Rak-se e pardonon d'an eil ha d'egile
Ma reont a-nevez le-douj d'em Majestez.
Hogen Beuved koulskoude, pa'z eo ez c'hablusañ
A ranko da Dual-Yann gant decu c'hant den armet
Donet d'em servijañ e lec'h an bo merket.

FOSON

O Rous vertuzus hag ar gwellañ biakozh
Zo bet war an douar hag ivez ar mar glas !
Ni ho trugareka leouen a galon vat
Pa eo ho medelezh reiñ dimp-ni hon mennad !
Frealzet a vezo an Aotrou Duk Beuved
Pa bardonit dezhañ kement zo tremenet !

CHARLAMAGN

Ra zeuio da Dual-Yann da Bariz d'am c'hevot.

RENIER

Aotrou, dont e raio gant decu-c'hant den armet !

TREDE DIVIZ

E Palez Charlemagn - An holl a zo aet e-maez nemet kerent ar Rouanez.

GANELON, a sav en e sav.

P'ho kwelan, aotronez, digomz ha dilavar,
E tiaklerin un dra hag a ze din glac'har :
Peogwir omp etrezomp a komzin gant fiziañs,
Holl eus kerentiazh ar Rouanez a Frañs,
Lakaet ganimp hor buhez e danjer alies
Evit rentañ servij d'an Impalaer Charlez.
Ha pegament m'hon sus bet e servijet mat
E welan Charlemagn en hor c'heñver dic'hrad.
Setu lazhet Lohier gant ar lozc'hus Beuved,
Hag evit kemant-se ez eo bet pardonit !
Lohier e oa kar dimp a-berzh ar Rouanez,
Hag an dos euidomp a bep seurt medelezh.
Rak-se e kounnazen, m'hel lavar, va zud ker,
Ma rank chom digastiz marv ar priñs Lohier.

GRIFON

Ma vije c'hwil pe me, pe den sus hol lignez
A raie kement-all, lazhañ mab ar Rous !...

Hogen an duk Beuvad a zo un den traitour
P'en am sante gwasket, 'n deus kevot komzoù flour !

GALERAN

Emañ an ton ha 'r son, gant ar c'hozh duk Emon
Gant an duk a Nantailh, an duk a Rousilhon,
Hag ar muntrer Beuvad a zo bet pardonet
Gant degas d'ar Roue un deou-c'hont den armet !
Setu ni ar wech-mañ diskaret krenn a-blat
Me ne gavomp an tu evit o izelaet.
Pa lavazin deoc'h-holl sklaer-freuz va sentiment,
Peogwir e teuo Beuvad da Bariz da Dual-Yann
Eo ret dimp-ni mont holl e vaged war an hent
Evit en distrujañ etrezomp-ni, kerent !

IDELON

C'hwï hoc'h eus, Galeran, studiet ur gentel,
Ha ma heuliomp honnezh, hor bo esur brezel.
Hag e lazmpomp Beuvad, e vredeur c'hoazh a zo,
E vab Mojiz ivez, hag hennezh e glasko
Dre nezh pe dre itrik, me bromet deoc'h ervat
Gwerzhañ ker d'ar muntrer an taol roet d'e dad !

FOUKEZ

Tavit 'ta, Idalon, m'ho ped, war gement-se.
Lazhañ raimp Beuvad, gant sotre ar Roue.

BERTELOD

N'ho pezit evit-se nep marc'hed, sotronez !
Me 'lekey va c'hozh de asantif de se.
Ar Roue 'n e galon a zo trubuilhet bras,
Abeoc marv e vab e chem glac'harot c'hoazh !

T R E D E T A O L E N N

(En Egremont)

BEUVED

Ara, marc'hegerien, tudjentil, soudarded,
Setu deut an emzer a zo bet dimp merket
Gant ar Roue Charlez evit mont d'is gavet.
Ret eo d'erc'hel d'ar gomz, pa hon eus prometet.
En ano va Doue, gwir Roue ar bediz,
Komezomp penn an hent etrezek ha Pariz
Da desteniñ sklaer d'am mestr ha d'am Roue
Ez on feal dezhañ hervez va fromese.

PEVARE TAOLENN

(E palez Charlamagn)

CHARLAMAGN

Koar em eus 'kreiz an anor antran 'barzh va falez,
Ha resev a pep lec'h gloar ha plijadurezh,
Biken ne yelo kuit, am eus son, va zud ker,
Ar c'heuz eus va c'halon dimeus marv Lohier.
Kement-se a gendalc'h da rebech din bepred
Bezaf bet pardonet e varv da Veuvad.

GRIFFON

Aotrou, sobezet an o klevout lavaret
Emañ o tont da Bariz an Aotrou 'n duk Beuvad.
Greet en deus koulskoude an torfed spontusañ
A c'hallfe den ober birviken ar bed-mañ.
Hag e c'houzanfec'h un den dirak ho taoulagad
A soubas e zaouarn a gwad ho mab ken mat ?
Nac'het so va spered o soñjal kement-se.
Mar kirit aotreañ, selaouit, va Roue,
Ez afemp war an hent gant pevar-c'hont den armet
Evit terrif o fenn d'is dud ha da Veuvad.

CHARLAMAGN

Peogwir em eus pardonet da Veuvad e dorfed,
Tavomp eta war se, m'ho ped, va mignoned.

BERTELOD

Lazhet en deus ho mab, ya, dre dreitouriezh !
Dre dreitouriezh eta, ra vo lazhet ivez !

CHARLAMAGN

Pec'hed bras a vefs. Ne c'houzafwin biken
Dre ur marv injust lakant mervel nep den.

FOUKEZ

Ur marv just e va, m'hel lavar, va Roue.
Tra evit tra bepred, buhez evit buhez.
Beuvad dre dreitouriezh en deus lazhet Lohier,
Dre dreitouriezh ivez ra varvo ar muntrer !
Mar kirit aotreañ, gant ar C'hont Ganelon
Ha gant e vignoned, holl paotred a galon,
Ni 'yelo war hor c'hont da darrif penn Beuvad.
C'hwï evit kement-se na viot tamallet.

NEM

C'hoant hoc'h eus, sotronez, d'adkregiñ gant labour ?

FOUKEZ Me grede din e taufec'h ivez, N'om, d'hon sikour.

QJER DANAT Abred pe ziwezhat e vo ret paeañ ee.

RIPUZ Bepred emañ Qjer a-du gant e lignez.

SALAUN a VREIZH Lezit Beued e peoc'h hag e reot ervat.

HERNIER Ne dleer ket e c'houzañv hep skuilhan e holl wad.

CHARLAMAGN Diwar ho riskl hepken e aotreañ se deoc'h.
Hag e walc'han va daouarn eus ee, m'hel lavar deoc'h.
Gant en diviz n'em bo nap pec'hed evit se
E lezan ac'hanoc'h d'ober ho polontez.
Hogen lekeit evezh en em gavfac'h tromplet,
Rek me e bromet deoc'h, mar bez lazhet Beued
Ne venko enebourien deoc'h er rouantelezh.
Koustout a ray ker deoc'h ha d'ho tiegezh.

GANELON N'em eus marc'hed ebet, aotrou, e gement se !
Me a ziafiz Beued koulz hag e holl lignez !

P E M P V E T T A O L E N N

(War hent Pariz)

BEUVED Gwell eo bezañ abred eget re ziwezhat
Ken e vin e Pariz na vin ket dinac'het.
Gouzout a ran ervat em eus enebourien
E palez ar Roue, hag a zo treitourien.

FANON O ! en nab, m'hen toue, a zewy d'hon enebif
Ni en graio souzhet kent fin an disparti !

BEUVED Kalz a dud a welan o tonet davedomp,
A balez ar Roue e greden e teuont...
Siwazh dimp, sotronez, setu an taol treitour :
Ganelon a welan, va brasañ enebour.

GANELON Chomit e-sav, Beued, muntrez ar priñs Lohier.
Setu deut ar wech-mañ an eur hag an amzer
Ma vazo gwezhet deoc'h marv mab ar Roue.
Tra evit tra, Beued ! Buhez evit buhez !

BEUVED Piv 'ta ne dreitouro, p'eo ar Roue a ra ?
N'eus mui e surentez er bed-mañ a netra !

HERNIER Ac'hanta, duk Beued, mar boac'h kent kan lorc'hus,
Bremañ 'vat ho kwelomp un nebeut marc'hedus !
Met e c'hellit bezañ, rak deut omp da lakaat
An douar da ruziañ hep dale gant ho kwad.

BEUVED Siwazh, va mignoned, me am bos ar gredañs
E oa an emglev leal skoulmet gant Roue Frañs.
Met bremañ e welan en deus hon treitourer.
Area, kleze en dorn ! Kalon, va mignoned !
En anv ar C'hrouer, bezit holl din fidel,
Ar wech-mañ e vo ret pe drec'hif pe vervel !
(Lazhañ a ra ur soudard)

RIPUZ Bec'h dezhe, mignoned, eval chas kounnaret !
(Lazhañ a ra unan)

IDELON En em etrinkomp warne d'eo drailhañ a dammoù
Ma n'aio den anezhe da reiñ eus e gelod !
(Lazhañ a ra doue soudard)

BEUVED Pa rankomp holl mervel, va sikourit, va zud !
Rak ma chom unan bev, e vo ur gwir vuzhud.
(Darn eus e soudarded a zo lazhet. Eñ a zo tizhet)
Tizhet on d'ar marv, santout a ran ervat !
Bihanaat ra va nezh. Koll a ran va holl gwad.
Siwazh ! va breudeur paour, Jerald a Rousilhon
Ha c'hwi duk a Nantsilh, c'hwi ivez duk Emon.
Ha te va niz kaezh Renod, ma ouifes va doare
E teuies d'em sikour, ha da vreudeur ha te.
Ha te, va mab Mojiz, na deoust pelac'h emout ?
Pa glevi 'vin marv, az po kalz a hirvoud.
(Gant kounnez)
Met pa rankan mervel dre zaouarn tud digar
Me 'raio me vo soñj ac'hanon war an douar !
(Lazhañ a ra ur soudard d'ar Roue)

- RIPUZ
En em strinkomp warnañ, an den traitour infam !
Lazhañ e ra hon tud bepred a nevez-flamm !
- GRIFON
O ! Lazit ganin-me an traitour digristen,
Hag e roin dezhañ bremañ e groez-nouenn !
(Lazhañ e ra Bouved)
Penn lorc'hus ! tizhet out a dro vet en teol mañ !
Mat ! Ret eo peurober diouzh ar re all bremañ.
- GANELON
Peouezit, peouezit, me ho ped, Aotronez !
Mar greont va lavar, o devo o buhez !
Evel en deiz ma voe muntzet mab ar Roue
Ha douget e gorf peour d'ar palez evel-se,
E c'hourc'hemennan deoc'h, evit kacut kartier
Dougen, ho povar, korf ho Mestr Bouved d'ar gêr.
- FOSON
Aotronez, graet e vo hervez a lavarit.
Ret mat eo dimp ober 'vel ma c'hourc'hemennit.
- GANELON
Ha ni, deomp, Aotronez, deomp bremañ war hor c'hiz,
Da zigemenn d'ar Roue hon sus graet vailhantiz.
- FOSON
O duk Bouved, va Mestr, hemañ zo ur gwalleur
Hoc'h sus bet o tonet davet an Impalaer !
- O Roue Charlemagn, piv e gredfe biken
E teufec'h da c'houzefiv un dra ken digristen !
- FANON
O Dukez Egramont, penaos e kredimp-ni
Dont da zegemenn deoc'h ur c'haloù 'zo ken kriz !
Rannañ 'ray ho kalon, ha mantrif ho spered
Pa welfot ho pried ken euzhus gouliet.



Mojiz hag ar Ramz

C' H W E C' H V E T T A O L E N N

(War un hent)

KENTAN DIVIZ

AR RAMZ, a zeu tre hag a gomz outañ e-unan.
Bremañ hep douetañs e c'hellan lavaret
Ne gavfed ket va far pa rafed tro ar bed.
Biskoazh n'eus bet gwelet ur ramz war an douar
Na ken nerzhus ha me, na korfet ken dispar !
Va zad pa oa gwechall o vevañ er bed-mañ
A reas dre e nerzh da Jupiter krenañ
Pa zeuas da lakaat sevel war bilferoù,
D'en diskar diouzh e dron, menez war veneziou.
Met mestr an doueoù a strinkas e gurun,
Hag o lakaas e poultr hep esperniñ nikun...
Ma vijen bet eno, ne oa nag Apolon,
Yaou, na Meurzh, na Merc'her, na kennebeut Pluton,
Barrek d'am spouroniñ na zoken d'am spontañ.
Kent-se, me am bije graet dezhe holl krenañ.
Me am bije graet dezhe holl koll kalon,
Dont da c'houzout ha me a zoug kroc'hen poltron.
- Rouard, an diaoulig fin, a grede va zromplañ,
Hogen tromplet eo bet e-unan da gentañ.
Boïard, ar marc'h dispar, roue an holl ronsead,
Ha Flamberj, kleze kaer, en devoa bet kuzhet
E-barzh un enezenn 'zo anvet Palamos,
Hag eno e rae gward warne ha deiz ha noz.
Met pe 'm eus e gavet, al lorc'h war e vizaj,
Me 'm eus bet lavaret, 'n ur weañ va moustach,
Me am eus lavaret : "Ara, diaoulig Rouard,
Ro din amañ rektal Flamberj ha Boïard !
Rak me ne raez ket, me 'savo da dorchenn :
N'ez eus diaoul er bed-mañ na stropfen penn 'vit penn."
- Rouard, sebezet-holl, en desped d'e varo,
A gemeras nouze stumm ur c'hôle-taro,
Hag en deus taolet ten ha kurun ha luc'had,
O soñjal va spontañ - met me ne sponten ket !
Me 'm eus en destumet klenk ha kloz 'n e gavarn,
Ereet broc'h ha gar gant ur chadenn houarn,

Ha graet em eus dezhañ, pe'z on un dan a nerzh
 Dilazel ganin-me he Boïard ha Flamberj.
 - Bremañ ne c'houlennan nemet un digrez
 Da ziskouez dre ar bed nerzh ha kalonegezh.
 Klevet em eus lavarout e vez kavet e Frañs
 Marc'hegerien brudet, paotrad a gensekañs.
 Me 'garfa 'n em gevout gant unan anezhe
 Evit aprou warnañ Flamberje va c'hleze.

EIL DIVIZ

(Amañ en em gav Mojiz, hag ar Ramz o sellout outañ a lavar :)

Piv al lorgenneg-se a dremen dre amañ ?
 Em enor, ne brizfen ket donat da gomz outañ,
 Rak fae e ve ganin ober nep darempred
 Nemet gant ur rous, da vhanañ priñsed.

MOJIZ, a zeu tre, en ul lavarout :

Abaoc ma'z en-me deut en oad a driec'h vloez
 Va far war ar bed-mañ n'em eus kavet biskoazh !
 Hag ez an da vale evit klask a bep tu
 Deoust pelec'h e kavo va brec'h un tamm didu...
 ...Me gav din e welan un den mentek du-hont ?
 Goulennomp digentañ penaos emañ a gont,
 Me rank e saludiñ gant levezeg ha jor
 Me vin eur eo barrek da zifenn e vora.
 Rak suz-met, mar n'eo ket, hep nemeur a zale
 M'en kompennoc ken brav ne ranko ket bale.

(tostast a ra ouzh ar Ramz)

Selud deoc'h, va mignon ! Spontus oc'h montet mat !
 N'hoc'h eus-hu truzet ouzh neb a zo war droad ?
 Mar karfec'h, va mignon, evit va oblijañ,
 Ez ofen en he ples, ha c'hwi 'zeufe amañ ?

AR RAMZ

Perdie, va mignon, c'hwi a zo un dzol den !
 Fellout deoc'h-hu va marc'h, hag ober din diskenn !
 Ezhove em eus va marc'h avit distreiñ d'ar gêr,
 Hag e zanken hestañ, rak an amzer zo berr !
 N'ez eus ket pell amzer abaoe m'em eus en bet,
 Mar n'hoc'h eus ket unan, ee ne zan von abet.

MOJIZ

Hola 'ta, va mignon, barre da deod afo !
 Diakenn buan d'an traoñ, pe me ez tiskenna !
 Me ranken da bediñ c'hoazh hepken ur wach all,
 Me ez trailho munut evel un tamm kig ball.

AR RAMZ

Amañ ouzh va c'hostez ez eus ul louzaouenn
 Hag a rafe d'un den krenañ gant an derzhiann.
 Ha ma ranken teurel war an douar va zroad
 Me 'ray dit he c'hrenañ. Rak-se, diwall ervat !

MOJIZ

Alo, diakenn buan ! Ha te glev, kemaerad ?

AR RAMZ

Koll a reez-te da benn ? Me, Kemaerad dit-te ?

MOJIZ

Perak ne vefez ket ?

AR RAMZ

- C'hwezhadennig buhez !

MOJIZ

Ha te, kozh langon bras ! Spontus out-te lorc'hus !
 Deoust d'ez holl brabsfaod, n'out ket ken danjezus !
 Mar d-out un nebeut sod, nebaon, m'ar tizoda.
 Bremañ ni welo piv kentañ a boltrono.
 Diwall 'ta, leus bras !

AR RAMZ

- Ro peoc'h din, lorgenneg !

MOJIZ

Oiwell ervet da gig.

AR RAMZ

- Me 'serro dit da veg !
 Lema eo beg da glaz ?

MOJIZ

- Dre holl e antreo

AR RAMZ

En ur c'herf evel don ?

MOJIZ

- Meur a doull a gavo.

AR RAMZ

Fae eo ganin klevout kuzioù un tennig den
 A daelfen pomp kent lav sur gant ur c'hwezhadenn !

MOJIZ
Arse, kleze en dorn ! pe me 'dorro da fas !
Tremenet ar gomz-mañ, te n'ez po mui a c'hres.

AR RAMZ
A ! paour-kaezh preñv-douez ! pa fell dit-te mervel
Vo ret da gontantiñ, met te ne vi ket gwell !
Tremen, dalc'h gant da hant, hag ez po marc'had-mat.
Ne vin ket laouenoc'h pa 'm ho skuilhet da wed !
Rak ur gwad ken distar ne ray enor ebet
Da un den evel don a zo ken redoutet !

MOJIZ
Terriñ a raez va fenn gant da gomplimeñchoù,
Krougedenn villiget ! Diwall diouz va zaolioù.
Me ray dit displegañ ha kouezhañ d'an douar.
(Skeiñ a ra)
Piv on va c'hamared ? - Ha bremañ, te her goaz ?

AR RAMZ
N'ouzon ket da anv, met da dool zo pounner.
Va glazet ac'h eus kriz, met m'az peso emberr.
Ha te 'c'hello souten un taol eus va c'hleze ?
Mar tizhan ac'hanout em bo sur da vuhez.
(Dougan a ra un taol da Vojiz, met hemañ a sailh warnañ)

MOJIZ
Manket out, kamarad, met me n'az mankin ket !
E-kreiz da vouzelloù ez out bremañ tizhet.
(Disker a ze ar Ramz d'an douar)

AR RAMZ
A ! Glozet bras on ! zo din bremañ kartier,
Hag e welin er vat out ur gwir varc'heger.

MOJIZ
Kartier a c'houlennet ? Lavar war be diviz...
Hag ec'h eus peadra da beañ e-reakia ?

AR RAMZ
Setu aze Boiard, kaerañ marc'h 'zo er bed
Hag e vo birviken war an douar gwelet;
Kreñv eo evel ar mor, buan 'val an avel,
Doñv, sentus ouzh e vestr. N'oufed ket kavout gwell.
Flamberje va c'hleze a zo ur prezant c'hoazh,
Ar c'haserañ a gavfed a-zinden an oabl glas.
Trempet a gwad aspig, antanet gant koad sparn,
Goueliet gent Vulkan a govel an ifern

Ar re-se a zo din. Gra e gari gante.
Mar d-out gwir varc'heger, laz ganin va buhez.
Gant Boiard dindenout, flamberj ouzh da gostez,
Hep son ouzh den ebet, mont dre-holl e c'hallez.

MOJIZ
Pa'z out en em rentet, ez po sur marc'had-mat.
Laka evezh avat ne vez re ziwzhat
Da c'houlenn da vuhez, rak va zaol zo marvel :
Nemet sikour az pe, out dare da verzel.
Met pa 'c'h eus rost din flamberje ha Boiard,
Abalamour dezhe e rin un taol ampart.
Arse, deut d'am sikour, c'hwi diaouloù eus an aer
Hag holl spereoù all ar mor hag an douar :
Teriel, Gaviel, Tarkam, Gubarial,
Krareri, Atarib, Kore, Gargatiel,
Deut da sikour Mojiz da reiñ c'hoazh ar vuhez
D'ur paour kaezh ramz 'zo praet da rentañ e ene !

AR RAMZ
C'hwi eo eta Mojiz ! C'hwi eo ar marc'heger
En deus trec'het warnon gant un taol ken distar !
Lavaret mat en doa din-me an diaoul Rouard
Birviken ne golljen flamberje ha Boiard
Nemet dre da zaouarn. Ma 'm bije bet skiant
E vijen bet tac'het pell diouzhit hep emgann !

MOJIZ
Ar pezh zo graet zo graet. Lienomp da c'houlloù.
Goude-se, mar karez, e c'hoariimp armoù.
Biskozh n'em eus douget ur c'hroc'hen a boltron.
Bihan on da walc'out, met bras on a galon.

AR RAMZ
Setu me rentet ysc'h ur wech c'hoazh em buhez !
Ho trugarez, Mojiz ! Kemerit va c'hleze,
Pignit war gein Boiard. M'o zo deoc'h a galon,
P'hoc'h eus o gonezet, 'vit paseñ va rafson.

MOJIZ
Kenavo ! Deomp bremañ etrezek ha Renod :
Ma ve war gein Boiard, e ve ar gwellañ paotr !
Flamberj ouzh e gostez, hag en e zorn ul lañe,
Hag e ve dirazañ an deouzek Tad a Frañs
He deou-c'hant den armet praet-kloz da gombatiñ
E redfent dirazañ evel gad direk ki.
(Sailheñ a ra war Voiard, hag ez a evel an evel davet a gendirvi).

o

SEIZHVET TAOLENN

(En Egremont)

KENTAÑ DIVIZ

AN DUKEZ EGREMONT, (outi hec'h-unan)

O Doue souveren, m'ho ped, va frealzit !
Mervel a ran gant doan ha dibasianted
Pa n'em eus ket c'hoazh klevet nevezenti
A zoare va fried a zo aet da Bariz.
Emañ en nec'hamant beprad ouzh va souxpren
Rak e ve treitouret gant e anebourien.
Ha neuze va mab Mojiz ha n'emañ ket er gêr
Evit va frealziñ pa'm eus brasañ afer.
Ma c'hellan lavarout gant pep seurt gwirionez
N'ez eus gwreg war ar bed ken glac'haret ha me.

EIL DIVIZ

MOJIZ, (o tont e-barzh)

Pell a zo aboe m'ho kwelis diwezhañ,
Demet deoc'h, va mamm geseh, laouen e lavarn.
Panaos emañ va zad ? Lavarit din m'ho ped.
Petra 'zo a nevez ? Meurbet oc'h glac'haret !

AN DUKEZ

Pedra zo, va mab, da vezañ glac'haret,
Rak aet eo da Bariz ho tad en duk Beauved
Gant deou-c'hant den armet da servij ar Roue
Ha n'em eus e nep giz klevet eus e zoare.

MOJIZ

'N'em frealzit, va mamm, bezit dinac'h war eo !
Ha c'hwil a gred biken 'c'houzañvje ar Roue
Ober treitouriezh en e rouantelezh ?
Kement-se e ve dezhañ gwall dizenac'h ha mazh !
(Tud Beauved e zou tre gant korf o mestr)

TREDE DIVIZ

FANON

Aotrou hag Itron ger, setu ni distro c'hoazh !
Ur c'heloù a zegasomp hag a zo mantus bras.

AN DUKEZ

Va Doue benniget, va frealzit, m'ho ped,
Na piv ar c'horf maro a zougit an arched ?

FOSON

Siwazh, va Itron ger, setu lazhet hor Mestr
Gent an dreitourien fall, Ganelon ha Foukez.
Ni hon pever graet dimp rentañ e gorf er gêr
Er stad ma voe gwechall rentet ar Priñs Lohier.

AN DUKEZ

Frealzit va ene, o va gwir Desprener !
Rak n'em eus mui nemet gwalleur war bep gwalleur.
Maro ar Priñs Lohier a zo paset brasañ !
Va sikourit, va mab, pe ez en da semplañ.

MOJIZ

Frealzit ho kalon, va mamm gaazh, me ho ped.
Gwir eo sur ez eus loc'h da vezañ glac'haret
Met me am eus esper, abred pe ziwzhat
Da zont da werzhañ ker dezha maro va zad.

AN DUKEZ

Kesit korf va fried d'an iliz ma ho ped.
An hanter eus va buhez vo bremañ er vered.
(Mont a zeont e-mazh 'n ur ganañ al Libano)

PEVARE DIVIZ

MOJIZ

O Roue Charlemagn, piv a soñje biken
E rajec'h treitouriañ va zad kaezh evelhen ?
Hogen, me her promet d'an Doue am c'hrouas.
E paset a varo kent ma vazo pell bras.
Ma 'ya bremañ raktal davet va c'handirvi,
Ar pever Mab Emon, evit o raketiñ
D'am sikour da gasetañ hall vuntzerien va zad,
Dre ma 'z int tud a nerzh, dispart, ha poutred vat !

E I Z H V E T T A O L E N N

(E. Dordon)

(Emon hag e vugale)

EMON Klevit, va bugale, son am eus koulskoude
Ne sachfemp-ni weznomp re kounnar ar Roue
D vezañ deut e kuzh e-maez eus kêr Bariz
Hep aotre digantañ na goulann e aviz.
Rak-ae 'ta ve mibien pa eo ar peoc'h sinet
Etre ar Roue Frañs hag hoc'h eontr Beauved
Ez eus mall warnon bremañ da vonet war hor c'hiz
Da balez ar Roue etrezek ha Pariz.

MOJIZ Salud deoc'h, va eontr, ha c'hwi va c'hendirvi.
Setu me deut ho pete gant kalz a velkoni;
Pa dauan da soñjal ez eo bet permetet
Lazhañ dre dreitouriezh va zad an duk Beauved !

EMON Ha posubl ve, va niz, e ve gwir kement-se,
E vefe graet a frañs dreitouriezh 'velse ?

MOJIZ Ya, siwezh, va eontr, se 'zo bet c'hoarvezet,
P'edo war hent Pariz gant daou-c'hant den smet.
Edo ouzh o gortoz Foukez ha Gansalon
Ganto pevar-c'hant den, treitourien digalon.

RENOD Gant araj ha fulor ez on freneziet
Pa dauan da soñjal ez eo bet treitouret
Va eontr ker Beauved, an duk a Egremont...
An neb en deus hen graet ne govo ket e gont !
Me 'zistrujo 'r Roue ha tiegezh e wreg.
Gant va c'houtalasan e torchin dez' o beg !

EMON O va bugale gaezh, ar Roue marteze
Ne sotreas biskoazh dont d'ober kement-se !

RICHARD Ha posubl ve e vec'h ken dinatur, va zad
Ne santfec'h en ho kreiz nep truez, 'vit ho kwad ?

MOJIZ Delit Boiard, dalit, va c'henderv ker Renod.
Pa vefot war a gein it dispont d'an asot !
Hennezh a zo ur marc'h hag em eus gonezet
War ur Ramz divadez hag em eus-me trec'het.
Dalit va Flambezje ivez, va c'hleze gwenn
A zo bet goveliet en ifern gant Vulkan
Hag en deus ar vertuz, c'hwi 'walo ez eo gwir,
Da droc'hañ an houarn kerkoulz evel an dir.

RENOD, (a seilh wer Voiard hag a laver) :
A ! Kalonekañ marc'h, va c'henderv, eo hemañ !
Ma en gwel ar rous, a c'hoantay anezhañ !

ALARD N'en deo ket ret monet d'en diakouszout dezhañ,
Rak hemañ zo ur marc'h n'eo biskoazh eveltañ,
Gant a draid en deveus moustrer war ar geot glas,
Leun eo a dan-fero, hag a herzh a zo bras.

EMON Me 'zo 'vont da Bariz, hastit c'hwi dont ivez
Da balez Charlemagn, m'ho ped, va bugale.
Ha ps vezimp du-hont, o ! komzit gant douster
Betek gouzout penaos emedi an afer.

GICHARD It kentañ, c'hwi va zad, da saludiñ 'r Roue,
Ha lavarit dezhañ ec'h arruimp ivez.

RICHARD C'hwi Mojiz, a ranko chom amañ gant Boiard,
Hogen me hoc'h asped da zerc'hel prest ar marc'h.

MOJIZ M'ho ped, va c'hendirvi, rebechit da Charlez
Pabezh dizenor bras eo dezhañ, pebezh mezh,
Bezaf gouzañvet lazhañ va zad dre dreitouriezh.

GICHARD Nebaon ni hez graio, n'ho pazit ket a nec'h !

NAVET TADLENN

(E Palez Charlamagn)

KENTAÑ DIVIZ

(Charlamagn a zeu e-barzh dre un tu. Foukez, Ganelon...dre an tu all)

GANELON
Aotrou an Impalaer, kavet hon eus Beuved
O tont wer-du Pariz gent daou-c'hant den armet
Hag hon eus o lazhet, nemet pevar hepken.
Ar peurreat anezhe 'zo sacc'het o c'hroc'hen,
Ha graet d'ar pevar-se rentañ Beuved er gêr
En doare ma voe graet ivez d'ho mab Lohier.

CHARLAMAGN
Un taol fall hoc'h eus graet. Aon em eus, Aotrounez,
Na daoust penaos e teuy an afer goude se.

EMON
M'ho salud gant doujañs, Roue ar Freñsazien.
Deut on c'hoazh d'ho palez, hag ivez va mibien.
Da destinañ deoc'h ma omp-ni bet tec'het
Eus ho palez, va Friñs, ne oa ket hep sujed.

CHARLAMAGN
Ne roan deoc'h nep tamall evit-se, duk Emon,
Rak graet hoc'h eus pep tra gant fuznez ha rëzon.

EMON
Na c'hellan ket herzel, koulskoude, Impalaer,
D'en em glemm dirazoc'h evit mero va breur.
Un dra spontus eo bet aotreñ e lazhañ
Pa zeue a greiz kalon evit ho servijañ.

CHARLAMAGN
Pep tra a zo bet graet gant justis, duk Emon.
Biskoazh den ne lazhas den all dre draizon
Na rankas dre draizon bezañ lazhet ivez.
Bremañ p'eo tremenet, na gomzomp mui a se !



Ar Pevar Mab Emon dirak Charlamag

EIL DIVIZ

(Ar pevar Mab Emon a zeu e-barzh)

RENOD

Demat deoc'h, Impalaer, Tadoù a Frañs ivez.
Me reket deoc'h bepred pep laouenidigezh.

CHARLAMAGN

Ha deoc'h, marc'hegerien, e hetan kement all.
Me am eus evidoc'h ur garantez divrall.

RICHARD

Ma karjec'h ac'hanomp evel ma leveret
N'ho pije ket lazhet va eontr ker Beued.

GRIFON

Er a lazhas Lohier p'edo en e balaz.
Lazhet eo bet ivez. Bremañ ez omp kitez !

RENOD

O ! Bremañ 'ententan penaos emañ an dro !
Lazhet eo va eontr, met ur re a baec !
Prometif mat a ran, ha ne vin ket gaouiat,
E werzhin e priz vat, abred pe ziwezhat
Marv va eontr Beued d'ar bagad treitourien.
Emaint ouzh va c'hlevet, met me ne zoujan den !
Neb 'zo droug en e gof, n'eus nemet dont e-maez
Hag e welimp diouzhtu gant piv emañ ar reiz.

CHARLAMAGN

Lazhet eo bet va mab, Beued, a zo ivez
Tra evit tra bepred, buhez evit buhez.
Rak-se e tifennan ~~komz~~ ouzhin birviken
Dimeus a gement-se, rak terrif rit va fenn.

RENOD, (d'e vreudeur)

Un nebeudig amzer izelaomp hor c'haoz
Hag e komzimp goude gant muioc'h a brepoz.

SALAUN A VREIZH

Pa hoc'h eus sioulaet bremañ an tabut-mañ,
Servijet eo an daol, poent eo eta leinañ,
Ma 'c'h evimp ur banne an eil da egile
Evit 'n em bardoniñ gant ur gwir garantez.

(Holl e-maez. Sonerezh)

TREDE DIVIZ

(Bertelod ha Renod e zeu tre)

BERTELOD Bremañ p'hoc'h aus lainet, Renod, ha c'hwi'deurvez
Dont da c'hoari damez 'pad un hanter- eurvez ?

RENOD, (Rok)
O ye da ! Bertelod, prest on-me da c'hoari.
Met kent eget kregiñ, da bet 'vo ar barti ?

BERTELOD Lakaomp anezhi da ugont hep mui ken,
Ha da zaozek skoed aour, pe mar kirit, ouzhpenn.
(Skeiñ a re an difisoù)
C'hwezek am eus dija e penn-kentañ 'r bati !

RENOD, (O stlabezañ pep tre)
Ne dalv netra ho taol, rak-se n'hoc'h aus hini !

BERTELOD Penaos, kozh mab ar c'hagn ! evelse eo dit-se
Dont d'ober trichiri ouzh niz-tost ar Rous !
Pa oc'h hevalop peotr, dalit a-dreuz ho jod
D'ho teskiñ ur wech all ne vlot ket ken sot !

RENOD E-kreiz da zaolegad e lârez gaou, infom !
Te a zo digalon, gwrag onest eo va mamm !
Manket oc'h, Bertelod, met me n'ho mankin ket,
Me 'warzho deoc'h bremañ maro an duk Beauved !
Rak c'hwi a zo ivez unan 'an dreitourien.
Dalit, setu eze svit ho kroaz-nouenn !

(Fzailhañ a re e benn da Vertelod gant un taol damez)

BERTELOD Gwalleur din, Rous Frañs, setu me zo lazhet.
Dreizon e vezer krog da warzhañ maro Beauved !

PEVARE DIVIZ

(Foukez, Ganelon hag ar brifsed a zeu ar sal. Renod a re ul lamm a-dreñv
en ur c'hzigoneat e zent evel un den fulorst.)

GANELON D'an ezmod, mignoned, lazhet eo Bertelod,
Bremañ-souden amañ gant ar muntreer Renod.

RIPUZ Ret eo dimp war an taol kastizañ an traitour,
Ha setu e dri braer o tonet d'e sikour.

RENOD Klavit, Tadoù a Frañs, c'hwi eo an dreitourien.
Ha c'hoant hoc'h aus ivez da lezel ho kroc'hen ?
Ar re a zeu re dost, m'hen tou feiz a Renod,
P'o defa mil buhez, me 'doulo sac'h o yod !

FOUKEZ N'hor gourdrouzit ket re, kozh peder grougadenn,
Rak birviken ac'henn ne gasfet ho kroc'hen.

ALARD Nebaon, a-nebaodoù, Ganelon ha Foukez,
E vo ret deoc'h paeañ ker ho traitouriezh !

MOJIZ (war Voïerd)
Kalon, va c'hendirvi, erru on d'ho sikour !
(Renod a sailh war Voïerd, hag e tac'hont holl)

GANELON Emaint o vonet kuit, ar vuntreerien traitour !

PEMPVET DIVIZ

CHARLAMAGN, (a zegouez) :
Petra 'zo c'hoarvezet ma rit ur saurt fouge ?
Ha n'en deus den doujañ evit ti ar Rous ?

RICHARD A NORMANDI
Nebaon c'hwi pa glevfet a fougec ivez !
Setu lazhet ho niz Bertelod, va Rous.
Gant Renod hag e vredeur, hag int dija gwall bell.
Rak redek a reont ker prim hag an avel !

CHARLAMAGN, (da Emon, a zo o tont ar sal)
Petra eo kemant-mañ ? Lavarit din, Emon
Ha lodenn hoc'h aus-hu ivez an dreizon ?

EMON Petre 'zo c'hoarvezet ? N'ouzon ket, Aotronez !

GIGELON Ho mab Renod en deus lazhet niz ar Roue.

EMON Me 'asur da Zoue hag en deus va c'hroust
Ha deoc'h-hu kement-all, va Impalaer doujet,
N'em eus nag aliet nag entantet biskoazh
En devoa c'hoant Renod d'ober nep diotech !
Pa'z eo bet divergont anefi en ho palez,
Kastizit-efi garo hervez ho palontez !

CHARLAMAGN Me a dou dre ma septr ha dre va c'hurunenn,
E warzhin ker maro Bertelod d'ha mibien !
Rak-se bremañ, Emon, deoc'h e c'hourc'hemennin
En em deural raktal war bunnoù ho taoulin
Da douet din e tiberc'hennfot ho mibien
Diouzh pep madoù, pep gwir, pep lava da viken.
En em zisklaerit dezhe o gwashañ anebour
Hag e rentot anezha din 'val pevar dreitour.
Mar ne rit kement-se, e feiz a Roue frañs
Me zeuio da ziskergañ warnoc'h va c'houstiañs,
Rak me hoc'h harluc diouzh ar rouantelezh
E-tro pad ho puhez; a roy ho tukelezh
Da zarp a'r vignoned a zou d'am servijañ.
Rak-se soñjit, Emon, ha c'hwi sento bremañ.

EMON Lavarout a rit un dre a zo din gwall vazhus :
E va va bugale tud treitour ha lorc'hus !
N'eo ket sur dre va fact, n'en don ket evita !
(Daoulineñ a ra)

Hag o diaffzaven direk ho Majestez,
Hag o forbanisañ dimeus va holl vadoù,
Diberc'hennet da viken dimeus va holl ditloù.
Touet a ran cuzhpenn war levr an Aviel
En em ziskleerian dezhe un anebour marvel.
Birviken nep kartier digenanin n'o dezo.
P'o c'hevin, bev pe varv, deoc'h-hu, me o rento !

CHARLAMAGN A-walc'h eo evalse, Emon, va mignon kaezh,
M'ho tiaklaer didemall a bep treitouriezh.
It pe garot d'ez gêr da gacut ho pried,
Ha pe c'hourc'hemennin, diredit d'em c'havet.

DEK VET TAOLENN

(E Kastell Dordon)

(An dukez Emon hag he bugale)

RENOD Demet deoc'h, va mamm gaezh, evel mibien gwirion
'Omp deut d'ho saludiñ eus a greiz hor c'halon.

AN DUKEZ Ha chomet eo ho Tad c'hoazh e-barzh ar palez ?
Perak 'ta n'eo ket deut ganeoc'h-hu asambles ?

RICHARD Chomet eo c'hoazh hon Tad e palez ar Roue
Da ober un afer an glac'hazo goude.

AN DUKEZ Lavarit din, Renod, petra 'zo c'hoarvezet ?
Rak hervez a welan ez oc'h gwall gounnaret.

RENOD Diwar gounnar on deut, me 'ansav ouzhoc'h se,
Lazhet 'm eus Bertelod a zo niz d'ar Roue.
Aet a camp goude lein da c'hoari an damez
Mar d-so bet Bertelod ken zok ha diaviz
D'am envel "mab ar c'hagn" ha reiñ din ur palvad
Gant kement a fulor ken a teus ar gwed.
Met me am eus kalon ha ne ouezis biken
Gouzañv den divergont...me tigoris e benn !

AN DUKEZ M'ho ped d'am frealziñ, va C'hrouer banniget !
Pezh hoc'h eus graet, Renod, a gousto ker meurbet !

RICHARD N'omp ket e-sell, va mamm, da chom palloc'h e frañs,
El lec'h all ez aimp hag a kavimp hor chañs.
Met n'hor boa ket a c'hoant da vont kuit eus ar gêr
Hep kimiadif ouzhoc'h da gentañ, va mamm ger.
Kenavo, va mamm baour, gant kalz a galonad.
Grit hor gourc'hemennoù, mar plij ganeoc'h, d'hon Tad.

AN DUKEZ Dalit, va bugale, dalit acour hag arc'hant.
Hastir prim tennañ bro. Va c'halon baour a rann !

UNNEKVET TAOLENN

(daou vasoner, e-kichen ur roc'h bras)

KENTAÑ MASONER

Deomp 'ta, va mignon ker, bremañ da vasonat. Uhel bras eo an heol, hiziv omp diwezhat... A-brepoz, va mignon, dec'h da noz diwezhat Ez on bet spouronet ken e krane va gwad, Gwelout o tont e-maez eus Forest bras Arden Ul lod a varc'hegerien a bevar pe bemp den. Estre ma cant armet, a cant tud nerzhus bras. Spouron am boe zoken ouzh o sellout a-fas... Unan anezhe 'welan o tonet d'hor c'havet, Ar gallouduseñ den am eus biskozh gwalet !

RENOD

Demat deoc'h masonerien ! Mar teufen d'ho paeñ Hag e c'hellfec'h, mar plij, donet d'am servijañ ? Lavarout a rin deoc'h va c'hoant hep dale pell : War ar roc'h-mañ fell din va savet ur c'hastell Hag a va gwarniset e zacu rumm magorioù Paeet mat e viot hervez ho labourioù.

KENTAÑ MASONER

N'hon eus ket a nec'hamant gant ar gopr nag ar priz. Met, n'hallimp ket kregiñ ac'han da bevar miz.

RENOD

Petrs ? De bevar miz ? Klev 'ta, va c'hamarad, Me 'fall din e teufec'h rektal da labourat Me zoken labourat hag en deiz hag en noz. Pe vezo peurec'hraet holl ho lezin da repoz !

EIL MASONER

Enaomp o sevel ti da Varkiz an Detret. Ret eo dimp peurober pe vizeñ gwall-dretet.

RENOD

Ur markiz ? Me 'zo duk ! Hag ententit arvat, Pe ginnigen gopr deoc'h e rankit labourat Me na rit ket pelloc'h kement all e safar, Pe 'welin deoc'h ho kouzoug evel gouzoug ur yar.

EIL MASONER

Aiou ! Pardon, aotrou, ha n'hor gwallgasit ket. Ez eomp da labourat bremañ en ho reked.

RENOD

Grit buan ha buan, hag e c'hourc'hemenna Ma vezo graet er c'hastell war ar roc'h uhel-mañ. Dreist-holl eo ret ober kreñv bras er c'hastell-se, Rak stouzm en devo d'ober ouzh arme ar Roue.

KENTAÑ MASONER

N'ho pezit ket a nec'h, aotrou, deoc'h me 'asur E vo graet ho kastell hervez ho plijadur.

RENOD

Mat eo, masonerien. Kalon da labourat ! Setu aze bepred arc'hant ur voutailhad.

(Mont e ra kuit)

KENTAÑ MASONER

Biskoazh den ne lakaas e graban war va chouk A reje, m'hen tous, din kement all a zroug. Ha ma 'n deus graet an diaoul-mañ. Ma grad eo diframmet Ar c'hig hag ar c'hroc'han e-lec'h m'an deus stoket. Krogomp da labourat, ne dalv ket marc'hata. Kavet hon eus hor mestr, e-leal, ar wech-mañ.

EIL MASONER

N'ac'h eus nemet darbar, ha me savo 'r voger, Hag e raimp e gastall a-barzh nebut amzer. Labouromp start eta, evel tud e galon. Pa vezan troet mat, me zo par d'ul leon !

T R E D E L O D E N N

K A S T E L L R O C H E F O R T

KENTAÑ TAOLENN

KENTAÑ DIVIZ

EMON Demat deoc'h, va fried ! Glac'harat ho kavan.
Falc'h emañ hor mibien pa n'emañ ket emañ ?

AN DUKEZ Siwazh, ne ouzon ket e pe bro ez int set !
Met, lavarit penaos hoc'h eus-hu gouzaffvet
Hor mab hanañ Renod da lezh' niz ar Roue ?
Ker e vo gwerzhet se deoc'h ha d'hoc'h holl lignez !

EMON Penaos 'm eus gouzaffvet ? Tromplet bras oc'h war-se !
Me ned-on pelloc'h mestr, siwazh, d'am bugale !
Ha dreist-holl da Renod, a zo ken digabestr
Ne fell dezhañ doujañ da Aotrou na da Vestr !
Ma 'grede, va fried, e oamp meurbet eürus
Dre m'hon doa bugale savet mat ha doujus.
Hag hor bije resped digant an Impalaer
Abalamour dezhe, e pep lec'h hag amzer.
Hogen ar c'hontrol krenn, siwazh 'zo c'hoarvezet :
Hor bugale a zo divergont, diresped.
E-lec'h tennañ warnomp gresoù mat ar Roue
N'hon eus nemet rebech abalamour dezhe.
Charlez en deus graet din touet dezhañ al le
(Petra bannak ma 'm eus keuz bras da gemant-se),
Daoulineañ da douet e forbanisfen krenn
Diwar va holl vadoù va mibien da viken,
Hag en em zisklaerfen a bresañ anebour...
Ar pezh em eus touet, siwazh, hep nep rekour !

AN DUKEZ E petra e sonjec'h eta, va fried ker ?
Daoust ha c'hwi ho pefe un hevelap krizhder ?
'Vit plijout d'ar Roue hoc'h bet ken dinatur :
Denoc'h ho pugale, ho kwad, ho krouadur ?

EIL DIVIZ

HERNIER (Kennad ar Roue)

Salud deoc'h, duk Emon, ha deoc'h ivez, Dukez !
Me 'zo deut a Bariz davedoc'h a-espres,
Deut a-berzh ar Roue..Hag ho togamennan
Da zont bremañ raktal ganin betek annañ.

EMON Kredit e gwirionez, va mignon ker Hernier,
Emon o paouez degouzhout c'hoazh ez gêr
Goude bezañ distro a balez ar Roue !
Hogen, pe c'hourc'hemann, ez in-me adarre...
Kenavo an distro.

AN DUKEZ Kenavo, va fried
M'ho ped da zont d'ez gêr buanañ ma c'hallfet.

EIL TAOLENN

KENTAÑ DIVIZ

CHARLAMAGN Pehini ez forest e antreomp enni ?

IZAKAR Forest bras an Arden a reer anezhi.

CHARLAMAGN Mar d-eo envet homañ Forest vras an Arden,
Neuz eomp degouzhout tost d'hon anebourien.
Ne ve forzh pegan krefv so savet o c'hastell,
Ne greden e cufant stoum ouzhimp-ni gwall bell.
M'ho pad, ofiserien, c'hwi da gentañ, Emon,
Djar, ha c'hwi Richard, Salaün, Ganalon,
Da vonet tro-war-dro da ober ur bale
D'evessaat a bep tu ar c'hastell lorc'hus-se,
Evit gouzout pelec'h dizoleiñ un andred
E-lec'h ma vefe aes donet d'a gemerit.

(Pap hini anezhe a ya war e du)

EIL DIVIZ

EMON (Chomet e-unan)

Setu ma deut eta da vizitañ 'r c'hastell
'Zo bet savet amañ gant va fevar bugel.
Daoust ha me, va Doue, a vefe ken kriz-se
Da zont d'ober brezel enep va bugale !
Ra vezo milliget a' momed hag an eur
M'am eus o dianzavet dirak an Impalaer !

TREDE DIVIZ

RICHARD A NORMANDI (O tistreiñ diouzh un tu)

Ur roc'h bras da gentañ en deus da ziazez.
N'hellfed ket a vinañ, anat eo an dra-se.

SALAUN

Ha diwallet eo c'hoazh gant daou rumm mogerioù.
Ar stêr Meuz a servij dezhañ da zouvezioù.
Setu ul lec'h aze hag a zo kreñv meurbet,
Nemet dre naon hepken ne vefe kemeret.

FDUKEZ (O tistreiñ diouzh an tu all)

Ac'hanta, duk Emon, ha c'hwi 'c'h eus bizitet
Ervet er c'hastell-mañ, hag a oar ar sekred
Evit en distrujañ a-barzh nebeut amzer ?
Mar ouzoc'h-se, e viot mignon d'an Impalaer !

OJER (O klevout trouz)

En em dennomp ac'han, ne oufemp ober gwell.
Gwelet omp bet a greden gant tud eus ar c'hastell.
Ar porzh bras a glevan o tigeriñ bremañ.
Ret vo dimp en em gann, na dalv ket marc'hata !

PEVARE DIVIZ

RENDO

D'an armoù ! d'an armoù ! rektal marc'hegerien !
Rak ma e wel amañ darn hon anebourien !

RICHARD

Pennos, Ojer Donat, Richard a Normandi,
Enep dimp e tuit, ha c'hwi hor c'hendirvi ?

Evit gwelout Foukez hag ar c'hont Ganelon
O tonet enep dimp, ne gavan ket eston !
Enebourien int dimp, ha tud fall ha treitour.
Hogen a-rack an noz, ni 'roy dezha labour !

RICHARD A NORMANDI

Pegen c'hwezhet oc'h-hu gant ho kastell navez !
Nebaon ni a verray ho teodoù hep dale !
N'eus forzh pegen lorc'hus eo ho predeur, Renod,
Bremañ e vo gwezhet deoc'h maro Bertelod.
Lazhañ niz ar Roue p'edo en e balez !
Ha c'hwi ouije ober gwashoc'h fallagrizh ?

RENDO

Arsa eta, va zud, avel leoned gouez...
- O ! sed ivez va zad a welan en o zouez !
Pebezh tra dinatur ha spontus da welat !
Setu va zad ivez enep dimp deredet !
- Deomp ac'han, va breudeur, kablus e vo ur mab
A grogfe en armoù d'ober brezel d'e dad !

EMON

Chomit, chomit aze ! poltroned didalvez !
Mezh am eus d'hoc'h anzav evit va bugale !

RENDO

N'eo ket reizh deoc'h, va zad, hon enval poltroned
Abalamour ma'z omp re vat en hoc'h andrad.
C'hoazh ur wach ho pedomp gant ur wir gazantaz
D'hon lezel en repoz ha tec'hout aless.

EMON

Poltroned disnor ! N'hoc'h eus ket a galon !
C'hwi n'oc'h mat nemet da ober treizon.

RENDO

Klevit eta, va zad, e petra e soñjet ?
Daoust ha c'hwi ho pefe peurgallet ho spared ?
Hon danec'het hoc'h eus 'vit plijout d'er Roue...
A ! Pegen enoret oc'h-hu gant komant-se !
Ha deut oc'h d'ar vro-mañ da sikour distrujañ
Ar c'hastell hor bos graet evit en em lojañ.
- Ha n'ho pijs biskoazh klevet komz e Zous
Ne vijec'h ket ken kriz enep ho pugale !
Ne gavot ket amañ ul leon 'kreiz ar c'head
N'en defe karantez stav evit a wad !
C'hwi eo sur an hini a dlefe hon sikour
Hag ez oc'h koulakouda hon gwasañ anebour !

EMON (O skeiñ)

Ma 'dreuzfa da galon treuz-tre gant va c'hleze
Kent ma torrfen al le em eus graet d'ar Roue.

(An emgann. Tud ar Roue a gil)

FOUKEZ

Ac'hanta, Roue Frañs, palec'h oc'h-hu manet ?
Ma na douit d'hon sikour, ez omp holl diskaret.

PEMPVET DIVIZ

(Ar Roue a zeu tre gant ar peurrest eus e dud)

GRIFON

Disouloù inkarnet, me gred eo ar re-mañ.
Nemet skoazell a ve, omp kollet ar wech-mañ !

CHARLAMAGN

Peneos, va Baroned, skoarnet eo ho kalon
Ma rankit tec'hout kuit dirak vibien Emon ?
- Renod, me 'ro daoc'h urzh a-berzh va Majestez
Paouez gant an emgann, ha'n em denn aless !

RENOD

En em dennomp, va zud, pa gemenn ar Roue,
Hag e tiskouezimp dezhañ hon doujañs evelse !

RICHARD

Ne ran van a'r Roue nag eus ar Rouanez !
Ar c'hentañ a bakan, em bo sur e vuhez !

CHARLAMAGN

C'hoazh ur wech, p'ho pedan e feiz a Roue Frañs,
Renod hag e vreuzeur, it dimeus va frezañs.

RENOD

Arsev ! Fa fell d'ar Roue, a zo hon gwir Aotrou,
E lezfomp an dachenn, sentomp ouzh e urzhioù !

(Distruñ a reont d'ar c'hastell)

C'HNEC'HVET DIVIZ

NEM

O Roue galloudus, pegen glac'harus e
N'eo ket graet peoc'h Renod dirak ho Majestez !

CHARLAMAGN

Ret eo e gastizañ 'vit mero Bertelod.
Ha koulekoude bremañ eo plijet din Renod,
P'en deus war va goulenn lezet ganin ar plas.
E vreur Richard avat a dec'ho rak va fas :
Dre e gomzoù en deus anezet ac'hanon :
Ne brizfe ket kuitaat an dachenn evidon !
- Me garfe ez efe daou pe dri gannadour
Em ferzh betek Renod ha betek e vreuzeur
Da lavarout dezhe rentañ Richard din-me
Evit ober gantañ hervez va bolontez,
Hag o degemerin c'hoazh e va c'harantaz.

RICHARD A NORMANDI

Aotrou, me 'n em ginnig da gantañ da vonet
D'ober ar vevj-se hervez me c'houlennet.

NEM

Me e yelo ivez laouen, hep lakaat mar.
Me gred e ray Renod un darn eus hon lavar.

CHARLAMAGN

Degasit din respont kent eget me vo noz.
Ni chomo war ar bale bepred 'vit ho kortoz.

SEIZHVET DIVIZ

(Gant pep a vod gles en o dorn e taont da skeiñ war zor ar c'hastell)

KENTAÑ SKOUEDOUR

Daoust ha petra fell daoc'h, o skeiñ ken divargont ?
Mar bezit sheurtet, ne gavot ket ho kont !

NEM

Ni 'zo kannadourien a-berzh an Impalaer
Hag a fell dimp gwalc'hoat Renod hag e vreuzeur.

(Ar pevar mab Emon ha Majiz e ziskenn)

Salud, Marc'hegourien kalonek ha doujet.
A-berzh an Impalaer ez omp bet degaset
Da zonet ho pete evit lavaret daoc'h,
Mar kirit, ez eo prest da ober peoc'h ganeoc'h.

RENOD

A ! Va c'handezv Richard, na c'houlennan ken tre !
Lavaret din buan ar pezh a fell dezhañ !

RICHARD A NORMANDI

Mer kirit reiñ dezhañ Richard ho preur yaouank,
Dezhañ d'e gastizañ evel m'en devo c'hoant
E pardon ac'hanoc'h dre garantez parfet !
A-hend-all birviken n'ho pezo peoc'h ebat !

RENDO

Klevit eta, Richard, ha c'hwî, duk Nôm, ivez !
Ha n'ho poa ken mennad da zonet hor bete ?
Penevet, m'hen toue, ma 'z oc'h va c'hendirvi,
Me a rafe e bev donet d'ho tifzammif.
Lavarit d'ar Roue, daoust d'e holl c'hourdrouzoù
Ne ran forzh anezhañ mui 'get fank va botoù.

RICHARD A NORMANDI

Mont a ren, Aotronez, sigulik ha didrouz kaer
Evit kontañ penaos eo bet an digemer.

(Mont a ra an daou gannad kuit)

EIZHVET DIVIZ

RENDO

Dalc'het eo Charlemagn un nebeut en e benn
Mar kred dezhañ penaos e vemp-ni treitourien !
E teufe an eil breur da werzhañ egile ?
Nann, nann, ne c'hoarvezo birviken kement-se !
Arza, va breur Alard, c'hwî 'ranko eveshaat
Ma vo magor he foz fenozh diwallet mat.
Ennoc'h em eus fiziañs. Rak-se 'ta, me ho ped,
Ne lezit den e-barzh ken em bo actreest.

ALARD

Marz'hegour kelonek mar deus er Gristenezh,
C'hwî e zo dîmp un tad hag ur breur asembles.
Me a sento ouzhoc'h kerkulz ha ma ray den,
Nemet dre dreitouriszh e teufed d'am sourpren.

RENDO

Me ho ped, mignoned, deomp eta da repoz
Rak kastell Rochefort e zo diwallet kloz.

(Mont a zeont da gouket)

NAVET DIVIZ

NEM

Ya, Aotrou, ur respont hon eus ni resevet.
Ne viot ket laouen, avat, ouzh e glevet.
- Pa lavaris dezhe e komzoù fraez ha sklaer
Gant ar vresañ doujañs, petra oa an afer,
E krogas Renod kerkent da drouzal, da youc'hal,
Ma kredis e teuje d'am distrujañ raktal !
Skrignet a ree e zent, savet oa blev e benn,
Ma respontas dîmp-ni, dichek, e barr tarmen
Ne oa ket ur seurt den da werzhañ e vreudour
Evit kaout trevezz ganaoc'h, va Impalaer !

CHARLAMAGN

Pa zeuan da soñjal, e vennis kounnazi,
E ve pevar hailhon am zretfe 'vel ur c'hi !
- Arza, va Baroned, na petra zo d'ober ?
Biskoezh tra n'am poanias evel ur seurt afer !

SALAUN

Impalaer galloudek, ar soñj a zo em penn
Ne gemerimp dre narzh Rochefort birviken.
Mibien Emon, ouzhpenn ma 'z int bale'h ha doujet,
Emaint en ur c'hastell hag a zo kreñv meurbet.
Harvez me seblant din, n'heller ket e gemer.
Ha chom amañ pelloc'h, ve koll pean hag amzer.
Rak-se me ve ali da vonet war hor c'hiz
D'ober goañvadurezh adarre da Bariz;
Decugementiñ 'n arme; ha distrañ d'ar vro-mañ
Da vloaz, da lekaat Renod hag e dud da grenañ.

CHARLAMAGN

Penaos ? Tud evaldomp, kelonek ha dispont,
Ne zaujomp ket a-benn e lavar divergont ?
Ni hon eus gonezet niver bras e vroioù
Gant an disterañ brud hepken eus hon armoù,
Hag e ve ur c'hastell grest em rouantalazh
Hag a zalc'hfe penn din ? Fontañ ran gent ar vevh !

HERNIER

Aotrou, bet en anvet war ar Frañs gouarnet,
Bet em eus dindenoc'h, galloud e pep keñver.
Aotrou en Impalaer, c'hoazh em bafe ur c'hoant :
Diouzh un tregont lev dro, e mont un dukeluzh...
Ma 'rento daoc'h Renod dindan bon va buhez !

Me roio deoc'h alc'houez dor ar c'hastell nevez.
- Ne brometan netra na rafen, va Roue !

CHARLAMAGN

Mar gallit ober-se, m'ho kraio duk a Sañs,
Ar c'haerañ dukalezh a gement 'zo e Frañs !

HERNIER

Roit din tud leal, 'c'hellin fiziout enne,
Hag a reio ar pezh a gemennin dezhe :
Foukez a Vozilhon hag ar c'hont Ganelon
Grifon ha Galeran hag ar priñs Idalon.

CHARLAMAGN

It eta, aotronez, p'en deus fiziañs annoc'h,
Enep an dreitourien, hep daleiñ pelloc'h.

DEKVET DIVIZ

HERNIER

Aras, va mignoned, setu ni en ur poent
Ma zankomp implijout bremañ hon holl skient
Evit klask an doare a pe giz ha penaos
E c'hellimp dont a-benn eus an taol-mañ fenozh.

GRIFFON

Ni roio deoc'h skoazell kement ha ma c'heller.
N'hoc'h aus nemet lârou ar pezh a zo d'ober.

HERNIER

Mat a vo deoc'h kuzhat fenozh er c'hoadig-mañ.
Met en em dalc'hit prest. Dreist pep tra ho pedan
Pa zeuin d'ho kavout, da vezañ hall armet
Ha d'am heulieñ rektal, goustadik ha sekret.
Me 'zo 'vont d'ar c'hastell evit goulenn lojañ :
Me fell din mont fenozh gant Renod da goaniañ.

GANELON

Mar kavit an tu dimp da vont tost d'ar c'hastell
E vezimp mistr warnañ neuze hep dale pell.
Ha mar ne c'hellomp ket dra ennomp hon-unan
Distrujañ Rochefort, e lakeimp an tan
E decu pe dri andred a-raok donet a-maez,
Me vo ret d'ar brini diflukañ eus o neizh !

HERNIER

Me 'ya eta em zzo. Rak-se, va mignoned,
En em dalc'hit e stad pa zeuin d'ho kavet.

UNNEKVET DIVIZ

ALARD

Piv a sko evelse d'ar c'houlz-mañ eus an noz ?
An nep 'zo tud onest zo poent dezhe repoz !

HERNIER

Me 'zo ur marc'hegour a dud an Impalaer,
Ha dre ma 'm eus meulet Renod hag e vredeur
Emaint holl war va lerc'h. Mar gallont em fekañ
Ne vo ken evidon 'met ar maro kriseñ.
Rak-se 'ta ho pedan, Aotrou kaezh, dre drez,
Da reiñ din er goudor da ziwall va buhez !

ALARD

Me 'ya davet Renod, a zo va breur henañ.
Ne antre den amañ hep aotre digantañ.

DADUZEKVET DIVIZ

RENOD (Diskenn a ra gant a dud)

Ac'hanta, va mignon, petra 'zo a-nevez
Mar d-oc'h ken diwezhat fenozh war ar bale ?

HERNIER

Ata, Aotrou Renod, setu amañ penaos :
Edomp holl o kozniañ un nebeut kent serr-noz,
Pa 'n em lakeas darn a dud an Impalaer
Da zrouk-komz ac'hanoc'h, hag ivez ho proudeur,
Da gontañ ho poe lazhet Bertelod er palez,
E oac'h 'n em silet kuit dre un taol sorserezh.
Neuze 'm aus disklaeriet, me, dirak ar Roue
Ha dirak ar Brifsaed, e oa gaou kement-se,
E oac'h kalonekañ marc'hegerien biskoezh
O devoe gant o zresid moustret war ar yeot glas.
E oac'h-hu tud leal, tud eun ha tud onest,
Ha ne glaskit netra nemet ar wirionez.
Ha ma voe dre wall-chañs bet lazhet Bertelod
Da kiriek e-unan o c'hoari e wall-baotr.
An Impalaer Charlez neuze a fuloras;
E dañjer va buhez 'm aus tec'het rak e fess...
Mar teuit d'am repuiñ fenozh en ho kastall
E vezin 'n ho servij leal betek mervel.

RENOD

Kalz trugarez, Aotrou, am eus da gaout deoc'h
Mar d-ao gwir kement tra a glevan diganeoc'h.

- Deomp er c'hastell, va breudeur; ret e vo dimp fenozh
Evañ pep a vanne kent monet da renoz,
D'enorifi en hon touez an den kalonek-mañ
'Zo abalamour dimp en em lakaet e poan.

ALARD

Azezit ouzh an daol, Aotronez, me ho ped,
Hag em boa an enor da servijañ ar pred.

(Holl e azezont, nemetañ)

RENOD

Yec'hed mat deoc'h, Aotrou. Penaos oc'h-hu anvet ?

HERNIER

Beno a-vihanik on bet atav galvet.

RICHARD

Ar Roue Charlamagn, hervez e lavared,
Hag e holl Varoned, 'zo klañv gant an desped.

HERNIER

Gwir eo sur, Aotronez, droug 'zo en o c'halon
Pa n'hellont dont a-benn a vugale Emon.

GICHARD

Ne dalvfe ket hen nac'h : ruziañ 'ran gant ar vezh
Pa soñjan e drougiezh an Impalaer Charlez
A zo deut eus Pariz gant un arme bounner,
Evit trec'hiñ hepken war bevar varc'heger !

HERNIER

Yec'hed mat deoc'h, Mojiz. Klevet em eus pell 'zo
E c'houzoc'h, pa vez ret, c'hoari brav meur a dro ?

MOJIZ


Evit lavarout gwir, me oar va B.A. BA.
Gouzout a ran zoken va : Domine, labia...
Me raio d'ar Roue, drouk pe vat d'e galon,
Ober ur peoc'h padus gant bugale Emon.
Hogen ne garan ket dont da c'hoari nep tro
Nemet bez' e vefemp e dañjer a varo.

GICHARD

Renod, poent bras eo dimp, bremañ p'hon eus koaniet
Gwelout piv a vezo lakaet da ober ged,
Ma'z aimp da renoz, rak noz du eo dija.
Me gred e vefemp holl laouen da ziskuizhañ.

RENOD

Va mignon ker Delenn, c'hwi chomo war evezh.
Na list den da antren, dreist-holl da vont er maez.



Hernier a dec'z er c'hoad goude bezan lazhet ar gedour

Arsa, va mignoned, deomp bremañ da gousket,
Kemerit ho repoz hag en em ziskuizhit.

(Sonerezh)

T R E D E T A O L E N N

K E N T A Ñ D I V I Z

HERNIER Bremañ p'emañ kousket an holl dud er c'hastell,
Me a ya goustadik betek ar sentinell
Da bediñ anezhañ da ober digor din.
Ha mar nac'h hen ober, feiz avat, en mougín !

AR GEDOUR Piv eo ? Piv 'zo aze d'ar c'houlz-mañ o kerzhet
Hep goulou na letern ? Komzit fraez mar keret
Pe me gant va c'hleze a roi deoc'h ur flipad,
Hag ho po diwarnañ labour d'en em lipat !

HERNIER Ur boan-gof ar gwashañ 'zeu d'am merzheriañ.
Digorit din an nor, din da vont da blegañ.

AR GEDOUR Plegit 'barzh ar c'hastell kement ha ma kerfet !
Met evit mont e-maez avat ne reot ket !

HERNIER (a denn e gleze hag a dosta)

Moarvat e kredez-te, n'eo ket ta, kozh hailhon,
N'em eus netra d'ober nemet selaou da son ?

(Troc'hiñ a ra dezhañ e benn)

Pa'm eus troc'het e benn ha taolet en douvez
Bremañ, pa fello din, e c'hallin mont e-maez.

(Kemer a ra an alc'houez, ha digeriñ an nor)

Peogwir emañ ganin alc'houez kastell Renod,
E rin dezhañ embêrr ober un dañs d'an drot !

(Mont a ra d'ar c'hoad)

EIL DIVIZ

HERNIER Ha preet eo pep hini ac'hanoc'h-holl, va zud,
Da antren er c'hastell hep ober nep tamm brud ?
Lazhet eo ar gedour; an alc'houez 'zo ganin.

GRIFON Kroget mat oc'h ganti ! dimp eo da echuiñ.

HERNIER Selaouit, sotronez : ez-eeun da gambr Renod,
A zo en dourell vras. Ha ne vezomp ket sot
Da vankout d'en eren, kerkoulz hag e vreudeur,
Evit o c'hes warc'hoazh dirak an Impalaer.
Diwallit ! an dourell emañ ivez Mojiz.
Mar klev hennezh an trouz, e vo tomm ar c'hoazi !

TREDE DIVIZ

MOJIZ Renod ! Gichard ! Alard ! Richard ! va c'hendirvi !
Dinden boan a varo, eo poent deoc'h dihuniñ !
Kemerit hoc'h armoù. Deut buan ganin-me.
Setu leun ar c'hastell gant pectred ar Roue.

RICHARD Diskennomp prim d'an traoñ, ha bec'h d'an enebour !
Kent ma sevo an doiz, o da kavet labour.

RENOD Treitourien displeal ! ne d-omp ket c'hoazh lazhet !
N'eo ket c'hwi zo kiriek avat, tud milliget !

GALERAN En em dennomp ac'han, a-hend-all omp maro.
Me 'z a da gerzhout kuit, deuet neb a gero !

(Tud ar Roue a dec'h, nemet Grifon hag Hernier)

RICHARD Buenañ ma c'hallot, tud vil ha treitourien...
Skarzhañ a reot sur, pe lazal ho kroc'hen !

RENOD Alard, serrit ar porzh rektal war ar re-se.
Pa'z int chomet a-barzh, a kollint o buhez.

RICHARD Peze a zo chomet, lavarit din, va breur ?

ALARD An daou draitour brasañ : Grifon, neuze Hernier.

MOJIZ Ouzh ar re 'zo chomet, ne vo ket greet a c'hoap :
Roet e vo dezhe pep a golier kanab.

PEVARE DIVIZ

RENOD A ! Diaoul eus an infern ! evel Judaz, Hernier,
O koaniñ ouzh va zaol e treitouriezh neizheur !
Goude m'out repuat ganin ha va breudeur,
Out displeal a-walc'h evit kleak hor gwalleur !
Ha greet ac'h eus-te se ac'hanout da-unan ?
Diskarg da goustiañs, mab henañ da Satan !

HERNIER Va-unan on kablus, n'em eus den da damall.

GRIFON Me ne on deut nemet dre aliou re'all.

MOJIZ (Da C'hrifon)

C'hwi eo an den fallek en deus lazhet va zad.
M'ho paeo bremañ gont kanab, va den mat !

PEVARE TAOLENN

KENTAN DIVIZ

CHARLAMAGN Gwelout 'ron o tistreiñ Ganelon ha Foukez
Ha kalz a re a oa en o c'hompagnuezh.
Pelec'h 'te eo chomet ha Grifon hag Hernier ?

IOELON Me 'gred emaint-hi bremañ o trivilhat en aer
Rek Grifon hag Hernier zo manet er c'hastell
Ha mil chafe o devo ma ne rankont mervel.

OJER A ! Grifon ouzh ar groug ! ER a lazhas Beuved,
Dre urzh Mojiz moarvat e vo bremañ krouget.

- Arsa, duk a Emon, bats 'n eur a vremañ
N'em aus loc'h d'ho tamall, ha kentoc'h ho meulañ,
Kemerit daou rejimant, me ho pad, duk Emon,
Eus va marc'hegerien, a zo tud a galon,
Evit monet d'er gêr da ober ur bale.
Marteze e kavot dre c'haffa ho pugale.
Mar gallit o fakañ, rentit din anezhe
Ha me hoc'h enoro e tro-pad va buhez.

EMON Impalaer Charlemagn, peogwir em aus graet le,
E rin c'hozh va gwellañ da heuilh ho palontez.

CHARLAMAGN Ni a ya da Baris d'ho kortoz, war hon pouez.
Kenevo, Aotronez, kenevo er salez.

PEVARE DIVIZ

HENDRI Arsa eta, Emon, n'hon aus nemet sañjal
Pe ni a glasko tro, pe ni 'yelo raktal
Etrezek ha Dordon da glask ho pugale.
Un den kriz a galon eo avat er Roue
O reiñ urzh da un tad tagañ e groundur.
Kement-se a gaven difeiz ha dinatur.
Met, siwezh, er brezel ne vez doujañs abet
Evit na tad, na mamm, kerent na mignoned.

PEMPVET TAOLENN

KENTAR DIVIZ

RENDO Ma 'wel a-hont ur feunteun heg a zo sklaer ha dour,
A bep tu war he zro ledet ur yeotenn flour.
Amañ eus ar plas brez neurbet da ziskuilhoñ.
Buzomp hall dinac'h kour pe'z omp erzu oañ.

RICHARD Evomp pap a venne eus dour ar feunteun-mañ
Da yec'hed Charlemagn, hon unanour breañ.

GICHARD Dizezomp, Aotronez, ha kuzezomp reoz.
E-tal ar feunteun-mañ e vuziep brez fenezh !

(Gourvez a zeont war an dour heg a venont kousket)

EIL DIVIZ

EMON (A zistro ouzh e dud hag a lavar)

O pebezh souezhadenn ! Piv e gavan, siwazh !
Va bugale 'welan kousket war ar geot glas.
...Bez' e vefe mazhus ha rebechus meurbet
Donet da vrezeliñ ouzh tud 'zo dizarmet.
Lavarit eta din, Aotronez, ha me die
Donet d'ober brezel bremañ d'am bugale ?

RICHARD A NORMANDI

Lezomp-i da ziskuih; ne oufemp ober gwell.
Paogwir ez eo dija pulluc'het o c'hastell,
Ne dalvfa ket han nac'h, truez am eus outa.
Ma 'garfa 'vefe graet o feoc'h gant ar Roue.

IOELON

A-walc'h a lavarit, Richard e Normandi :
Moarvat ne soñjit ket penaos amañ 'r c'hoari !
Tout en deus Emon war levr an Aviel
Bezaff d's vugale un enebour marvel.
Ha p'en deus graet al le, e ranko delc'her mat
Dinden boan da vezañ displeal ha gaouiat.

EMON

Ma a garfa gwelloc'h koll enor ha danvez
Eget bezañ kavet amañ va bugale.

QJER

N'eo ket ret deoc'h, Emon, lavarout d'ar Roue
Hoc'h eus a-hed an hent kavet ho pugale.

EMON

Nann, biken em buhez ne rin traitouriezh !
Kent e c'houzañvin koll, ha dizenor, ha mezh !
Rak-se 'ta, Henoxi, evel va marc'heger,
Lavarit da Renod, e komzoù freez ha eklaer,
Hag ivez d'e vreudeur, on deut d'o disfiziañ.
Mar o deus tamm kalon, dont da ziskouez bremañ.

HENORI

Ur c'helou glac'hazus meurbet da zegemenn !
Mont a ran koulskoude, pa'z eo ho kourc'hemenn.

(Mont a ra davet Renod)

TREDE DIVIZ

HENORI

A ! Renod kalonak, meurbet oc'h diskuizhet !
E berr amzer avat e viot dihunet.

(Dihuniñ a ra Renod)

Deut on a-berzh ho tad evit ho tisfiziañ.
En em lekait eta e stad da stoum outañ.

RENOD

Lavarit, marc'heger, mar plij geneoc'h, d'am zad,
Mar n'en deus ket a c'hoant da ober dimp nep vad,
Na reiñ ket e zroug ivez da vihanañ !
Biskoazh ne wellis tad a va kriz eveltañ.

HENORI

Digarezit, Renod, kement ha ma karfet,
Bremañ souden avat e viot arseilhet.

(Distreiñ a ra davet Emon)

PEVARE DIVIZ

HENORI

Graet em eus va beaj, Aotrou an duk Emon,
Ne vo ket arseilhet ho mibien ez-poltron.

RENOD (O tihuniñ e vreudeur)

D'an armoù, mignoned !

RICHARD

Piv 'zo erru, va breur ?

RENOD

Hon enebour : hon tad ! Gant tud an Impalaer.

GICHARD

Nebaon, ne spontomp ket dirak tud ar Roue !

MOJIZ

Pa grogimp da c'houeziñ, e vo tomm d'ê ivez !

EMON

Deomp holl d'en em gannañ evit ar Roue Frañs.
Pa 'm eus kavet amañ va bugale dre chafia.
- A ! Tud fall, laouidik, didalvez, hep kalon !
C'hoant hoc'h eus-hu d'ober ar vicher e laeron
Ma kouskit en hentoù evel-se a vagad ?

RENOD
Ma rankomp-ni kousket en hentoù hag er c'hoed
Eo krizder ho kalon e zo kirieg, va zad !
Setu ni keset kuit ganaoc'h eus kêr ha bro,
Ha lakaet en ten waznomp a dro war dro.
Bremañ eo ret mat dimp evel anevaled
Pe vervel gant an neon, pe vont da glask hor boued !
(Emon, mantret gant ar glac'har, a zistro da ouelañ)

SALAUN A VREIZH
Ha c'hwil e soñj, Renod, gant hoc'h holl sazmonioù,
Ne rankot ket gouzav nerzh ponner hon armoù ?

GICHARD
Salaun, m'hen tou deoc'h, hep bezañ ur gaouiad,
N'oc'h ket a vont da gout hor buhez marc'had-mat !

GALERAN
Arse, dir en aval, me ho ped, Aotronez !
Warc'hoazh gant pep a uhal 'vint kaset d'ar Roue !


RENOD (D welout e dad dirzañ)
O va Doue, va zad ! O, pellait diouzhon !
Pa ho kwelan amañ e ra poan d'am c'halon.
Lezit d'en em gannañ tud ar Roue ha ni.
An neb a vo 'r c'hrefvañ 'c'hounezzo ar barti.

EMON
Arse, va mignonad, mar d-eus hini em c'har,
Lakaet e enebour pep hini d'an douar !
Me er c'hentañ 'grog bihanaet ar vandenn.
Setu er c'hont Samson ledet war an dachenn.

RENOD
Tad dinetur ! Nemet pec'hiañ enep Doue
Me 'rafa ivez deoc'h kement all hep dale !
Evidoc'h, mar gellan, n'ho pezo droug ebet,
Met me a savo darn a-douez ho mignonad.

ALARD (D welout eo lazhet e holl dud)
O va breur keezh Renod, ret e vo dimp tec'hiañ !
Ar wech-mañ, am eus son, e vo start er c'heari !

GALERAN
Setu ar ganfarded lazhet holl nemet pemp !
Mar tiflip ar re-se, e vo ur vezh bras demp !



Ar pevar mab Emon a dech war gein Hoïard

RENOD

Graimp, gant gras Doue, en desped d'ho paro !
Arsa va mignoned, tec'homp pe omp maro.

(Mont a reont o-fevar war gein Boïard)

PEMPVET DIVIZ

GALERAN

Setu tec'het Mojiz, Renod, hag e vreudeur.
Redomp holl war o lerc'h da gas d'an Impalaer.

SALAUN

O lezomp en o feoc'h bremañ pa'z int trec'het.
Droug a-walc'h evel-se o deus-i resevet.

EMON

Homañ ar galonad, an drubuilh, va Doue !
E ve ret da un tad tagañ e vugale !
Me, ar gwalleürusañ a gement zo er bed,
Me 'garfe vefen marv ha pell 'zo er vered.
Siwazh, va bugale, petra 'rect bremañ ?
Setu c'hwi rentet paour, dibourvez a bep tra.

RICHARD A NORMANDI

Trugarekait Doue, Emon, a galon vat :
Ar blanedenn 'zo bet c'hoazh evidoc'h-hu mat
Paogwir n'hon eys lezhet nikun 'ho pugale,
Hep e'ho pe da gaout tamall 'gant ar Roue.

EMON

Ne c'hellan ket mirout a ouelañ kalz dezoù
Pa welan an dachenn leun a gorfoù maro.
Hag ar yaot gant ar gwad 'zo ruziet tro-war-dro.
Krogit, na me ho ped, er c'horfoù maro-se,
Me a roio arc'hant evit pediñ gante,
Ha pe vint interes ha greet gante ofis
E hastimp buan mont etrezek ha Pariz.

(Mont a reont e-maez)

C' H W E C' H V E T T A O L E N N

(E Palez Charlamagn)

K E N T A Ñ D I V I Z

CHARLAMAGN Me a garfe gouzout hag an duk a Emon
'n deus klasket e vibien e-leal ha gwirion...

NEM Aotrou, setu Emon hag e varc'hegerien,
Ne welan ket e ve gante prizonierien.

CHARLAMAGN Petra hoc'h eus-hu graet ? Lavarit, va zud ker.

EMON Krishnañ tra er bed-mañ a ouijed da ober.

CHARLAMAGN Lavarit din buan petra hoc'h eus-hu graet ?
Ha keuz hoc'h eus dije, an doare ma komzet ?

EMON P'edomp evit monet e Forest bras Arden
E kavjomp-ni Renod hag e varc'hegerien.
Hag i rentet ken skuizh ma oant manet kousket
E-kichen ur feunteun, dinerzh ha dizarmet.
Ni o seilhañ warne evel chas kounnaret.
En esper hep emgann donet d'o c'hemeret.
Ma krogas a bep tu al lazhadeg neuze...
...N'ez eus chomet den bev a dud va bugale
Nemete ha Mojiz, hag a zo diflipet...
Bizviken ne c'helljomp donet d'o c'hemeret.

CHARLAMAGN Da un all, duk Emon, eo deoc'h kontañ fabloù !
Manifik e ouzoc'h ober almanagoù !
Holl dud ho pugale, emezoc'h, zo lazhet
Ha ne c'helljoc'h-hu ket donet d'o c'hemeret ?
- Ma vijec'h bet leal, ya, kozh afontar kozh !
E vijent bet prizoniat am bastilhon fenczh !

EMON Ha c'hwí a c'hell souten ar pezh a leveret :
Em ba va bugale e nep tra espermet ?

Mar d-eus unan hepken a'r re a oa eno
A lavar eveldeoc'h, 'mañ ar gaou 'n e c'hencu !
- Nann, ne dalv ket, Aotrou, flatal deoc'h ar c'hartoù !
Mui a skouarn a roit da galz a wall-deodoù,
D'ul lod kalonoù-gwak a zo an ho palaz
Eget d'an neb o deus bet risklet alies
O c'horf hag o madoù evit ho servijañ;
M'hen lavar deoc'h gwirion, hep aon ouzh a netra !
Hag un dra bennak all a lavarin ouzhpenn :
Me 'm eus bet harluet eus va zi va mibien
Ha graet va seizh gwellañ evit o c'hemeret,
Ha c'hozh a lavarit em eus-int espermet !
Diwar-vremañ a rin ma vo gwir ho komzoù,
Re ball 'on bet rebech ha mezñ an holl dodoù !

(Mont a re kuit)

CHARLAMAGN Em eus aon, eo feuket an duk kozh a Emon !

DJER Ma 'grad ivez, Aotrou, ne d-so hep rñzon.

CHARLAMAGN Moervat ne chomo ket Emon pell a kounner...
Distroomp d'ar palez, me ho ped, va zud ker,
Deoc'h d'ober un diskuizh, ha da glask un itrik
Da c'hallout kastizeñ ar pevar laouidig !

S E I Z H V E T T A O L E N N

K E N T A Ñ D I V I Z

RENOD Seleouit, va braudeur, ha c'hwí Mojiz ivez !
Setu ni, hag a zo tud a uhel lignez,
Hag eo ret dimp bremañ bevañ e-kreiz ur c'hoad,
Evel al loened gouez, gant aon dimeus hon tad.
Hon tad en deus madoù bres ha pinvidigezh
Ha ni 'zo deiz ha noz o c'houzaff dianez.
Setu ken du ha glacu hor c'hig hag hor c'hroc'hen
Gant narzh an heol bera, ha gant ar yenien.
Breinet hon holl dilhad, murglet hon holl armoù,
Hag evel loened gouez, leun a vlev hor c'horfoù.
En ur ger, n'hon eus mui na stumm na doare tud;
Deut omp da vazañ hefvel kentoc'h ouzh loened mut.

ALARD Re bell omp chomet emañ en naon hag en anken,
Dinerzhed, mil boan dimp o tont d'en em souten.
Ne greden ket ve den a garfe dimp nep vad
Nemet hor mammig beour, honnezh a zo mamm vat.

RENOD Deomp 'ta betek hor mamm, me ho pad, va breudeur.
Me a gred he devo truez ouzh hor gwalleur.
Krizh e ve he c'halon, sur mat, me ne ouelfe
'welout ar stad emañ lakaet he bugale !

MOJIZ Mar d-it betek ho mamm bremañ, va c'hendirvi,
Me a yelo ivez da gavout va hini.
Hag a ray pourvezefs du-hont a dud armet;
Rak 'vit sour hag arc'hant din-me ne vanko ket.

E I Z H V E T T A O L E N N

K E N T A Ñ D I V I Z

EMON Demet, va fried keazh ! Erru 'on c'hoazh er gêr !

AN DUKEZ C'hoant bras am boa a so, pell a zo a amzar !
Lavarit din keloù diwar-benn hoc'h arme ?
He gwalet hoc'h eus bet ivez hor bugale ?

EMON Ya, o gwalet am eus meur a wech, va Itron.
Hogen re allie, siwazh gant va c'halon !
Pa oan est da Bariz, e leras ar Roue
E renkjen brezeliñ enep va bugale.
Etre stêr don ar Meuz ha forest bras Arden
O devoe bet savet ur c'hastell vammibian.
Pa n'hallemp o c'humer, tud kriz ha digalon
Azevas ar c'hastell dre un taol treizon.
Neuze hor bugale hag o c'henderv Mojiz
A rankas dont e-mez 'vit an em repuñ.
Va flanedenn zo bet ken kriz ha ken ponner,
'n em gavis a-benn dezhe pa oan o tont d'ar gêr.
Ranod hag e vzeudeur hag o c'henderv Mojiz
O deus kevot an tu d'en em savetañ.
Met a-hand-all, siwazh, er peurrest eus o zud
Zo laghet war an doheren aval el loarned mat.

Neuze 'is da Bariz, da lâroud d'ar Roue
Em boa-me eval-se tristet va bugale.
- E-lec'h anaoudegezh en deus din rebechet
Em boa va bugale a-espres espernet !

AN DUKEZ Ra vezo benniget ar momec hag an eur
Ma hoc'h eus bet tamall digant an Impalaer !
Mar kerje ho pezañ bet lakaet er prison,
Neuze, me hoc'h asur, e tridje va c'halon !
Lavarit din, tad krizh ha pried ken digar,
Pe c'hwî 'zo hugunod, pe c'hwî a zo barbar ?
Rak n'hellan ket krediñ e vefec'h ur c'hristen
Pa 'z oc'h ken didruez ouzh ho krouadurien !

EMON (Mantret gant ar brasañ glac'har)

Perak n'on-me lonket e kalon an douar
Peogwir n'eus ken evidon a bep tu 'met glac'har ?
N'em eus nemet tamall bet a-berzh ar Roue,
Ha muioc'h c'hoazh 'm eus bet a-berzh va bugale.
Ouzhpenn-se, va fried, e-lec'h va frealziñ
A lak' ac'hanon c'hoazh da beurfallgaloniñ.

AN DUKEZ Deut d'ar gêr, deut en ti, va fried, me ho pad !

EMON Gant ho komzoù ken krizh on-me dizeaperet !

E I L D I V I Z

RENOD Setu ni degouezhet bremañ tost da Zordon.
Ne dalvfe ket hen nac'h, glac'har 'zo am c'halon
Pa zeuan da soñjal er peoc'h hag ar repoz
O deus tud ar vro-mañ hag en deiz hag an noz.
Ni hon pevar avat, bugale d'an Aotrou,
'zo ret dimp chom kuzhet e-kreiz ar forestoù...
...Gwelout 'ran ti va zed, ar paler pinvidik
Dap bet ganet ennañ pa camp-ni bihanik
Ha koantik ha munut, ha karet gant an hall.
He bremañ omp harluet 'vel bugale diroll !

GICHARD Deomp an anv Doue hag ar Werc'hez Vari
Da c'houzout petra 'zo a-nevez en hon ti !

TREDE DIVIZ

AN DUKEZ

Ne greden ket e ve merc'h o tougen buhez
He deus lec'h da ouelañ asur kement ha ma !
Me em boa pevar mab kalonek ha doujet
Keezañ marc'hegourien a quijed da walet.
O flanedenn, siwazh, a zo bet ken pounner
Ma'z int bet gant o zad harluet eus ar gêr !

(An Dukez d'he bugale hep o anavezout :)

O Doue, va zud paour, petore tud oc'h-hu
Pa ho kwelan ken treut, ken distumm ha ken du ?
Pe c'hwi 'zo divadez, pe c'hwi 'zo kristenien ?
Me 'gred hoc'h eus ezhomm un tammig aluzen...
Mar d-oc'h tud ezhommek, o ! lavarit din-me
Ha me ho sikouro 'balemour da Zoue,
Evit ma kemero truez ouzh va mibien
Ha ma vint diw allet ouzh o enebourien.
Me 'garfa o gwalc'out e-lec'h an dud kaezh-mañ
Ha pa goustfe din-me holl vadoù ar bed-mañ !

(Renod en em strink da zapulin e vamm.

An Dukez, oc'h anavezout he mibien, a lez ur
youc'hadenn.)

O Renod, me hoc'h anav bremañ evit va mab
Diouzh ar gleizenn vihan 'zo e-tal ho lagad !
Aotrou Doue ! va mab, pelec'h amañ kened
Ha koentiz ho pizach, bremañ ken distummet !
C'hwi oc ur c'hroueduz ken koant ha ken dinamm
A gement voe ar bed biskoazh ganet gant mamm !
- En ho kichen 'welan ivez va zri mab all.
Va gwad gant an drouez a santen o fifval.
Meulet ze vo Doue hag ar Werc'hez Vari !
Me ya da boket dezha a hini da hini.

(Poket a ze dezhe)

ALARD

Mamm, abaoe ma weljomp oc'hanoc'h diwezhañ
Hon eus bet gouzañvat kalz poen betek vremañ.

AN DUKEZ

Ne petre zo kiriek ma'z eo ken kriz ho stad ?

RENOD

A-hed an hent, siwazh, hon eus kavet hon tad !

Lazhet en deus hon tud, ha n'eus manet hini...
Kement-all, ma c'hellje, en dije graet dimp-ni...
- Ma omp bet pell amzer o vevañ ar c'hoadoù
Hep debrifñ bruzunenn nemet gwizioù louzob.
O bremañ, va mamm baour, ho pst ouzhomp truez !
Roit dimp peadra da souten hor buhez !

AN DUKEZ

Azezit 'ta ouzh taol, va fevar grouadur,
Ha debrif hag evit hervez ho plijadur !

PEVARE DIVIZ

EMON

Lavarit din, Itron, peseurt tud ar re-se ?

AN DUKEZ

Ato, va bugale, va friad, hag ho ze !
O gouzañvit un novezh, mar plij, e ti o zad !
Warc'hozh ez sint kuit adarre, mintin mat !

EMON

Lonkerien dirankon ! hervez ma han gwelan,
Eo an ezhomm en deus ho tagaset amañ !
Pa'z oc'h kouezhet bremañ ar baourteoz vrasañ
N'eus gwir ano 'vidoc'h 'met "klaskerien bara".

RENOD

Mar kerjec'h hol lezel ar c'hastell hor boa graet
Ne vijemp ket deuet amañ da gleak hor boued.
Dieplijout a ze deoc'h hor gwalc'out en ho ti ?
C'h'hants, p'hoc'h eus ouzump kement a gasoni
Troc'hit dimp hor pennoù da gas d'an Impalaer
Hag e viot mignon dezhañ e-zack nemeur !

ALARD

Prometif a reomp, va breudeur 'koulz ha me
Ez aimp gant hon hent warc'hozh diouzh ar beure.

EMON

Pa'm eus ho tianzavet kreenn direk ar Roue
Siken, kozh laouerien, n'ho po tre 'ganin-me.

RENOD

Kenavo da vikan ! Va zad, ne soñjen ket
E vijec'h bet ken kriz ha digar 'n hon andred !
Dre 'hon eus keatizet muntrer Sauved, ho preur,
N'hoc'h eus c'hoant all ebet nemet klask hor gwalleur.
Ni ne gleakemp nemet quir eber hol lignez...

- Hogen mar d-ao zet dimp mervel e paourentez
Eomp e-maez, va breudeur, somp da dal ar porzh,
Hag eno gant an naon, 'teuimp da grial forzh
War un tad dinetur, ur meval d'ar Roue,
Hag a lez gant an naon mervel e vugale.

EMDN
O pegen glec'haret, va Doue, 'n em gavan
Pa n'hellan bevañ sioul gant ar re a garan !
- Na garfen ket hen nac'h. Ya, gwir eo, va mibien,
Biskoazh war an douar ne voe marc'hegerien
Ken kalonek ha c'hwi. Siwazh ! Pebezh truez !
Ar gwir e zo geneoc'h hag ar geou ganin-me
Pa ho tianzevis kreñn dirak ar Roue.
- Setu : evit mirout na vefan temallet
A nep tu na gant den, me 'zo deoc'h va fried,
An urzh, ar gourc'hemenn, ma rofet d'am mibien
Kalz a aour hag arc'hant a-hervez o goulenn.
Me 'm eus o harlust, c'hwi avat n'hoc'h eus ket !
Rek-ee, roit dezhe kement ha ma korfet !

RICHARD
Setu bremañ e komzit, va zad, gant madelez.
Ni ho trugareks, hor pevar asambles.

EMDN
Kensavo deoc'h, Renod, ha d'ho preudeur ivez.
Me 'garfe vefe graet ho peoc'h gant ar Roue !

AN DUKEZ
Deuit ganin, va mibien, ha me ho kwisko keez,
Deoc'h de vont gant enor war ar maez hag e kêr.
Deuit, va bugale, devat arc'hant hag aour.
Bugale un duks, moezvet, ne vint ket paour !

P E V A R E L O O E N N

M O N T A L B A N I

D I M E Z I R E N O D H A R E D A D E G A R G U R U N E N N

KENTAÑ TAOLENN

(E Kêr Bourdel)

KENTAÑ DIVIZ

(Ar Roue Ion hag e lez)

ION

Me eo ar Roue Ion, e Gwaskogn souveren.
Pinvidik eo va bro ha kaer va c'hurunann,
Hag em rouantelezh 'eus kêrioù ha kestell,
Met skoazell a vank din da c'hellout o diwall.
Ar c'hentañ eo Bourdel, Tolosa, Montpellier,
Taraskon hag Arlez, Sant Jili ha Sant Klaer...
- Met petra 'dalv din-me bezañ ur Roue nobl
Ha bezañ bet savet e braster gant ar bobl,
Mar bezan harluet eus va rouantelezh
Gant ar Sarazined, an dud fall divadex ?
Actronez va C'huzul, deoc'h holl en em glemman
Eus ar fallagriezh a zo graet din bremañ
Gant ar Sarazin bras hag e arme bounner :
Distrujet eo gantañ Tolosa, Montpellier,
Ha c'hoazh em eus klevet e tle hep dale pell
Dont da lakaat seziz war ar gêr a Vourdel...
...Mar karan koulskoude 'n em zentan tributer
Am lezo e repoz 'vit ur pennad amzer...
Ali e c'houlennan diwar-se, va zud ker.

AR C'HONT JAVRE

N'oufen ket, va eontr, reiñ gwelloc'h ali deoc'h
Eget en degemer, met hoc'h arme ganec'h !
Kerkoulz eo dimp mervel en ur zifenn hor bro
'vel breineñ er prizon pe c'houzañv ar maro.

EKTOR

Da betra e lezimp hor bare gant re all
Pa c'hellomp en difenn evel gwir dud leal ?

ANJOU

Va ali, kont Ektor, 'zo kontrol d'hoc'h hini,

Rak kent ma tegouezho nep skoazell ganimp-ni
E vo lakaet Gwaskogn a bep tu da zeviñ...
Kontomp arc'hant dezhañ evit distreiñ d'e vro
Ma ne zismantro ket hon madoù tro-war-dro.

ION Va Doue, va C'hrouer, m'ho ped, va zikourit !
Seul uheloc'h ar garg en deus an den er bed
Seul vuioe'h a soursi a vez war e spered !

EIL DIVIZ

(Hevelep re - Ar Pevar Mab Emon ha Mojiz)

MOJIZ Demat deoc'h, kendirvi ! Pagan kaer oc'h gwisket !
Na pebezh kemm abaoe an amzer dremenet !
P'edomp a bro Arden, soñj hoc'h eus sur a-walc'h,
Edo ar baourentez gourvezet war hor yalc'h !

AR C'HONT JAVRE

Salud a wir galon, deoc'h-hu, marc'hegourien !
Mer teurvezit respont, c'hoant am eus da c'houlenn
Pa'z oc'h deuit d'ar vro-mañ, petra eo ar sujed ?
C'hwil e zo kaerañ tud am eus biskoszh gwalet !

RENOD Ni 'zo marc'hegourien evelhen o vale
Da glesk ur Priñs bennak kement hon implijfe.
Rak-se lavarit din, me ho ped, va mignon,
Deoust hag emañ e kêr ar Roue nobl Ion ?

JAVRE Ho pezit pesianted : o tont e-maez emañ,
Ha mer fell deoc'h eta e c'hallit komz outañ.

(Renod e ziskenn diwez Voïard evit saludiñ ar Roue)

RENOD Salud, Roue Ion, devedoc'h omp deuet,
Ha va breudeur ha me ha va holl soudarded.
Evit ho servijañ na c'houlennomp netra :
Arc'hant hag eour hon eus evit holl o fesañ.

ION Deuet-mat ze vefet e Gwaskogn, Aotronez ;
Me e grad ez oc'h bet degaset gant Doue.
Hogen mer plij geneoc'h, lavarit din bremañ
P'iv oc'h, hag e baluc'h e touit d'ar vro-mañ ?

RENOD Ni a zo hor pevar mibien d'an duk Emon,
Hag hemañ eo Mojiz, mab an duk Egrement.

ION A ! Renod, gwir varc'heg ! Me am eus pell a zo
Klevet brud ac'hanoc'h e pevar c'horn ar vro !
Benniget vo an eur ma hoc'h eus bet soñjet
Dont etrezek emañ, c'hwil hag ho mignonad !
Aotronez marc'heien, dre va feiz e Roue,
Me 'zeuio d'ho karout evel va bugale.

E I L T A D L E N N

(An dachenn e vrezel)

KENTAÑ DIVIZ

(Ar Roue Bourgoñ hag e Sarazined)

BOURGOGN Me e' r Sarazin bres ! Em c'hwec'h rouantelez
Em eus eour hag arc'hant hervez va balontez.
Na stoum nikun ouzhin nemet er Gristenien.
Ar re-mañ e zistrujin mar ne chanchont a-grenn.
Rivinet eo ganin Toloz, Montpellier,
Tareskon hag Arlaz, Sant Jili ha Sant Klaer...
- Klevet hoc'h eus moarvat pell 'zo al lavar-mañ :
"Pa vez tom an houarn, ez eo dav skeiñ warnañ".
Ne chom gant Ion ken netra nemet Bourdel.
Honvezh hor bo ivez sur mat hep dale pell.

KENTAÑ SOUDARD

O Roue galloudus war ar Sarazined,
Me 'zo ho servijer gant karentez parfet.
Va c'horf ha va madoù hag ivez va c'hleze
A vo en ho servij da viken, va Roue.

EIL SOUDARD

P'eo krog an abadenn, eo dav darc'hal ganti,
Ha lakaet ar vro-mañ e gwad hag e gouli.
Mer ne fell da Ion pediñ 'z fals-doueoù,
Ra vezo diframmet neuze a garteroù...

BOURGOGN Bezomp holl pourvezat a zir hag a houarn
Evit reiñ da Ion a-drauz e ziskouarn.
Eomp holl a vagad evel ches kounnarzet,
Ma sponto 'r Gristanien rektal ouzh hon gwelet !

TREDE SOUDARD

Troc'homp, drailhomp, lezhomp, ha lakaomp an tan
Dre ar gwiniannoù, hep esperniñ unan.
Gwelat e vo neuze an dud a vandennoù
O redek da guzhat e don er forestoù.

EIL DIVIZ

(Ion hag e dud - Mibien Emon ha Mojiz)

ION A ! Pobl fallakr ha kriz ! Paganed didruez !
Pèrak 'maoc'h-hu bepred oc'h anklask hor buhez ?

BOURGOGN Ret-mat vo dit, Ion, donet da adoriñ
Hon doueoù pagan war bennoù da zeoulin,
Ha dont d'en em rentañ da viken din sujed...
...Pa'z po graet kement-se e vezimp mignoned.

EKTOR Ar c'hazh pa gav lezh dous, a gar dont d'e lipat;
Met pa c'heller en pakañ en devez ur flipad !
C'hwi ivez a garje bezañ mestr en hor bro;
Hogen gent gras Doue sur met ni a harzo.

KENTAN SOUDARD
Seilhomp holl a vagad war ar Roue Ion
D'ober dezheñ kaout glec'har en e galon;
(Mibien Emon a zegouez)
Met petra 'welan-me ? Kreskiñ 'ze ar vandenn !
Daoust hag-hañ er wech-mañ e lezimp hor c'hroc'hen ?

RENOD Gortozit, Roue Ion, arabat ez afe
Nemet va zud ha me da stourm enep dezhe !

ION Pa hoc'h eus c'hoant, Renod, war ho kez e tac'homp.
(Mont a reont kuit)

RENOD It eta dinec'h keer; ho pat fiziaks ennomp.
(da Bourgogn)
Ur pennad 'zo n'en deus debret mann va c'hleze.
Me 'faouto deoc'h ho kof, Sarszin, hep dala.

BOURGOGN Arsa, va scudarded, lekitt dir en avel.
Ret 'vo dimp er wech-mañ pe drec'hif pe verval !

RENOD Bec'h dezhe, va breudeur, ha c'hwi ivez, Mojiz !
Mar hon eus tamm kalon, bremañ eo dimp c'hoari !
(Ar Sarazined a dec'h, tud Renod war o lerc'h;
na van nemet Renod o kenn ouzh Bourgogn)
Arsa eta, Bourgogn, ha c'hwi 'n em gav diaes ?
Da betre e kuzhit ouzhin beg ho potez ?
Peogwir e oar an holl oc'h un den a galon
Arabab deoc'h diskouez evelas ho talon !

BOURGOGN Evit kement em eus redet dre ar bed-mañ
Biskozh ne welis den ken nerzhus hag hemañ !

RENOD Ker e vo deoc'h, Bourgogn, bezañ deut d'ar vro-mañ
Rak amañ vo lakaet ho kroc'hen da sec'hañ !

BOURGOGN Ro din un tamm alan, me az ped, va mignon.

RENOD Diskuizh eta, Bourgogn, rak n'on ket ur poltron.

BOURGOGN Mærc'heger kalonek, lavarit hoc'h eno...

RENOD Renod, mab da Emon, am enver e pep bro.

BOURGOGN Renod, roit kartier, mar d-ao ho madelezh,
Hag ho krin admiral war va rouantelezh.

RENOD N'em eus kartier ebet da reiñ deoc'h, Bourgogn,
Rak prometet em eus d'ar Roue nobl Ion

Ho zentfen-me dezhañ e bev pe e maro
Abalamour d'en diñmantr hoc'h eus graet tro war dro.
Nep seurt kartier sur mat ne roin deoc'h biken,
Nemedoc'h e garfe dont da vezañ kristen.

BOURGOGN

Ha c'hwi 'bromet eta em bo-me va buhez ?

RENOD

Ya, neuze m'hen asur, mar kirit ober se.

BOURGOGN

Kemezit va c'hleze, m'en zo deoc'h, va mignon.

RENOD

Deomp 'ta bremañ hon daou bete 'r Roue Ion.

TREDE TAOLENN

(E Bourdel)

KENTAÑ DIVIZ

(Ar Brifseiz Klara, c'hoar d'ar Roue Ion, hag ur floc'h)

KLARA

Klevit, va floc'h bihan, pen emeomp hon daou,
Em eus c'hoant da c'houlenn diganeoc'h ur c'helou
Hag un dreig bennek diwar-benn ar brezel :
Piv en hini en deus dilivret kêr Bourdel ?

AR FLOC'HIG

Ato, Priñsez yaouank, un darn marc'hegerien,
A zo deut d'ar vro-mañ eus bro ar Fransizien,
D devez ergaset Bourgoñn hag e aïme.
Met unan 'zo envet Renod eus ar re-se,
Hennazh en deus heuliet Bourgoñn ur panned mat
A-benn dont d'a gemer dre nezh ha dre ergad
Hag en deus en zentet d'ar Roue prizonier.
D Doue, va mestrer, na brevat marc'heger
Ez eo ar Renod-se ! Pubezh den zadout !
Me 'garfe e vefec'h c'hwi ho taou dimezet !

KLARA

E-leal, va floc'hig, me afrez hep faot,
D seleou da gomzob 'on chalmet e Renod !
Me'garfe bezañ din, deiz bennak em buhez,
Da zont da gontredañ gantañ va c'harantez.
Rak-se 'ta, va floc'hig, mar gallez e gevot
En un tu distroet, en ur plasig sakret,
Gra va gourc'hemennob da Renod humblant,
Ha lavar brav dezhañ e ven meurbet kontant
De gacut ar blijadur d'e walout em c'hichen.
Lavar kement-se dezhañ, na lavar netra ken !

AR FLOC'HIG

Priñsez a rank uhel, c'hoar d'ar Roue Ion,
Kredit hep douetañs hag a greiz ho kalon
E kavin-me an tu ma 'n em welfot ho taou.
Mont a ran. C'hwi e welo ha ma e lavar gacut !

EIL DIVIZ

(Ion hag e dud; Renod, e vredeur, Mojiz; ha Bourgoñn ezast)

ION

O Renod kalonek ! Tizhet hoc'h eus Bourgoñn !
Va septr, va c'huzunenn a zo deoc'h, ha va zron !
Ra vezo benniget an eur hag an amzer
Ma teujoc'h d'ar vro-mañ, rak c'hwi eo va salver !

RENOD

A drugarez Doue, va C'hrouer benniget,
Setu trec'het ganimp war ar Sarezined !
Hag i holl ken lore'hus gant o fals doueob
D deus ranket mont da zispenn o roudob.
Evit kentañ servij a rantan deoc'h feteiz
E tegasen Bourgoñn dirak ho Majestez.

ION

A ! Marc'heger leal mar d-eus ar Gristenez !
Va zron, va c'huzunenn ha va rouantelezh
A zo en ho kalloud ! Me 'zoio deoc'h arc'hant,
M'ho kuzuno Roue, mar zait hoc'h asant !
Ho nezh e zo ken brese, ho kalon 'zo ken nobl
Ma varitit bezañ souezeñ war ar bohl !

RENOD

Mar omp deut d'ho servij, n'eo ket evit arc'hant
Nag evit gonid omp-ni deut d'ar vro-mañ.

Trugarez a rantan evit ho profoù mat...
A drugarez Doue em eus e ti va zad
Kement ha ma karan tafzorioù bras ivez :
Ne vank din nemet peoc'h evit taffva 'nezhe.

ION
Ma ho kero feal bepred tra ma vevin
Evel ma vemp breudeur. Biken deoc'h ne vankin.
Hag e fell din disklair hep delerc'hañ nemeur
Direk va Aotronez ha direk ho predeur
E vefe evidon ar brasañ levanez
Mar teufec'h da fortunañ 'barzh va rouantelez.
Rak-se eta, Renod, mar karit asantiñ,
Va c'hoar yaouank Klara ho po da zimeziñ.
Ma 'ndio en argouroù kastell kaer Montalban,
Un' a greñvañ kastell a zo 'barzh ar vro-mañ.

RENOD
Siwozh ! Ma 'zo dister evit an enor-se :
Donet da eurediñ mezc'h ha c'hoar ur Rous !
N'on 'met un divroed, harluet aus va bro.
N'on netra 'n he c'hichen. Soñjit e se d'ho tro...
Hogen prest 'on raktal d'ober ho polontez,
Gant ma vo kavet mat ivez gant ar Brifeez.


ION
Nebson, kontant e vo, aus se hoc'h asuran...
It buan daveti, m'ho ped, floc'hig bihan,
He levarit d'em c'hoar dont anañ hep dale :
Pa vo deut, e klevo a betra aus doare.

AR FLOC'H
Aotrou Rous, ma 'ya raktal pa'z eo ho kred.
Krediñ 'ron e teuo gahin-me troad ouzh troad.

RENOD
Aotrou 'r Rous Ion, Bourgogn en em rentas
Gant an diviz e vije resevet en ho kros,
E vije badezet ha lezet e buhez.
Hag em aus asantet gantañ war gement-se.

BOURGOGN
Bremeñ, Rous Ion, eo reizh din-me d'em zro
Dic'houañ 'n holl zismant' em aus grest tro war dro.

ION
N'em aus ket e vore'hed aus ho tigoll, Bourgogn
...Lekit-en 'en ur gembr, Aotrou ar C'hant Anton,



Graet kloz an dimezi, Me a wel se dija

Oreist pep tra, me ho ped, alc'houezit kloz warnañ.
Pa hon devo amzer, e vo pledet gantañ.

(En kas a reer d'ar prizon dre un tu; ar Briñsez Klara
a zegouezh dre an tu all.)

ION Arsa eta, va c'hoar, setu amañ ar re
O deus hon dilivret, a drugarez Doue...
Setu amañ Renod, a zo o c'habiten
Hag en deus kemeret Bourgogn e-unan krenn.

RENOD Salud, Priñsez yaouank, gant karantez parfet.

KLARA Ho servijerez humbl, marc'heger enoret.

ION Lavarit din, va c'hoar, peseurt anaoudegezh
A ziskouezimp dezhañ, mar d-eo ho polontez ?

KLARA Ne gredan ket e ve nep tra war an douar
A dalvfe da c'hopraet ur merit ken dispar.

ION N'eo ket diaes avat, va c'hoar, e gontantiñ.
En ho kalloud emañ, mar karit asantiñ
Da reiñ dezhañ ar gopr eus ar servij rentet :
E vrasañ c'hoant a zo ho kaout da bried.

KLARA Alas ! disterik on 'vit un enor ken bras,
Da eurediñ un den ken kalonek...siwazh !
Koulskoude mar d-eo bet divizet gant Doue,
Ez on prest e pep koulz d'ober e volontez.

RENOD Ha me, Priñsez yaouank, a lavar ~~me~~ tra,
Pa on bet degaset gant Doue d'ar vro-mañ.

ION Graet kloz an dimezi, me a wel se dija !
Eomp holl d'an iliz gant levenez eta.
Dre al lidoù kaerañ ra vezint euredet,
Ha neuze ez aimp gant enor ha resped
D'ambroug an daou bried da gastell Montalban,
'Lec'h n'o devo diouer a netra er bed-mañ.

PEVARE TADLENN

(E Lez Charlamagn)

DIVIZ

CHARLAMAGN

Ma 'lavar deoc'h amañ, Priñsed ha Baroned,
Em eus kalz a c'hilac'har hag'on gwall zespetet
Dre ma n'hellan ket dont a-benn d'en em vanjiñ
Duzh bugale Emon hag o c'hendarv Mojiz.
Sofjet em boa koulekoùde, peogwir e oant kalc'hiet
e kastell Montalban, e vijent kemeret;
Ha setu 'deus kavet an tu brav d'en em denn...
Ne dalvfe ket hen nac'h, ret e vent sorserien !

NEM

Evit mibien Emon, ma ! bromet deoc'h ervat
Hoc'h eus i ar wech-mañ rentet en ur gwall stad.
N'o deus ken nep galloud d'ober dismegañs deoc'h,
Na den d'o repuiñ, a dra sur, e nep lec'h.
Setu perak e renko Renod hag e vreudeur
Doujañ deoc'h en teol-ma), Aotrou an Impalaer.

CHARLAMAGN

Ha neuze va niz Rolant hag ar Priñs Olier
Ne welen ket e vefent o tegouezhout er gêr...
Aet e oant da Gologn evit reiñ ar chase
D'ar baganed a zo o tismant ar vro-se.

NEM

Ar daou-se 'zo barrek da zifenn o bara;
Nep e glesko hag outo ne c'honezo netra...
Met m'o gwel o tonet pa gomzer anezhe,
Hag ur mentek a zen da brizonier gante.

CHARLAMAGN

A ! Daou Briñs kalonek, deut mat sur ra vazet !
Met piv ar pegan-se hoc'h eus-hu kemeret ?

ROLANT

Impalaer gelloudus, va eontr, va Roue,
Pardon a c'houlennomp digant ho Mejestez.

Mat ar bobl a Gologn oa gwallet he lazhet
Atav he dibeoùz gant ar Sarazined.
Hag hon eus bet ar c'hres, a drugarez Doue,
Da lakeat peoc'h da ren dre ar vro edarre,
Da servij' d'ar baganed ur pred dir hag houarn,
Da zeges o Roue amañ 'tre ho taouarn.

OJER DANAT

Ra vo da virviken an eurvezh benniget
M'oc'h bet, Priñsed yaouank, war an douar ganet !

ESKOFORZ (Priñs Sarazin)

Impalaer Charlamagn, setu me 'n ho kalloud,
Prizonier erret, gant glac'har hag hirvoud.
Añzav a ran ivaz em eus bet glac'harut
E lies a zoare kalz eus ho sujaded.
Daoust da se koulekoùde em eus an esperañs
Ho po ar vadelañz, Impalaer bras e Frañs,
D'hon reev en ho kras, va sujaded ha me.
Hag e prometan deoc'h e-tro-pad va buhez
E teuimp d'hoc'h añzav evit mestr da viken,
Ha va holl dud ha me va badezet kristen.

CHARLAMAGN

Pa vez 'l louarn er pach, a oar kontañ akuit
Ne zebro mui e yer, m'en lezer da vont kuit !
C'hwil 'lavar, Eskofoz, bremañ pa 'z oc'h tizhet
Ne refot biken gacuzh ar Gatoliked...
Gwir mat a lavarit : me a harzho ouzhoc'h,
Rak re a zismegañs em eus bet diganeoc'h.

OLIER

P'oe rentet Eskofoz d'ar Priñs Rolant, ho niz,
A-reok en em rentañ, lakeas an diviz
Gant ma vije treset gant enor ha douster...
Hag hor bos-ni, Aotrou, prometet hen ober.

CHARLAMAGN

Va mignon Olier, goulennit un dra all,
Rak evit Eskofoz n'eo ket un den leal...
O rankout nac'h ouzhoc'h 'eus glac'har em c'halon;
- Va niz Rolant, kasit Eskofoz d'ar prizon.
(Mont a ra Rolant e-maez gant Eskofoz)

Lavarit, Olier, pa 'm eus ennoc'h fiziañs,
 Ar wirionaz dirazon hag an Tadoù e Frañs.
 Me a garfa gouzout, hed ha had an emgann
 Penaos, gant peseurt kalon, en deus stoumet Rolant ?
 Ha diskouezhet en deus e vo den kalonek
 Ha dispont en emgann evel ur gwir varc'hag ?

OLIER

Me 'laro a dra sur. Actrou va Impalaer,
 Evit komz a Rolant en em gavan diester.
 Abaoe m'eo bet krouet an douar hag an neñv
 Ne voe biskoazh gwalet ken kalonek hag eñ.
 P'edo an div arme renket a bep kostez
 E sailhas er penn kentañ evel ul leon gouez.
 E-unan ez eas davet an senebour.
 Biskoazh n'em eus klevet ur seurt estlamm ha youc'h
 Evel ma voe dre holl a bep ma tremene,
 Gant ar Serazined o c'houlenn o buhez.
 Hag a-raok hag a-dreñv, hag a-zehou hag a-gleiz,
 E lazhe anezhe gant fulor 'val ur bleiz.
 Dre lec'h ma tremene a kouezhent a druilhoù.
 An dachenn oa rentet 'val plasann al leueoù !
 Me 'lavar deoc'h un dra hag a zo gwir a-walc'h :
 Mar be c'hwi a c'hellfe kavout dezhañ ur marc'h
 A vefe dioutañ ha barrek d'e zougen,
 E c'hellfec'h disfiziañ hoc'h holl senebourien.

CHARLAMAGN

A ! Pabezhevnevez a zo 'kreiz va c'halon
 O klevout ho komzoù, Olier, va mignon !
 Hag e komprenan mat, hervez m'eo hoc'h ali,
 N'eus dic'her a netra nemet ur marc'h d'am niz,
 Hag e vazo neuze barrek da zistrujañ
 Kement seurt senebour em eus war ar bed-mañ ?
 Hogen lavarit din eta e pe doare
 E vazo dibabet da Rolant ar marc'h-se ?

OLIER

Ma 'roio deoc'h ali war se bremañ-souden :
 N'hoc'h eus nemet kemenn hoc'h holl varc'hegourien
 Ha lavarout dezhe hoc'h eus-hu kalz a c'hoant
 D'eo gwelout o redek holl d'ae vouled arc'hant.
 An neb en deus marc'h mat en diskouezo neuze.
 An dibab a zrot evel-se, va Roue.

CHARLAMAGN

Hep mar, Olier gaszh, komz e rit gant furnez :
 Urzh a roin d'an holl da redek assembles.

(de Rolant o tont)

A ! va niz ker Rolant, va brasañ esperañs,
 C'hwi a vo difannour ar gurunenn a Frañs !
 Lavaret 'eus bet din ne fell deoc'h netra ken
 Nemet ur marc'h a ve kreff a-walc'h d'ho tougen.
 Ac'hanta, kement marc'hag 'zo em rouantelez
 A welfot war an dachenn o redek assembles.
 Ha me a lakaio e penn pellañ 'n dachenn
 Va c'hurunenn en sour, ha priz all ebet ken.
 Hag ar c'hentañ marc'hag a dizho anezhañ,
 mar d-on Roue e Frañs, en roin-me dezhañ !
 Hogen ar c'haerañ marc'h a welin war al lis
 M'en prano deoc'h, Rolant, n'eus forzh evit pe briz !

ROLANT

Impalaer galloudus, Roue ar Frañsizien,
 Ne varitiz biskoazh ha ne rin birviken
 Digent ho Majestez kement a vadelezh
 Evel m'hoc'h eus din-me diskouezhet alies !

CHARLAMAGN

Ne c'houlennan ouzhoc'h nemet un dra, va niz :
 E rofot din skoazell evit tennañ kastiz
 Eus a Vibien Emon 'deus va diamegañst,
 Ha n'ouzon ket pelec'h emaint bremañ kuzhet.

ROLANT

Nemet eet 'vent en neñv p'e kalon an douar ?
 Me a dizho 'nezhe un tu, hep lakaat mar !
 Pell a zo em sus-me klevet komz anezhe :
 Laouen bras e vefen o'n em aprou outa.

CHARLAMAGN

Eomp eta neuze, Actronez va Friñsed,
 It-hu da lakaat prest pap hini e roñsed.
 Mall em eus da walout o redek assembles
 Kement marc'h kalonek 'zo em rouantelez.

P E M P V E T T A O L E N N

(E Montalban)

DIVIZ

(Ar Roue Ion; Mibien Emon; Klara)

ION
Bremañ, va c'hoar Klara, setu c'hwi euredet
D'an den galloudusañ a gement a gavfed.
Hag evit argouroù kemerit Montalban,
Un' a gaerañ kestell a zo 'barzh ar vro-mañ.
Me ho lezo bremañ e peoc'h hag e repoz,
Rak d'ar gêr a Vourdel e fell din mont fenezh.
Rak-se hoc'h aspedan, an ail hag egile,
Da vevañ e doujañs ha karantez Doue.

RENOD
Roue madelezhus evel ur Salomon,
Mar bije em galloud diskouez deoc'h va c'halon
E weljec'h garanet enni ar garantez
Am eus-me evidoc'h, va Friañs ha va Roue.
En ho servij e vin en eur ma c'houlennfet.
Kenavo deoc'h, Aotrou, gant karantez parfet.

KLARA
Kenavo, va Roue, va breur fur ha gwirion.
Me ho trugereke eus a greiz va c'halon.

RICHARD
Kenavo, Roue mat ha karget a furnez.
Ni ho trugereke evit ho madelezh.

ION
Aotronez, c'hwi ve c'hoar, c'hwi va breur, kenavo !
En eurvad ha buhez Doue d'ho kendalc'ho !

C' H E C' H W E T T A O L E N N

(E lez Charlamagn)

DIVIZ

(Charlamagn hag e Aotronez)

CHARLAMAGN
Priañsed ha Baroned, tostaat a ra an deiz
Ma welfor ur gouel bras dre ar rouantelez.

SALAUN A VREIZH
Klevit, va Impalaer, mar ne lakit evezh
E c'hallfe c'hoazh Renod ober dimp kalz a vezh.
Rak mar teu en a benn redek ar gurunenn,
Gant Boïard dindanan e c'honezo serfen.

CHARLAMAGN
Aes e vo dimp lakaat remed war gement-se :
Richard a Normandi, ha c'hwi Duk Nôm ivez,
It ho-tou war hent bras Orleans,
Hag eveshait mat kement a zeu a Friañs.
He mar gwelit Renod na kennebaut Mojiz
O tont 'trezek Pariz, degasit dimp ali.

RICHARD A NORMANDI
Me ' bromet deoc'h, Aotrou, eus a greiz va c'halon,
Mar gwelomp o tostaat un' a Vibien Emon,
E werzhimp ker dezhe o smez dreanenet,
Rak mar kredont bale e vint anavezet !

(Richard ha Nôm a ya e-meez),

SEIZHVET TAOLENN

(E Montalban)

DIVIZ

(Mibien Emon; Mojiz; Klara)

MOJIZ Pa welen aet e-maez e dud hag ar Roue
Em eus da gontañ deoc'h ur c'helou a nevez.
Rek gouzout mat a rit 'teskan dre va ardoù
Kement tre a c'hoarvez er rouanteleziad...
- Ac'hanta salaouit : bremañ e kêr Pariz
'eus un digarez brav da ober vailhantiz !
Ar Roue Charlamagn a ray e bezz termen
Ur redadeg stre e holl varc'hegourien.
Ha neuze e lakey e penn pellañ al lis
E gurunenn sour splenn evit ar c'hentañ priz.
Da zibab marc'h da Rolant eo e ra kement-se...
- Ar marc'h Boïard, a greden, ablijfe d'ar Roue !

RENOD Me'z efemp da Bariz evit ar gurunenn,
Boïard a c'honezfe, ha marc'h all ebet ken !

MOJIZ Mar karit ho pezo kurunenn ar Roue,
Da ziskouez emañ Mibien Emon c'hoazh e buhez !

ALARD Dices ha dañjerus eo ar pezh a leret :
Mar d-emp da Bariz e vimp anavezot.

MOJIZ Arabat es afa nemet Renod ha me
Hag ar marc'h kear Boïard, da ober an taol-se;
Boïard a renk kentañ bezañ livet e gwenn;
Renod a vo yaouank, ha me vo ansien !
Pa vezimp evel-se hon tri holl dic'hizet
Gant den ebet sur mat ne vimp anavezot.

RENOD Laouen bras oh, Mojiz; ha pa vezimp hon daou
Ne oufe den er bad ober dimp draog na gaou !

KLARA N'ho ped, va fried ker, dre ur wir garantez,
N'it ket, en anv Doue, da risklañ ho puhez !

RENOD N'ho pezit ket a varc'had, va fried, me ho ped :
Ken yac'h e tistroimp evel ma vezimp aet.
Kenavo, va fried, va breudeur, ha va zud !
Chomit e Montalban ha na rit ket a vrud :
Na lavarit da zen da belec'h e vimp aet
Gant son, dre dreitouriezh, e vefemp diskuliet.

KLARA Kenavo, va fried ha va c'henderz Mojiz...
Ken e vefot distro ne vin ket discoursi !

EIZHVET TAOLENN

(War hent Orleañs)

DIVIZ

(Richard a Normandi ha Nôm - Renod ha Mojiz)

NEM Setu ni degouazhet war hent bres Orleañs,
Ul lec'h darempredet da arrouet e Freñs;...
... Ne welen o tostaat na kouer na marc'hoger...
Diaviz e vefemp chom da goll hon amzer...
- Richard, mar am c'hradit, distroomp war hor c'hiz
Buenañ ma c'hellimp adarre da Bariz.

RICHARD A NORMANDI

Gortozomp, Duk a Nôm, me ho ped, va den ker :
Gwelout a ran o tont en hent daou varc'heger.
Unan en deus ur marc'h 'zo kear dreist ordinal.
Paveved ez eo gwenn, ouzh Boïard va hañval !

(D'an daou zen)

Demat deoc'h, marc'heien ! Palec'h it avale ?

MOJIZ Da Bariz ez eomp da ober ur bale,
Da welout un deiz gouel a vezo kear meurbet,
'zo bet gant ar Roue, a greden, asinat.

RICHARD A NORMANDI

O ya 'vat, Aotronez, gwelout 'refot emberr
Ar pezh n'hoc'h eus gwelet pell a zo a amzer !

NEM

Lavarit din, den kozh, 'n ur vont dre ar c'hantan,
Ha klevet ho pefe komz a Vibien Emon ?

MOJIZ

Ya 'vat, klevet a-walc'h em eus komz anezhe,
Lavarout ez int barrek derc'hel penn d'ar Roue.

RICHARD A NORMANDI

Me 'garje ve Mojiz hag e genderv Renod
Aze e-lec'h m'emaoc'h, evit kant skoued d'am lod !

MOJIZ

Ne d-int ket ken diot d'en em vountañ e Frañs !
Gouzout 'reont pelec'h mont da boursu o chafis...

NEM

Piv an den yaouank-mañ a zo ken kaer montet ?
Ne lavar ger ebet. Mut eo eta, me 'gred ?

MOJIZ

Ne d-eo ket mut, Aotrou. Met deoc'h me 'lavaro
Ne vez komprenet mat nemet gant tud e vro.

RICHARD A NORMANDI

Klevit 'ta, kamarad gant ho marc'h kaer ha gwenn,
Mar karit e werzhañ, me en preno laouen.

RENOD

Me je va da Bariz, ha ma chival ha moa,
pour gonit, mon l'ami, la kurunenn du Roa.

NEM

Pelec'h out bet er skol, lavar, kozh lorgeneg,
Mar n'ouzout galleg mat, nag ivez brezhoneg ?

MOJIZ

Digarezit dezhañ, aotrou, mar plij ganeoc'h :
Va mab a zo c'hoazh yaouank, ne d-eo bet e nep lec'h.
N'en deus ket desket c'hoazh ober e gompliment...
Hogen gant an amzer e komzo ouzhoc'h koant.


RICHARD A NORMANDI

Deuit 'ta da Bariz, ha ni 'yel asambles.

MOJIZ

Deomp eta, Aotronez, pa 'z eo ho madelezh.

(Sonerezh, trouz, tud, mirc'hed, mesk ha mesk)



Redadeg ar Gurunenn

NAVET TAOLENN

(Tachenn ar redadeg)

DIVIZ

(Charlamagn hag e Aotronez - Richard a Normandi - Nêrn)

CHARLAMAGN

Ac'hanta, Aotronez, ha gwelet hoc'h eus den
O tonet da Bariz, eus hon enebourien ?

RICHARD A NORMANDI

N'hon eus gwelet hini ebet e gwirionez,
Nemet daou zivroad oc'h ober ur bale.

CHARLAMAGN

Graet em eus, Aotronez, kinnig va c'hurunenn,
Hag emberr e welimp gwen-trañ ronselasenn !...
Olier ha Salaun, c'hwi 'yel da benn al lis,
Hervez al lealded evit ober justis.
Arabat e ve graet trucheri da nep den.
D'an neb he gonezo, roit va c'hurunenn.
Diskouezhit din goude piv en deus kaerañ marc'h
Mar gellin e breñañ, ha pa ve ker a-walc'h.

FOUKEZ

Setu war an dachenn an dud hag ar c'hezeg.
Pa vo roet an urzh, ez int prest da redek.

CHARLAMAGN

Sonit an trompilhoù, ma krogo 'r redadeg.

(Son a re an trompilhoù, kregiñ 'ra ar redadeg...
ar Roue hag e dud a zo souezhet gant ar marc'h gwenn.)

SALAUN A VREIZH

Ar marc'h gwenn, Impalaer, eo ar mestr warnezhe !
Biskoazh ne welis loen ken buan ha ma'z ê !

CHARLAMAGN

Gantañ ez ay ar priz, gwelout a ran bremañ :
Hag eñ chomet war-lerc'h, setu eñ ar c'hentañ !

SALAUN (de Renod)

Klevit 'ta, marc'heger, ret eo rentañ justis,
Rak hervez ma welan, c'hwi a verit ar priz.
Dalit ar gurunenn p'hoc'h eus ha gonezet,
Ha komzit ouzh ar Roue 'raok mont kuit, me ho ped.

RENOD

Komz a rin gant Charlez kement ha ma karo,
Ha goude 'respontin hervez ma lavaro.

CHARLAMAGN

Deut amañ, marc'heger, ma klevin ho toare.
Bez' hoc'h eus d'ho tougen ur marc'h a galite.
Rak-se levarit din, me ho ped, den vailhant,
Ha c'hwi en gwerzhfe din evit va niz Rolant ?

RENOD

Mar d-oc'h war var a varc'h evit dougen ho niz,
Klaskit un all, Charlez, n'ho po ket va hini.
Ya, pa rojec'h din-me gwenoù ho taoulagad,
Me am eus koulz ha c'hwi ezhomm eus ur marc'h mat...
Rak ma a zo Renod, ha Boiard eo va marc'h.
Ha pa 'm eus gonezet ho kuzunenn a-walc'h,
E tispennin 'nezhi da baeseñ soudarded
Da ober brezel deoc'h ha d'ho holl Varoned.

CHARLAMAGN

O va zud, seilhit holl war an den dialeal !
Ma vir va c'hurunenn e varvin-me raktal !
(Renod a red kuit, hag e klevet ur marc'h o pavarlammat)

IOELON

Kerzhet eo kuit Renod, an den fall digristen...
Me 'gred ez eo an diaoul a zo ouzh an dougen !

CHARLAMAGN

O den fall ! O den krizh ha kirieg d'am gwalleur !
Me 'garje ne vijen Roue nag Impalaer !
Me 'garje ne vijen Impalaer na Roue !
Nemet an eil gwalleur n'em eus war egile !

ROLANT

Va eontr, Impalaer, ha gwir Roue a Frañs,
Frealzit ho kalon, me ho ped gant doujañs.
Rak ma en deus Renod laeret ho kuzunenn
E kousto ker dezhañ peseñ e laeredenn !

Me ho ped, va eontr, frealzit ho kalon :
Me a denno kastiz eus a Vibien Emon !

OLIER

Mar bijent 'n em roet da anaout dimp-ni
Fur hor bije miret ne vije deut hini
Biken da friponiñ deoc'h-hu ho kuzunenn,
En drouk despad dezhe ha d'o holl diaoulieñ !...
Met fardet oa Mojiz 'vel un den ansien,
Renod a oa yaouank, hag ar marc'h a oa gwenn !
Gant un arme bounnez somp de devezel kastiz
War bevar Mab Emon hag ar sorser Mojiz !

CHARLAMAGN

Divizet eo eta, Olier, va mignon !
Rak birviken kammed ne vo joa em c'halon
Na vin en em venjet ouzh an dud milliget
O deus diamegafset me ha va Beroned.
Arsa eta, va zud, ret eo raktal gervel
Soudarded hon arme da gerzhat war Vourdel,
Da lakaat ar seiz war gastall Montalban :
Me 'ranko en aprou a-benn tri deiz amañ.
Kemerit ar peñ, Rolant, c'hwi 'zo den a galon,
Ha grit komz ac'hanoc'h war zouaroù Gwaskogn.

ROLANT

Pell a zo em eus-me ur c'hoant bras em c'halon
Da zont d'en em aprou ouzh bugale Emon,
Draist pap tra ouzh Renod a zo ar mab henañ
Hag a zo brud dre-holl war ar bed anezhañ.
Me a garfe em be digant Doue raktal
Ar c'hraes d'en em gavout gant Renod tal ouzh tal.

OJER DANAT

Me 'bromet deoc'h, Rolant, direk an Impalaer,
E kavfet digarez, hep dale pell amzer !

P E M P V E T L O D E N N

T R E I T O U R I E Z H I O N - P L A E N E N N V O K O U L E U R

K E N T A N T A O L E N N

(Dirak kastell Montalban)

DIVIZ

(Charlamagn hag e arme)

CHARLAMAGN

Arse 'ta, mignoned, setu ni degouezhet.
Deomp bremañ da glask al lec'h hag an andred
Ma c'hellimp kemerout kastell-kreñv Montalban,
Ma vezo lakaet e ludu hag e tan.
Deomp da grougañ annañ ar pevar Mab Emon
Me teuint er wech-mañ d'anacout ac'hanon !

FOUKEZ

Impalaer Charlamagn, ha c'hwi Tadoù a Frañs,
Un dre a leverin hag a zo em c'hredañs.
Atav em eus klevet tud fur o lavaret :
"Gwellañ skiant a zo eo ar skiant prenet"...
Ac'h bras em eus ete ne c'hallimp birviken
Dont e-benn da drec'hiñ war hon anebourien :
Rek ouzhpenn ma'z int tud kreñv ha kalonak bras
A gement a gavfed a-zinden an oabl glas,
Emañ gante Mojiz, ar scutileñ sorser,
A ra ar pezh a gar dre erdoù Lusifer.

IZAKAR

Gwir eo, Foukez, ar pezh a lavarit bremañ :
Biken ne vo dre nerzh kemeret Montalban.

NEM

Pa ne c'heller dre nerzh, eo ret dre finesse :
Esa stignañ ur pech d'ar baotred scutil-se.
Kasomp ur c'hannadour bete 'r Roue Ion,
Da reiñ urzh da rentañ ar pevar Mab Emon
'zo repuet gantañ en e rouantelez...
...pe vo lakaet er prison e-pad e holl vuhez !

CHARLAMAGN

A ! Duk fur ha poellek evel ur Salomon,
Hoc'h ali e zo mat, vad a ra d'am c'halon !
Ha mar em bez an trec'h war va enebourien,
'vo a drugarez deoc'h, ha den all ebet ken !
Rak-se eta, Ripuz, va servijer fidel,
It-hu bremañ souden bete 'r gêr a Vourdel.
It di, hag eus va ferzh, levarit da Ion :
Mar ne gar rentañ din ar pevar Mab Emon
Hag en deus repuget bremañ war e zouar,
M'hen toue dre va septr, e rin dezhañ glac'har !
Met mar kar o rentañ em galloud, me 'bromet
E vo Ion ha me hon-daou gwir vignoned.

RIPUZ

Abalamour d'e c'hoar, e kavo marteze
Ion, diées reiñ deoc'h ho koulenn, va Roue...
...Klevet e vo war se petra a lavaro.
Kenavo, Aotronez, kenavo an distro !

E I L T A O L E N N

(E Bourdel)

D I V I Z

(Ion; Goustard, e sekretour; ha Ripuz)

ION

M'ho ped, va sekretour, ha gwir eo e vefe
Degouzhed Charlemagn emañ gant e arme
Evit ober brezel d'ar pevar Mab Emon ?
Mar d-eo gwir kement-se, na pebezh ranngalon !

GOUSTARD

Ya siwazh ! va Roue, setu ar wirionez !
Biskoazh ne vos gwelet ur nonneroc'h arme
Eget 'eus e Gweskogn abaoe tri devezh,
Hag emañ en he fenn an Impalaer Charlez.

RIPUZ (D tagoushout)

Salud, Roue Ion, e Gweskogn souveren !
Setu ma deut e-bezha Roue ar Frazsizien
Evit lavarout deoc'h un dra ne ouzoc'h ket.
Ne vefot ket lapuen, me gred, ouzh hen klevet.

ION

Aotrou ar C'hannadour, me 'zo ho servijer.
Lavarit ho menned e komzoù fraez ha sklaer.

RIPUZ

Ar Roue Frañs a zo degouzhed e Gweskogn
Evit ober brezel da Vugale Emon.
Rak-se on-me karget da zugas kelou deoc'h
Ho po-hu d'o rentañ d'ar Roue hap dilerc'h.
Mar ne rit kement-se, en deus bremañ touet
N'ho lezo birviken en ho pasianted
E teuio d'ho harluñ diouzh ho rouantelez,
Hag ho lakay er prizon e tro-pad ho puhez.
Er c'hontrol, mar gwarzhit ar pevar Mab Emon,
Eus a greiz e galon e vezo deoc'h mignon,
Hag e teuy da greskiñ c'hoazh ho kournamant
Diouzh un dachennad-bro a roy deoc'h a brezant.

ION

Duiz ho klevout ez on rentet dall ha bouzar !
Me a garje bezañ e kalon an douar !
Ha me 'c'hallfe, va Doue, bezañ den ken dic'hred
Ma taufen da rentañ an droug evit ar vad ?
Donet da dreitouriñ 'vefe va brasañ mezh,
Neb en deus restalet din va rouantelez !
- Ne dalvfe ket hen nac'h, ho peaj, va mignon,
En deus skoet un taol marval e va c'halon.
Ho komzoù a zo krizh, garo ha divergent.
Ha ne d-eo ket aes din reiñ raktal va respont...
Rak-se 'ta ho pedan, Aotrou ar C'hannader,
D'en em gaout emañ a-benn div pe deir eur,
Din da c'houlenn ali diwar va aferioù
Ha da reiñ deoc'h respont goude e barr gomzoù.

(Ripuz a ra ur stouadenn hag a ya e-maez)

ION

Goustard, va sekretour, me ho ped da vonet
Bremañ souden raktal da c'hezval va C'honted.

(Goustard a ya e-maez)

Mar treitouren Renod, me ho kalz hirvoudoù !
Petra 'rin 'ta neuze goude ur seurt keloù ?

(Goustard a zeu e-barzh gant ar Gonted)

Aotronez va C'honted, hastit ho kamedoù
Pa 'm eus da zegemenn deoc'h hell ur gwall galoù !
Al lozc'hus Charlamagn, Impalaer ha Roue,
En deveus degaset ur c'hannad va bete :

Nemet Mibien Emon 've rentet da Charlez
 E teuy d'am harluidi diouzh va rouantelez,
 Am lakay a prizon e-pad va holl vuhez...
 - Hoc'h ali 'c'houlennan, va zud, war gement-se.

JAVRE
 Gwall souezhet on geneoc'h, Aotrou 'r Roue Ion,
 Pa c'houlennit ali da ober treizon,
 Dreist pep tra ouzh Renod hag a zo deoc'h-hu kar,
 Dre ma'z eo ho preur-kaer evel pried d'ho c'hoar.
 O ! N'oc'h ket din da zougen an anv a Roue
 Mar asantit biken treitouriñ ho lignez !

EKTOR
 Dacust hag e c'hellfemp-ni bezañ ken dinatur
 Da rentañ un torfed evit ur blijadur ?
 Mar heuilhit va ali e lavarin hep mezh
 N'eus van ebet d'ober a c'hourdrouzoù Charlez :
 Keit ha ma vo Renod hag e dud e buhez
 Ne vefot ket gwashoc'h, kredit se, va Roue.

ANTON
 Me a lavaro deoc'h, Aotronez, va rêzon :
 Pegoulz hepken e tleer skoazellañ ur mignon.
 En sikour e ranker, me 'lavar deoc'h penaos :
 Pa ne d-oc'h ket hoc'h-unan intereset er gaoz !
 Met ni 'zo intereset e se koulz ha Renod.
 Chom e poan evitañ a ve dimp un dra sot !
 Rak-se 'ta, va Roue, 'roan va ali deoc'h :
 Na chomit evit den ebet dindan ar bac'h.
 Hastit reiñ e c'houlenn buan d'an Impalaer
 Hag ho karo bepred fidel evel ur breur.

ANJOU
 Kerkoulz e ve abred evel re ziwzhat :
 Parisañ a rankont, se a ouzer ervat.
 Setu deouzek vloez 'zo ma talc'hont ar brezel
 D'ar Roue Charlemagn 'zo o friñs naturel.
 Rentit Mibien Emon raktal da Roue Frañs
 Rak mar daleit c'hoazh n'eus mui a esperañs !

ION
 Setu greset ar c'huzul hag ar gonkluzion,
 Hag ar muiañ-mouezhioù 'zo 'vit an dreizon !
 O va breur-kaer Renod, set eo din er wech-mañ !
 Gwezhañ ec'hanoc'h-holl d'hoc'h anebour brezañ !
 Biskoezh treitouriezh ne vos ken digraest...
 Hogen pa renk an den, n'en deus mui a lezann !

AR FLOC'H

Me ho ped, va Roue, frealzit ho kalon,
 Rak pa ho po rentet ar pevar Mab Emon
 Etre daouarn Charlez, ha pa vent erreat,
 Ne vo c'hoazh 'n e c'halloud ober dè droug abet,
 Rak an Tadoù a Frañs a zo kerent dezhe
 Hag a raio o feoc'h e kichen ar Roue.

ION
 C'hwi, va floc'hig bihan, am frealz ar muiañ.
 Rak-se, va sekretour, 'n em lakit da skrivañ :
 Skrivit aze kentañ d'ar Roue eus a Frañs
 Penaos en saludan gent kalz a gonskañs.
 He da c'hortoz ma 'z in e-berzh em personaj
 Da rentañ humblamant d'e Vajestez homaj,
 E fell din dre va skrid testeniañ bremañ
 Ez eo va brasañ c'hoant bezañ mignon dezhañ.
 Ha pa 'm ped da rentañ dezhañ e berr tarmen
 Ar pevar Mab Emon, e wall anebourien,
 Eus a greiz va c'halon eo e rin kement-se
 Gent ma talc'ho d'e dro feak d'e bromesao.
 - E Plaeenn Vokouleur 'vo al lec'h asinet
 Ma o rentin warc'hoazh o fevar dizarmet
 (nemet e vo gante hepken o c'hlezeier)
 Barroù gles en o dorn evit m'o anavfer.
 Pa vazint degouezhet e gis-se dizarmet
 E c'hellio Charlemagn dibao o c'hemeret...
 - Setu aze ar pezh am boa c'hoant da skrivañ.
 Deut emañ, sekretour, 'vit ma sinin bremañ.

(Da Ripuz)

Dalit, Aotrou Kanned, lavarit d'ar Roue
 E vezo greset pep tre hervez a valontez.

RIPUZ
 Me ho trugereka, Roue nobl ha gwirion.
 Pa 'm eus bet va mennad eo laouen va c'halon.

ION (Da Anton hag Anjou)
 C'hwi ho taou, Aotronez, 'roas konkluzion
 Ma vije treitourer ar pevar Mab Emon.
 Rak-se 'ta e kasot Renod hag e vradour
 Warc'hoazh a-benn kreistez da Blaeenn Vokouleur.

ANTON
 Mont a reizmp, Aotrou, hogen bezit sekret,
 Rak arabet a ve e ouzfe den ebet.

TREDE TAOLENN

(E Montalban)

DIVIZ

RENOD Me 'gred bremañ, Rolant hag e sontr Charlez
D deus debret ar wech-mañ 'leizh o c'hroc'hen a vezh.

GICHARD Ne d-eus lec'h da lakeat nep douetañs war se :
C'hoariet hoc'h eus dezhe un taol soutilite !

ALARD (o tagouzhout gant daou vabig Renod)
Hogen, va breur Renod, klevit 'ta un afer !
Ionig hag Emonig a zo erru er gêr !
Ho taou vabig bihan a di o magerez,
Brevañ daou grouadur 'zo o tougen buhez.

RENOD O ! O ! Degouezhet eo er gêr an daou genfard !
Degasit i amañ ma o gwelin, Alard !
(Paket e reont d'o zad)

Demet deoc'h, Emonig, Ionig, va faotred !
Pevar bloaz 'zo abaoe n'em boa ket ho kwelet.
Bremañ lavarit din : ha c'hwi a vo gwirion
Evel hoc'h eontred, ha paotred a galon ?

EMONIG Va zad, va sонтred, gwir bolontez hon eus
Da sikour se'hanoc'h dalc'hmat hag e pep reuz !

GICHARD Ha c'hwi a glev, Renod, komzoù ho mab henañ,
E pe c'hiz e parlant ken kalonek dija ?

ION (O tagouzhout)
Salud va breur, va c'hoar, ha c'hwi va nizien kez.
Ur c'helou 'zegasen hag ho lakay seder.

RENOD O va Roue gwirion, souveren hag Aotrou,
Deut-mat vafot bepred, ha c'hwi hag ho keloù.

ION Pa'z eo bet bolontez Doue dre Brovidañs
Donet da gontradifiñ etrezomp aliañs,
Em eus klasket abaoe, hag en deiz hag en noz,
Peneo kevout tu deoc'h da vevañ e renoz.
Ha bremañ e c'hellen lavarout gant fiziñs
Em eus sozet emglev 'trezoc'h ha Roue Frañs,
Gant an diviz avat e refot penn da benn
Ar pezh on deuet amañ a-esprez da c'houlenn.

RENOD Me 'bromet hen ober, Aotrou, a galon vet,
Pa va ret din skullhañ an hanter eus va gwad.
Lavarit din petra en deus c'hoant e va graet.

ION Setu amañ ar pezh a zo bet divizet :
Ret a vo deoc'h monet ho pevar e vete
Evit goulenn pardon digant e Vajestez.

RICHARD Kement-se a raimp, kredit, Roue Ion.
Hogen pelec'h en deus asinet dimp da vont ?

ION E Plasenn Vokouleur e vo ar gonfarañs
E-lec'h ma vo Charlez hag an Tadoù a Frañs
Deut eno d'ho kortoz, da ober peoc'h geneoc'h.
Met ret e vo monet evel ma lavar deoc'h :
Dre ma hoc'h eus Charlez ken gwas dismegeañs
En deus douetañs warnoc'h, hag en deus lavaret
E rankit mont ho povar dizarmet e vete,
Nemet ho kleziar hepken ouzh ho kostez.
Neuze en ho taouarn e tougfol barroù glas
Evit ur sin a beoc'h.. An homaj n'eo ket bras !

RENOD 'Salamour da Zoue, taolit pled, va breur kaezh !
Disfiziout e ren kalz war garantez Charlez !
Rak mar gallfe kregiñ warnomp-ni dizarmet
Em eus son e lakfe ober hon c'hemerat...

ION Charlez 'zo den d'e c'her ! Eus se bet dinac'het !
Gallout a rit monet davetañ divorc'hed...

RICHARD Diwallit, diwallit, Aotrou 'r Roue Ion !
Ha c'hwi a fallfe deoc'h ober dimp treizon ?

Rak mar ouezfen ho pe hepken ar volontez,
Birviken ur c'hard-eur ne chomfec'h e buhez !
Santout e ran ervet emañ 'n ho apared-c'hwi
Hon c'has evel deñvod da dagañ d'ar bleizi.

ALARD
Birviken Charlemagn ne oufen da garet
Abeoc ma sotreas lezhañ an duk Beued.

GICHARD
Mar en deus c'hoant avat, evit eurved ar vro,
Da echuiñ ar brezel kroget keit amzer 'zo,
Ni a yelo d'al lec'h a zo plijet dezhañ;
Met ganimp hon erme eus kastell Montalban !
Mar teu dimp gant douster, neuze ni a blego.
Mar bez krizh ha digar, ni en em zifenna !

ANJOU
Siwazh ! Ne gleskit ket an hent, va mignoned,
Evit ober ar peoc'h, an doare ma komzit !
Ha c'hwi a c'hell kredañ ar Roue nobl Ion
A garfe ho kwerzhañ nag ober treizon ?
Kas a reio geneoc'h ivez darn e Gonted
Evit diskouez deoc'h skloer ne d-eus danjer ebet.

ION
O Doue, Aotronez ! Goude dont d'ho sikour,
E fall deoc'h levarout ez on-me un traitour ?

KLARA
Klevit ivez, Renod, pezh a lâr va c'halon :
Evit bezañ breur din ar Roue nobl Ion,
Ne ven ket ali deoc'h de vanet koulskoude
Dizenn ha dizifenn de gavout ar Roue.

ION
Gwell-bennek a gavan an holl, bras ha bihan !
Grit evel ma kerfot, me ne ran ken a van !

MOJIZ
It 'ta, va c'handirvi, it gent ho preur Renod.
Mar bez traitour Ion, e reio un dra sot ;
Biskozh mazo va zad ne vos ken ker gwerzhet
Ho ma vo hoc'h hini, mar bezit traitouret !

RENOD
Bet omp c'hoazh alies e danjer hor buhez.
Deut an deiz odirre de vont an anv Doue.

RICHARD
Nonet a rin geneoc'h evit sentiñ hepken.

ALARD ha GICHARD

Ha pa rankomp mezel, kemeromp penn an hent.

RENOD
Benniget 'vo Roue an Nefv hag an douar :
Setu ni, va braudeur, c'hoazh holl a ul lever !
Me esper e roio Doue dimp-ni ar chañs
Ha tiestroimp d'ar gêr diwar zouaroù Frañs...
- Arsa, va sonerien, grit bremañ ur fredon
Da ziduañ spered ar Roue nobl Ion
Hag en deus evidomp kemeret ur boan vras.
Ha ni, hastomp monet war an hent ur wech c'hoazh.

ION (O klevout ar fredon)

Siwazh, Mibien Emon, m'oufec'h ar wirionez,
Sur ne rajec'h ket din ar seurt enoriou-se !

RENOD (Hag e vredeur a gemer bodoù glas, hag a zscoulin direk
skeudenn ar Werc'hez)

Ennoc'h, Gwerc'hez Vari, Mamm ar gwir Oasprenez,
E fiziomp hor buhez, ha me ha va breudeur.
Ni ho pad d'hon diwall, Itron sakr ha Gwerc'hez,
Duzh ar mazo soubit hag an dreitouriazh !

(Sevel a reont)

Kenavo, va fried, va mibien, ha Mojiz !

KLARA
Beaj vat, va Renod, distrait prest d'ho ti !

(Mont a reont an hent)

ION (E-unan)

Kaer em eus esperout kemerout va renoz,
Va c'houstiañe me broud. Hag an deiz hag an noz
E rebech din dalc'heñt ez on bet un traitour,
Am eus gwerzhet an neb a dleñt de sikour.

PEVARE TAOLENN

(E Plaenenn Vokouleur)

KENTAÑ DIVIZ

(Aotronez Charlamagn)

OJER DANAT

Karzhit e-reak, Foukez, pa hoc'h aus mui a dud,
Ha ni 'yelo war-lerc'h goude hep ober brud.

FOUKEZ

Deomp unan d'ar penn-hont, egile d'ar penn-mañ.
Chomomp neuze kuzhet 'tro d'al lanneg vras-mañ.
Ha pa sono kroisteiz, pa welimp o tonet
Renod hag e vredeur, dibreder, dizarnet,
Arabat ober dacu soñj kent 'n em strinkañ warne
Destumomp anezhe stre hon div arme.

RICHARD A NORMANDI

A feiz yn, Foukez ! Gwir a levarit bremañ !
Rak-se it-bu du-hont, he ni 'chomo amañ,
Ha pa sono kroisteiz, ar c'hentañ o gwelo
A lakay an drompilh de dregern tro war dro,
Ma enilhimp assembles 'vit Ësa o c'hemer...
N'ouzon he ni 'c'hella dont e-benn d'hen ober.

GALEKAN

Tavit 'ta gant ar vezh ! Penaos ! Ha c'hwi a gred
E stouzmfe pevez den ouzh dacu c'hent den armet ?

NEM

Kent ha na vint kenazet, me a bromet deoc'h as,
E vo ank al lanneg, deoust pegen ledan Ë !

EIL DIVIZ

(Renod hag e vredeur, hag ar Gonted degaset gant Ion)

GICHARD

Petra eo al lanneg a welen, va breudeur ?
Hag arzu omp bremañ o Plaenenn Vokouleur ?

ALARD

Sellit breaset mazoù ! Koulskoude 'on souzhet :
Evidon da sellout, ne welen den ebet !

GICHARD

Na me ne welen ket, nebaon, mui egedoc'h.
Deomp ac'han, va breudeur, hep delerc'hañ polloc'h.

AR GONTED

Gortozit un nebeud, ni ho ped, Aotronez.
Bremañ soudan raktal e tauic ar Rous.

(An drompilh a dregern, ar banieloù a sav)

RENOD

Gwalleur dimp, va breudeur, bezañ 'eus treizon !
Rak me a wel banniel Foukez a Vorrilhon !
Hag a penn al lanneg amañ Ojer Danat.
Ret vo dimp, va breudeur, mervel amañ sur-mat.

ALARD

O Renod ! Den fallakr ! Piv e soñje biken
Ho pijs traitouret ac'hanomp evelhen !
Ni zo ho predeur paour hag ho kare ervet,
Gant eus memes mamm hag an havelap tad !

GICHARD

Ya ! Kement-all a c'hoant en devoz d'hon gwerzhañ
M'en deus en desped dimp hon degaset amañ !

RICHARD

Alard ! Gichard ! Ho taou, deat buan d'am sikour,
Me walc'himp hon deouarn a kalon an traitour !

RENOD

O Doue ! Va breudeur, ha c'hwi 'soñj koulskoude
Em befe ho kwerzhet amañ a gwirionez !
Mar em aus bet ar soñj hepken d'ho traitoureañ,
Me 'reket me tauic an douar d'em lonkañ !
O va breudeur ! Doue, ne pegen difur oc'h !
Me na vin ket ivez gwell na gwash egedoc'h !
- Salsouit, Kont Anjou, Monbandal hag Anton,
Karget oc'h bet ho-tri gant ar Rous Ion
D'hor c'has betek amañ 'val wignoned fidel.
Peogwir 'eus traitoureañ, roit dimp ho skoazell...

ANTON

Ni n'hor boa karg nemet d'ho tages al lec'h-amañ...
N'en em lakaomp ket evit tud all e ponn !

Diveskit ho kartoù evel ma entenfot,
Ni a ya en hon tro... Grit evel ma kerfot !

(Falvezout a ra dezhe mont kuit; Renod a gerzh war o lerc'h)

RENOD A ! Tud digoustiñe, tud geouiat ha poltron !
C'hwi a zo lod ivez e-barzh an dreizon !
Richard, Alard, Gichard ! Lazhomp pep a hini !

RICHARD Nebson, 'vit hen ober, 'vo ket ret hon pediñ !
(Lazhañ a reont pep a hini)

RENOD Bremañ, va breudeur paour, deomp war hon daoulinoù
Evit goulenn pardon ouzh Krouer an Nefvoù.
Ni zo pevar varc'heg hazlust eus o bro,
hag a glasker emañ da lakaat d'ar maro.
Mar bez ho madelezh, va Jezuz, va Doue,
reiñ dimp-ni c'hozh ar c'hres da salviñ hor buhez,
e reimp pinijenn evit hon dizurzoù
ma vimp dagemeret d'ho mauliñ en Nefvoù.

(Ar re all a respont : amen)

Bremañ p'hon eus fiziet hon ene e Doue
Lavaromp kenavo an ail da egile.
Kenavo, breudeur paour, deoc'h-hu a lavaran.
'Vit ar wech diwezhañ e poken deoc'h bremañ.
Doue da reiñ dimp gras, goude koll hor buhez,
D'en em gaout hon pevar 'barzh an Nefv asambles.

RICHARD Kenavo, va breur Renod.

RENOD Kenavo, va breur Richard.

ALARD Kenavo, va breur Gichard.

GICHARD Kenavo, va breur Alard.

RENOD N'hallfor ket lavarout o deus Mibien Emon
Bet douget er bed-mañ ur c'hroc'han e boltron !...
Ma vo er penn-arack, Richard er penn a-dreñv
Ha c'hwi a ziwello, Alard, diouzh an tu dehou;
Ha c'hwi, va breur Gichard, gent evezh bras a ray

Ar stoum enep ar re a zeuy diouzh an tu kleiz.
Pa vezimp dinarzhet ha ret dimp diskuizhañ
Ez simp d'ar roc'h-hont hag e pignimp wamañ.

RICHARD Ni a sento ouzhoc'h bat' an sur ziwzhañ.

TREDE DIVIZ

(Arme ar Roue ha Mibien Emon)

FOUKEZ Erru eo an amzer, sur, en taol-mañ, Renod,
Ma vo gwerzhet deoc'h ker muntrevezh Bartelod !
A ! Bremañ ne d-oc'h mui pignet war gain Boiard !
Kerkoulz deoc'h 'em rantañ raktal, pevar ganfard
Ma vofot erest da gas d'an Impalaer
Evit bezañ krouget ho pevar 'barzh emberr !
Gwerzhet oc'h da Charlez gant ar Roue Ion !

RENOD 'N em rantañ 'lavarit, Foukez a Vozilhon ?
Kent ma vo kemeret na va breudeur na me
E vo koustet da zarn ac'hanoc'h o buhez...
- Met peogwir koulskoude eo ret dimp gouzav reuz
Deuet ugent marc'hag, kalonskañ hoc'h eus,
D'en em gannañ ouzhimp ! Ha neuze, mar trec'homp,
Hon lezfot de vonet kuit e lec'h ma karfomp.
Ha mar trec'hont warnomp ivez dre an argad,
Ni 'bardono hon maro dezhe a galon vat.

FOUKEZ Pa rojec'h din, tud fall, kement a zo er bed
Evit ho lezel kuit, sur mat ne rajen ket !

RENOD Va breudeur, ret em zifann pe vervel e poltron...
Dal va c'hleze, Foukez, a-dreuz dre da galon !

GANELON Siwazh dimp, Aotronez, setu Foukez lazhet !
Seilhomp holl warnezhe evel chas kounnaret !

OJER Penaos ! Tud fall, ha c'hwi e dañjer ho puhez,
Oc'h c'hozh ken divargont lazhañ tud ar Roue !
N'eus forzh pegen fall oc'h, nebson m'ho tifallo !
En em rentit raktal, a-hend-all oc'h maro !

ALARD Na deuit ket d'hon gourdrouz, Ojer, ken Iorc'hus-se.
Pa grogimp da c'hwezaf, e ve tomm deoc'h ivez !

RICHARD A NORMANDI
Ha c'hwî anzav, Renod, e rejoc'h fallantez
O lazhañ Bertelod e palez ar Roue ?

RENOD Ne ris netra dezhañ na rajen kerkoulz dit.
Taol evezh da groc'hen, pe a-hand-all tec'h kuit !

GICHARD Poent eo dimp, va breudeur, pignat war ar roc'hel.
(Pignat a reont)

IZAKAR Sellit pelec'h emaint, pignat war an uhel !

IDELON N'emaint ket ken uhel na vezint diskennet.
Deut 'ta, sailhomp warnna, ret eo o c'hemeret !

RICHARD Mar testait d'ar roc'h, ni 'roio deoc'h kouignoù
Ken gwak ha biliou, a-dreuz dre ho kenou !
(Mibien Emon a daol mein d'an traon)


GANELON (O tec'hout)
Holl diaouloù an ifern a zo ouzh o sikour !

RENOD Kent na vimp kemeret e roimp deoc'h labour !
- Pa hon eus i kaset a-bell diouzh ar roc'hell,
Daomp c'hoazh da zastumm mein da ober brazel.

RIPUZ O ! O ! Deut eo d'an traon ar pavar Mab Emon !
Torrump dezhe o fenn, Aotrou Kont Ganelon !

OJER Arse, va c'hendirvi, 'n em zentit, me ho ped,
Rak amac'h war-nes da vezaf kemeret.

RICHARD O va c'henderv Ojer, na pebez'h fallantez
Pa 'z a an eil kenderv a-enep egile !



Ar pevar mab Emon a daol mein
mar tud Charlamagn

OJER
Doue a oar ervat hag ar Werc'hez Vari
'eus glac'har em c'halon o tont d'hoc'h argadiñ.
Abalamour d'am me, n'hellan ket ho sikour
Dindan beañ da vezañ tremenet da dreitour.
Hogen pa ne c'hellan dont d'ho sikour bremañ,
Ne rin ket deoc'h a zroug ivez da vihanañ.

GANELON
Me 'bromet deoc'h, Ojer, mar espernit anê,
Ni holl a damallo ac'hanoc'h d'ar Roue.

GALARAN
Hep ho sikour, Ojer, ni sur o c'hemero.
Bec'h eta, Aotronez, sailhomp warne afo !

OJER (O vont da azezañ)

Abalamour d'al le am eus graet da Charlez
Ne c'hellan ket sikour va c'hendirvi gomez.
O ! ra vo milliget an eil Judaz Ion,
Hag en deus treitouret ar pevar Mab Emon !

(Mibien Emon a dec'h war ar roc'h, nemet Richard)

NEM
Me o gwel o vonet adarre war o c'h lud.
N'o heuilhomp ket hirroc'h, me hoc'h asped, va zud,
Rak mar gellont ur wech pignat war ar roc'hel
Dindan o zaolioù mein e raint dimp mervel.

(Tec'hout a ra tud ar Roue, nemet Ganelon)

GANELON
O ! O ! C'hwi zo chomet, Richard, da ziwezhañ !
Me a werzho deoc'h-hu maro Foukez bremañ !
Dalit un taol kleze a-dreuz ho pouzelloù,
Hag e c'hellfot gante ober gwadigennoù !

RICHARD
O ! Lazhet on ganit, mab an diaoul, Ganelon !
N'eo ket dre vailhantiz, hogen dre dreizon !

GANELON
Bihanaat 'ra an niver a hini da hini,
Rak mar boac'h kent pevar, ne d-oc'h mui nemet tri !
Ha me 'n hini kentañ, dre va holl nerzh-kalon,
A lakaas disparti etre Vibien Emon !
Pa 'm eus lazhet Richard, kalonekañ anê,
Am bezo ar re all ivez hep pell dale.

RICHARD Arabet, Ganelon, e rafec'h ho pompad
Ho pe bet va buhez diwar re varc'had-mat !
P'hoc'h eus gaset din gourvez, c'hwi 'rank ober ivez.
Tra evit tra bepred, buhez evit buhez !

(Lazhañ a ra Ganelon)

GANELON O ! Tizhet on ganit e kreiz poull va c'halon !
Gwerzhit dezhañ va maro, va c'henderv idelon.

RICHARD Bramañ omp 'n am baset, Ganelon infidel :
Mar d-on koulz ha maro, te zo nes da vervel.

PEVARE DIVIZ

(Renod, Alard, Gichard, war ar roc'hell; Richard, ez traon)

RENOD Pelec'h emañ Richard ? Lavarit, va breudeur...
Mar hon eus en kollet, hennezh zo ur gwalleur !

GICHARD Siwazh ! M'en gwel ouzh traon war an douar e-blat.
Maro eo, am eus eon, ha bouzet en e wad.

RICHARD (E vouzelloù etre e zivrec'h)
Ne oufen ket bevañ, pe 'm be kalon houarn :
Setu va bouzelloù hall etre va daouarn.
Al loarc'hus Ganelon a zo bet va Ankou :
Setu eñ astennet e-tal va zalonoù.

RENOD (Diskennet diwar ar roc'hell)
Lazet omp da repez un nebeudig amzer.
Deut etre va divrec'h, ma ho ped, va breur ker,
M'ho tougin war ar roc'h da gemeret an aer.

PEMPVET TAOLENN

(E Montalban)

DIVIZ

(Goustard ha Mojiz)

GOUSTARD Va c'halon 'barzh va c'hreiz a freilh gent ar glac'har
'Sokjal en dreitourach 'ruer war an douar !
Siwazh, marc'hegourien ! Goude kemant a boan
Hoc'h eus bet gouzañvet o tifann ar vro-mañ,
Ez oc'h bramañ kaset d'hoc'h enebour brasañ
Evel kas en deñved d'ar bleizi da degañ...
- A ! Plaeenn Vokoulour ! Pebezh enor dit-te !
Rak ar geot glas enout a vo dourast feteiz
Gent gwad yac'h pevar den, kalonekañ biskozh
Zo bet war an douar hag ivez er mor glas !

MOJIZ Ne petra 'c'hoarvez deoc'h, va mignon ker Goustard ?

GOUSTARD Den jenerus Mojiz, pebezh mezh ha glac'har !
Deou c'hent den armet zo war Blaeenn Vokoulour,
Deut evit kemeret Renod hag e vreudeur !

MOJIZ A ! Vad a rafe din-me da zispenn gent va dent !
Perak, den dialeal, ne levas-te kent ?
Piv zo da demall c'hoaszh e-barzh an dreizon ?

GOUSTARD Ato, ar c'hent Anjou, Mcebandel hag Anton.
Hogan evit Ektor na kennebust Javre
Biskozh ne asantjont d'an dreitouriazh-se.

EKTOR ha JAVRE (D taqouszhout)
O Mojiz ! scep hall da Blaeenn Vokoulour,
Rak traitouret eo bet Renod hag a vreudeur !

MOJIZ D'an armoù, tud a galon a gestedl Montalban !
Deut buan da vedon emañ, bras ha bihan !
Tao'hit a zizien, Goustard ! Deoust n'on ket drok.
E stagin koulakoude lon ha c'hwi e kroug !

C' H W E C' H V E T T A O L E N N

(E Vokouleur)

DIVIZ

ALARD Mar karfec'h-hu, Renod, distreiñ da Vontalban
Da gerc'hat hon arme evit hon dilivrañ...

RENOD Biken n'ho kuitain, o va breudeur garet,
Keit ma vo ur strilh gwad e-barzh va gwazhied.

ALARD Erru int ederre da ober dimp asot !
Ret vo dimp, am eus eon, en am rentañ, Renod,
Rak ma 'm eus em morzhed ur gouli 'zo kruel,
Ha Richard, a welen, a zo war-nes mervel.
Ken dinerzhed on-me m'ou dare da samplañ.
Ne d-oc'h mui nemet daou evit stouarn ouzh daou c'hant.

RENOD Penaos ! Ha daoust ha c'hwî, va breur yaouank Alard,
Ha pe c'hoant lavarout e vefec'h ur bestard ?
Ne d-oc'h ket, m'hen seur, ur breur gwirion dimp-ni
M'hoc'h eus ar soñj hepken da zont da baltronif.

RICHARD N'eo ket en em rentañ, Alard, a lavarit ?
Ya, mar hoc'h eus c'hoant emberr bezañ krouget !
Ma ho ped a galon, Renod, va breur fidil,
Tennit va mouchoer e-maez eus va godell.
D'en eken en-dro din gant un nebeut skoulmoù
Evit gallout darc'hel em c'hof va bouzelloù.
Ma'z in c'hoazh d'an emgann kent eget ma varvin.
Keit ma vin e buhez, biken n'en em rentin !

RENOD Bennozh Doue d'an eur ma voas ganet, Richard !
Hemañ en deus kalon, ha te a glev, Alard ?

ALARD Me zo keizkent ha c'hwî prest da vont d'an argad !

RENOD Eomp 'ta, va breudeur, evel pevar baotr mat.

RIPUZ Me 'gred eo bet Richard gant Mojiz bizitet,
En deus dre e ardoù bet e resusitet !
Klevet em boa e oa toullt e vouzelloù ?
Hag emañ ar c'hentañ o redek d'an armoù !

RICHARD N'hoc'h eus ezhom, Ripuz, da gomz dimp a Vojiz !
Mar gouezfe hon doere e ve start ar barti !
N'ho po ket hor buhez, Frañsizion, marc'had-mat :
Douzaet e vo feteiz ar blaenn-mañ gant gwad !

GALERAN Parbleur ! Evit un den a zo divouzellet
E parlennez, Richard, lorc'hus hag efrontet !

(Goude ur c'hrogad emgann, e adpign Mibien Emon
war ar roc'hell)

RICHARD A NORMANDI
Biken n'o c'hemerimp ! Petra a delv dimp-ni,
Pa ne c'hellomp tremen etre ar roc'h hag i ?
Adelek ma c'hellont pignat war ar garreg
Dindan an taolioù mein e reont dimp redek !

DJER (A sav en e sav hag a zou etre an div gostezonn)
Diskuizhit hoc'h armoù, Aotronez, p'ho pedin,
Evit ma parlantin c'hoazh gant va c'hendirvi.

SALAUN A VREIZH
Roit pasianted gant kement-se, Djer,
O c'hemer da gentañ eo a zo da ober.

DJER Me 'bromet da Zoue neb oute a stoko
Pa vin o komz oute, me keizkent en lazho !
Spontus, va c'hendirvi, e talc'hit d'ho pennad !
Mar karfec'h 'n em rentañ a rafec'h un dra vat,
Rak ni 'gavfe an tu, an Tadoù Frañs ha me,
Da ober hoc'h emglev a-kichen ar Rous.

RENOD Nann, nann ! Divizet eo : mar varvomp, e varvimp !
Divizet start eo bet : biken n'en em rentimp !
Met va c'hendevz Djer, va selaouit d'ho tro :
Tec'hit prim ho kilhoù, a-hand-all oc'h mero !

DJER Renod, n'ho kavan ket ur marc'heger leal :
Goude klesk ha kolenn, 'tait d'am c'haketal !

- RENOD Kaked ebet n'ez eus, Ojer, e kement-se :
Me 'wel erru Mojiz ha gentañ un arme !
- OJER An diaoul ruz en deus bet disklaeriet da Vojiz
Penaos e oa 'n afer... Aotronez, skarzomp-ni !
- MOJIZ Gortozit, treitourien, kenseurtes da Charlez !
Perak e tiskouezit talonoù ho potez ?
- RENOD A ! Kenderv kalonek ! C'hwi a zo hon rekour !
Maro oamp holl bremañ panevet ho sikour !
- ALARD Pareit hon goulioù, me ho ped, va c'henderv...
Panevet hon nerzh-kalon, e oa poazh an afer !
- MOJIZ Mar gellit erruout e kastell Montalban,
Me ho kraio raktal ken yac'h ha pep unan.

S E I Z H V E T T A O L E N N

(Dirak dor ur manati)

DIVIZ

(Ion, e sekretour, hag ur manac'h)

- ION Setu me gwall nec'het, Goustard, va sekreter :
Ar pevar Mab Emon a zo o tont d'ar gêr...
Rak-se em eus soñjet kuitaat va holl c'herent
Ha mont sioul ha didrouz e-barzh en ur gouent.
Pa vin manac'h eno em eus an esperañs
Ne glasko ket Renod skeiñ warnon e venjañs.

(Skeiñ a ra war an nor; ur manac'h a zigor)
- Va zad, me zo bremañ inspiret gant Doue
Da vonet da vanac'h ar rest eus va buhez.
N'ez eus dre ar bed-mañ Roue nag Impalaer
A gement ve bepred diwallet a walleur.
Ur gwall zegouezh a zo c'hoarvezet ganin-me
Hag e glaskan repu da salviñ va buhez.

AR MANAC'H

Antreit er gouent, m'ho ped, Roue Ion.
Ni 'roio deoc'h repu aus a greiz hor c'halon.



Ar venec'h o tegemer ar roue Jon

E I Z H V E T T A O L E N N

(E palez Charlamagn)

DIVIZ

CHARLAMAGN

Gant dibasianted e c'hortozan an eur
Ma tegouezho va zud a Blaenenn Vokouleur
Da rentañ em galloud e vreudeur ha Renod
Evit bezañ krouget pe dorret war ar rod.

ROLANT

Evit gwir, va eontr, me 'gav e taleont
Da zistreiñ war o giz gant bugale Emon.

OLIER

Mar glevas o c'henderv, Mojiz an achantour,
Penaos e oa 'n afer, eo redet d'o sikour.

OJER (O tont eus Vokouleur)

Biskoazh n'en em gavis ken mezhak, va Roue,
Evel ma 'z on bremañ dirak ho Majestez !
Setu ni distroet eus Plaenenn Vokouleur
Hep bezañ kemeret Renod nag e vreudeur...

CHARLAMAGN

Ne c'hellan ket kompren penaos an div arme,
Kant gwaz kreñv hag armet e pep hini anê,
Ne d-int ket deut a-benn da gemeret pevar,
Pe neuze d'o ledañ maro war an douar !

NEM

Kerent ar Rouanez, Foukez ha Ganelon,
'zo bet lazhet, siwazh, gant bugale Emon...
Met i, n'ouzon penaos, a salv o buhezioù !
Ne gavfed ket ul lec'h a-grenn en o c'horfoù
Na ve holl gouliet gant an taolioù kleze,
Ken e ruzie ar geot gant ar gwad dioute.

IOELON

Pa gredemp bout war-nes da gemer anezhe
Eo degouezhet neuze Mojiz gant un arme.

SALAUN
Me 'lavero un dra 'zo gwir, va Impalaer :
N'eo ket tud naturel Renod hag e vredeur.
Ar re-se zo monetroù dreist-natur bet krouet
A zo kalonekoc'h kalz eget leoned.
Genelon a skoas e-kreiz e gorf Richard.
Me 'gred e treantas anezhañ part ouzh part :
En e zivrec'h edo gantañ e vouzelioù
Pa lezhas Genelon e-kichen e seulioù !
Ha ken digoustiñs me refs ur c'higer
E lekaas eran dreizhañ ur mouchouer
Da zerc'hel en e gorf e vouzelioù ha gwed,
Hag evel ul leon e lammes d'an argad !

ROLANT
Al louarn dre natur a zo bepred lostek;
Hag ar c'hed a zo rouz ha bepred dilostek...
Hag evit disklaeriañ deoc'h fraez ha sklaer va son
Djer zo naturel dezhañ bezañ poltron !
Biskoazh den kalonek ne voe eus e lignez,
Ha setu n'hell ket eñ dont da vezañ ivez !

OJER
Doujañs d'an Aotronez a zo amañ prezant !
E-kreiz da zaoulagad te 'lavar gaou, Rolant !
Eus a gen koulz lignez ha ta on-me moarvat,
Hag un nebeut gwelloc'h mar bez sellat ervet !

ROLANT
C'hwi zo aet d'acu c'hant den a dud kreñv hag armet
Da gemerout pevar, ha c'hoazh n'hoc'h eus ket gret !
Mar bijemp aet tri all ha me da Vokouleur
'vije amañ bremañ Renod hag e vredeur !

OJER
O Rolant ! me garfe, pa gomzit ken ampart,
en em gavfe ganeoc'h Renod war gain Boiard !
Neuze, a lavaran, e ve waxmoc'h ken tann
M'ho po c'hoant da gentañ da gitaet an dechenn !

ROLANT
Bet' an eur a vremañ n'am eus ket kavet c'hoazh
Ur marc'heg a goment a drofen rak e fas.
N'am eus ket ar gredenn, evit un den hepken
e prizfen da gentañ mont diwar an dechenn.
Torret vez gent Olier va diskouarn bemdez
Gent ar meulodioù diwar ar Renod-se.

RICHARD A NORMANDI

Ojer zo kalonek, m'hen tou deoc'h, Aotronez.
Greet en deus e zavar, ha ni hon eus ivez.

CHARLAMAGN

Rolant, tavit war ae, me ho ped, va niz kar :
Greet e vezo anklask diwar veaj Ojer
- deoust ha Mibien Emon en deus bet espernet -
Hogen evit un dra c'hoazh ez on glac'haret :
Setu bremañ Ion, gaouiat ha fals Roue,
Ha n'en deus ket dalc'hat feal d'e bromesse...
Mar gullfen en dizhout en desped d'e vreur-kaer
E refs e grougaf hep gortoz pell amzer...

UR MARC'HEG

Aotrou Roue, me 'oer pelec'h 'mañ ar gaouiad :
Kuzhet eo 'n ur gouent a zo demdoat d'ar c'hood.

CHARLAMAGN

Rolant hag Olier, gant va holl Varoned,
M'ho ped da vont raktal, prim ha prim, em rekad,
Raktal d'ar gouent-se evit kerc'hat Ion
Evit ma vo krouget war lein Menez Fokan !

ROLANT

Impalaer galloudus, pa blij d'ho Majestez
Fiziañ hoc'h armead en Olier ha me,
E rantimp deoc'h fenozh ar fals Roue Ion
Hep doujañ e gerant, ar pevar Mab Emon.
Ha mar fell da Renod sprout start e groc'hen
N'en deus nemet tostaat evit en em zifann...
Kenavo deoc'h, Aotrou, ni a ya en hon tro !

CHARLAMAGN

It eta, Aotronez, Doue d'ho tiwalle !

NAVET TAOLENN

(E Montalban)

DIVIZ

(Klara hag he daou vugel - Renod hag e vredeur)

KLARA Me 'laver gant glac'her deoc'h, va zaou grouadur,
N'em eus mui er bed-mañ nemet displejadur
Pa ne welan distro ho tad hag e vredeur :
Aon am eus e va bet traitourach 'n o c'heñver.

EMONIG A drugarez Doue hag ar Werc'hez Vari
Me 'wel erru va zad, e vredeur ha Mojiz.

KLARA Va fried kaezh Renod, me 'm boa kalz a soursi
Pa ne welan distro nag ho predeur na c'hwi.

RENOD Ne deuit ket re doet, pe me ho pellaio !
Biken ne c'houzañvin ho lignez war va zro !

EMONIG Perak, va zadig kaezh, oc'h-hu ken kounnaret ?
Maz 'eus bet traitourien, n'eo ket ni a zo bet !

RENOD Kerkoulz hag hoc'h eontr c'hwi a vo traitourien
Maz lezer oc'henc'h war an douar da ren.

KLARA M'ho pijs, va fried, heuliet va ali-me,
N'ho pijs ket lakaet e dañjer ho puhez !

RICHARD Gwir e lavar, Renod. Va breur, pardonit hi.
Maz karjemp, c'hwi ha me, bezañ sentet outi,
Neomp ket set dizenn da Blaenenn Vokouleur :
N'hor bijs ket fiziet e komzoù flour ha breur.

RENOD 'Balamour deoc'h, Richard, va breur, m'o fardono,
Hag a greiz va c'halon dezhe me e boko;

(Pokat a ra d'e bried ha d'e vugale)

Trugarekaomp Doue hag E vamm ar Werc'hez
P'hon eus gallet diflip' a dre deouarn Charlez.
Eomp gant levez da leinañ, va zad ker,
Ion a vo paset e koulz hag an amzer !

(Azezañ e reont ouzh teol, nemet Richard e servij)

DEKVEJ TAOLENN

(Direk ar manati)

DIVIZ

(Aotronez Charlemagn - ur manac'h - Ion)

OLIER Ken skeñv ha ken buan ez omp deuit dre an hent
'omp dija degouezhet a-kichen ar gouent.

(Rolant a sko war an nor)

AR MANAC'H

Perak ne lavarit-hu : Deo gratias
E-lec'h skeñv evelas ken kreñv gant ho penn-bazh ?

ROLANT

N'emaomp tamm amañ gant pedennoù bremañ !
An traitour fell Ion, deoust ha palac'h amañ ?

AR MANAC'H

N'oufen ket, Aotronez, lavarout ee deoc'h-c'hwi.
N'eo ket bet pell e zo war-dro hon abati.

OLIER

E-kreiz ho tsouled, manac'h, c'hwi 'lavar gao !
Ret vo deoc'h en zentañ, pa m'ho pako ho taou !

ROLANT

N'eus mui nemet daou c'her da beurganañ ar son !
Maz ne garit zentañ dimp ar Roue Ion,
Me hen tous amañ, kent me'z aimp en hent
E lakomp an tan, manac'h, an ho kouent
Ha c'hwi e zeuy gant ivez bremañ soudan...
... Alo ! kerden amañ, na toufar d'en eren !

AR MANAC'H

Na rit ket a zroug din, Aotronez, m'ho supli !
Ha deut holl a vaged ganin en abati !
Mar gellit e gavout, kemerit anezhañ,
...rak me ne c'hallan ket lavarout pelec'h 'mañ..!

(Kleek a reont)

ROLANT

Souezhus-bras e vefe ne gavfemp anezhañ..
A ! parbleur ! j'arnigoa ! eed' ar marmouz amañ !
A ! Manac'h difroket ! A ! Ion, fals Roue !
Pezek 'ta n'hoc'h eus-hu dalc'het d'ho promesae ?
Prometat start ho poa rentañ e Vokouleur
D'ar Roue Charlamagn, Renod hag e vreudeur.
Ne d-eo ket deut an taol 'vel ma oa esperañse,
Rak-se deuit ganimp da c'houzañv ho setañse !

ION

Piv bennak am tamall, Rolant hag Olier,
Evidoc'h n'hoc'h eus ket digarez d'hen ober !
Aet e oant davedoc'h, hag i dizarmet kloz.
Mar n'int bet kemeret, n'eo ket me a zo kaoz !

OLIER

Pa ne gouezhas Renod dimp etre hon daouarn,
Eo c'hwil a vo krouget. Evelse 'mañ ar varn !
- Area ! Kerden amañ evit eron Ion !
Emberz e vo krouget war lein Menez Fokou.

UNNEKVET TAOLENN

(E Montalban)

DIVIZ

(Renod hag e dud ouzh taol)

GICHARD (D tont er sal)

'Maint o vont da grougañ war lein Menez Fokou
Ar peourkeszh reuzeudig, ho preur ar Roue Ion.
O Renod ! Erzet eo gent ar Fransizian !
Ho peziñ ar vadelezh da zonet d'en difenn !

ALARD

Krouget berr ra vezo, an treitour digristen !
Gonezet mat en deus ! Hag ivez kalz ouzhpenn !

RICHARD

Mar o defe ezhomme ur gordenn d'e grougañ
Me a roio dezhe arc'hant 'vit he frenañ !

FOSON

Pec'hed bras e kavfen reiñ nap sikour dezhañ :
Ne d-eo ket dre e faot n'omp ket maro bremañ !

GICHARD

Koulskoude e kredan, evit hon enor-ni,
E rafemp kalz gwelloc'h donet d'e bardoniñ.

RENOD

Klevit mat, va breudeur, ar pezh a lavaran :
Charlamagn a ra se evit hon disfiziañ;
Hag un dra rebechus a ve d'am bugale
Klevout e ve krouget un den eus o lignez

(Sevel a ra diouzh taol)

' C'hanta ! Holl d'an armeù ! Amzer-brezel a zo !
Breudeur he mignoned, heb am c'har am heuilho !
- Gichard, na piv a zo 'penn an daou rejimant ?

GICHARD

Salaun hag Ojer, Olier ha Rolant.

RENOD

A ! Roland en deus c'hoant pell a zo d'am aprou.
Deomp da welout hag eñ a zo du e c'henou !

DAOUZEKVET TAOLENN

(Dirak ar gouent)

DIVIZ

ROLANT

Ne welan ket e kred ar pevar Mab Emon
Diskouez beg o frioù evit sikour Ion...

OJER (Pa wel Renod o tont) :

Gwelout a ran Renod pignet war gain Boiard
O tegouezhout du-hont e penn un armead.
O emgav eurus ha pell a zo c'hoanteat !

Sed' ar wech-mañ, Renod, e vefot kontantet !
Pell a zo ho poa c'hoant kaout krog ouzh Renod :
Bremañ ni a welo piv eo ar gwellañ paotr !

ROLANT 'Vit diskouez deoc'h, Djer, pegement en doujan
Me 'yelo va-unan da benn an hent dezhañ.
Rak-se eta, va zud, 'n em renkit pep hini.
Dreist pep tra ho pedan, diwall a boltronik !

RENOD Va zud, va mignoned, en em renkit, m'ho ped.
Setu hon anebour zo ganimp em gevot.
... Me 'wel arzu Rolant e-unan, Actronez,
Ha me a ya ivez va-unan a vete.

(Renod ha Rolant a dosta an eil ouzh egile.
Renod a ziskenn diwar e varc'h Boiard, a
laka e c'hoaf hag e gleze war an douar,
hag a zaoulin.)

A ! Rolant kalonek ! Niz-tost d'an Impalaer !
Ho pet, mar plij, truez ouzhin ha va breudeur !
En ho servij e vimp e-keit ha me vevfomp,
Mar plij gannoc'h ober hor peoc'h gant hoc'h soutr.
Ha me a roio deoc'h Boiard, ar marc'h kear-mañ,
Ha kastell Montalban, ur c'hastell ar c'hrefveañ.
Ha dre sentidigezh, me 'yelo hep em glemm
Diloer ha divotoù da ober pinijenn,
Ha da bediñ Jezuz hor Salver evidoc'h,
Mar bez ho madelezh ober dimp kaout peoc'h !

ROLANT Truez em eus, Renod... O klevout ho komzoù
'tenere va c'halon hag e skuilhan daeroù...
Met ne gredan ket komz d'am soutr evelse,
'met e rentfec'h Mojiz dinden e volontez...

RENOD Rolant, na gomzit ket a gement-se pelloc'h :
Biken ne dreitourin evit kaout ar peoc'h.
Kent mankout da Vojiz e kollfen va buhez.
Sed' aze va respont : kasit en d'ar Roue.

(Adkemer a ra e armoù hag adpignat war gain Boiard)

Na soñjit ket, Rolant, e va dre eon tazoc'h
E tauis da c'houlenn ouzhoc'h kartier na peoc'h.

Hogen ebalemour oc'h niz d'an Impalaer
'falveze din bezañ seven en ho keffver.
Bremañ 'ta mar kirit, schuomp an argad
Etrezomp-ni hon daou, dre ma'z omp daou baotr mat.
Neuze, mar gonazit, e bev pe a maro,
Va c'hasit d'hoc'h soutr da ober a garo.
Hag er c'hontrol, Rolant, me mar ho konzan,
Ho tegaso ganin da gastell Montalban.

ROLANT Mat eo din evelse, e feiz a varc'heger !
Met c'hoant em eus kentañ da gomz ouzh Olier,
Rak bezañ 'eus pell 'zo etrezomp promesaa
N'em ganno hep hini hep notre egile.
(Mont a ra da gomz ouzh Olier)

OLIER Petra 'fell da Renod, leverit din, Rolant ?

ROLANT Evel den kalonek ha den fur e parlant :
Falvezout 'ra dezhañ schuif an argad
Etrezomp-ni hon-daou, dre ma'z omp daou baotr mat.
Nag hon tud nag e ra n'en em dostaent ket
Ken e vezo unan ac'hanomp-ni trec'het.

OLIER Rolant, mar em c'hredit, na rit ket kement-se !
Renod zo kalonek, ha c'hwi a zo ivez.
Gwell ve koll an hanter a dud a bep kostez
'get hini ac'hanoc'h : esd' va ali aze !

RICHARD A NORMANDI
Nann ! Nann ! Na rit ket se ! Na rit ket se, Rolant !
Lezit an div arme da vonet d'an emgann !

ROLANT Me 'heulio hoc'h ali, Actronez, penn da benn.
Decomp eta asembles war hon anebourien !

RICHARD (Da Renod)
Va breur, me hoc'h asped, klevit va santimant :
Arebat deoc'h 'n em gann hoc'h-unan ouzh Rolant.

RENOD Kear hoc'h eus lavarout, va breur, me a ranko
Korf ouzh korf ouzh Rolant etourm betek ar maro.

Rak emañ pell a zo o klask c'hoari ouzhin :
Pa'z omp en em gavet eo ret dimp argadiñ.
Rak-se 'ta, mar ne deu nemetañ va beta,
Chomit en ho plesoù, me ho ped, Actronez.

MOJIZ
Ober 'zeimp, Renod, evel ma lavarit.
Hogen, na me ho ped, va c'handeriv, diwallit :
Emaoc'h o vont da gann ouzh krefivañ marc'hager
A daol troad d'an douar, hervez ma leverer.

RENOD (a zeu e-unan etrezek ar frañsizien, met i a zeu holl)
Ne welan ket e talc'h Rolant e bromesee :
Prometet en doa dont e-unan-penn din-me !

RICHARD
Perak 'ta, tud Charlez, didalvez ha polttron,
E fall deoc'h distrujañ ar Roue fall Ion ?
Hogen ni eo ar re a die a gastizañ.
P'hoc'h eus an kemeret, c'hwi 'ranko a rentañ !

IZAKAR
Mar gellomp-ni teurel hor c'hraban d'ho kouzoug,
Ni ho stago gantañ istribilh ouzh ar groug !

RENIER
O ! Ni 'herzo ouzhoc'h, pa garfec'h hen ober !
Hastomp, va mignoned, tennañ hor c'hlezaier !

ROLANT
Non de mil krapouezhenn ! Palec'h emañ Renod ?
Ma welimp en taol-mañ piv eo ar gwellañ paotr !

RENOD
Emaon ouzh ho kortoz gant dibasianted.
Pell a-walc'h oc'h-hu bet a-raok en em gavet !
Douit genin, Rolant, hon-unanoù er c'hoad,
Hag eno etrezomp 'echuimp ar c'hrogad.
(Mont a ra d'ar c'hoad)

ROLANT (d'e dud)
Ma 'garfe e lezfec'h ac'hanomp, Actronez,
D'echuñ an emgann etre Renod ha me...

RICHARD A NORMANDI
Dapust he posubl e ve, o c'hwi Tadoù a Frañs,

E vefemp digalon, lezel en hor prezañs
Daou zen d'en em lazhañ, kalonekañ biskoazh
'zo bet war an douar a-zinden an oabl glae ?

(Rolant a red d'ar c'hoad, met ar frañsizien a red
war e lezoc'h)

RICHARD
Gwazh a eo d'an hini am bezo-me taget !
Kemerout a ranken, pa vezaf kemeret !
(Mibien Emon, war e lezoc'h, a red ivez d'ar c'hoad.
Al leurenn-c'hoari a chom goull.)

C'HWEC'H VET L O D E N N

H A K R O U G E T E V O R I C H A R D H A M O J I Z ?

KENTAÑ TAOLENN

(Er c'hoad)

KENTAÑ DIVIZ

(Ojer ha dazn eus ar Frañsizien - Rolant o tirlukañ a-veak ar gwez)

OJER Dre ul lec'h enk, Rolant, ez oc'h bet tremenet,
Rak ho tilhad a zo roget ha defrezet !
Ma 'soñje teuje Renod da brizoniad ganeoc'h :
Evidon da sellout, n'en gwelan e nep lec'h...

ROLANT Dizesperañ a ran gant an displijadur !
Kaer em eus bet redek dre'r gwez heg ar glazur,
- nemet gant ardoù Mojiz vijen bet echantet -
Renod gant eon ouzon a rank bezañ tec'het.

EIL DIVIZ

(Richard, o tagouezhout war o lorc'h)

RICHARD A ! Rolant den lorc'h, taolit ur sell ouzhin !

ROLANT A rin sur, Richardig, ma 'c'h eus c'hoant da c'hoari !
Me az kav ifrontet spontus, Richard bihan,
Donet d'em disfizien aze, te da-unan !

RICHARD Divizet mat em eus, ha ne ran forzh abet !
Kemerout a zenkan, pe vezañ kemeret !
(Holl soudarded Rolant a sailh e-maez ar c'hoad, war
Richard. En em zifenn a ra kalonak)

UN OFISER A FRANÑS

N'hon devesus c'hoant abet d'ho lazhañ, kamazad !
Mar kirit 'n em rentañ, ho pezo kartier mat !

RICHARD

Deoc'h-hu en em zentan, Rolant, n'eo ket d'un' all,
Abalamour ma'z oc'h marc'heg reizh ha leal.

ROLANT

Hag ho pezo, Richard, bezit dinec'h war se -
- Eomp bremañ, Aotronez, holl davet va eontr
Evit e frealziñ ha rentañ dezhañ kont.

E I L T A O L E N N

(ur c'horn all eus ar c'head)

K E N T A Ñ D I V I Z

(Renod - Salaün ha Fransizien a zegouezh gant Yon)

RENOD (E-unan)

Na pelec'h eo manet Rolant en den gaouist
Ma ne zeu davedon d'echuiñ an arpad ?
- Hogen me 'ghev erru ur re 'trezek emañ.
Moarvat emañ Rolant o tonet en taol-mañ.

(O anavezout Yon gant Salaün, e lavar :)

A ! C'hwi eo, Salaün ? - Hala, pezh divergont !
Diskrogit, me ho ped, diouzh ar Roue Yon,
Pe gant va flamberje me ho taouhantero.
Kastizet e vo, met n'eo ket c'hwi hen graic !


SALAÜN

Pa 'fell deoc'h e gaout, vo zoet deoc'h Renod !
Ne señjit ket moarvat e vefemp-ni ken sot
D'en em lekaet e poen evit un den treitour.
- Eomp ac'han, va zad, pa n'hon eus ket sikour.

E I L D I V I Z

RENOD (da Yon)

A ! Roue displeal, treitour fell milliget !
Goude m'hor bos ni ac'hanout sikouzet



Richard a-enep ar c'hallaoued

Ez out aet d'hon gwerzhañ d'an Impalaer a Frañs !
Bremañ ez po ar groug evit da rekompañs !

YON (en em strink d'an daoulin)

Ya, va breur-kaer Renod, me 'zeu d'en em rentañ,
Mervel sur a dlean dre ar maro krishañ !
Rak-se, na me ho ped, tennit prim ho kleze
Ha gant ho torn leal, troc'hit din va buhez.
Un den ken fall ha me ne dle pelloc'h bevañ :
Hastit buan eta donet d'am c'hastizañ.

RENOD

P'ho kwelan dirazon hoc'h anaout ho faot
Em eus truez ouzhoc'h, dre va feiz a Renod !
Savit prim en ho sav, deuit da Vontalban;
Me 'roio deoc'h du-hont amzer piniennañ.

TREDE DIVIZ

(Gichard hag Alard da gentañ, ha Mojiz goude, a zifluk a vesk ar c'hoad)

GICHARD

Ha paket eo Yon, ar Roue displeal ?

RENOD

Kemeret eo, Gichard. - Pelec'h emañ 'r re all ?

ALARD

Me 'gred int aet war-lerc'h Olier ha Rolant...
- Setu bepred Mojiz o teredek amañ.

RENOD

Mojiz, va c'henderv ker, pelec'h emañ Richard ?

MOJIZ

Me 'soñje e oa deut gant Alard ha Gichard.

RENOD

A ! Siwazh ! Graet an taol ! Kemeret eo gante !
Dizesperañ a ran pa sonjan kement-se !
Kollet em eus feteiz, ar gwellañ a'r breudeur !
- Me 'ya, koll pe c'honit, da zilivrañ va breur.
Kasit ar Roue Yon da gasteñ Montalban.
Bevit 'vel mignoned. - Monet kuit a rankan !

GICHARD

O ! Gortozit, Renod ! Spontus oc'h glac'haret !
Arabat e c'hoarvez ar pezh a lavaret !
Mar d-ec kollet Richard, eo 'vidomp ur c'holl bras.
Met ho koll c'hwî, Renod, a vefe gwashoc'h c'hoazh !

MOJIZ

N'ho pezit nec'hamant evit Richard, Renod.
Bramañ-souden rektal me 'c'hoario va faotr :
Me 'rento deoc'h Richard e-bev, hep droug ebet,
Ha pa ve kloz warnañ daouzek dor alc'houezet ?

RENOD

Bezit asur, Mojiz, ha va breudeur ha me
A vo ansoudek, mar karit ober se !

MOJIZ (O wiskeñ dilhad pelerin, ur vazh en e zorn)

Area, va zud, klevet hoc'h aus bet lavaret
Ez eo Mojiz un den soutil bras hag adret.
Me 'ya da ziskouez darn aus va soutilite :
Bramaik me a ya da dromplañ ar Roue.
Bezañ 'm bo digantañ ur gaer a aluzon,
Un tammig pred 'vez marteze en tu-hont.
- Met va brasañ soursi eo dilivrañ Richard.
Ret eo din e gavout, pe vo an afer start.

(Mont a ra kuit)

TREDE TAOLENN

(E palez Charlamagn)

KENTAN DIVIZ

CHARLAMAGN

Anken ha nec'hamant a zo war va spered
Pa zeuan da sañjal deoust palec'h eo manet
Rolant hag Olier, Djer ha Salomon,
A oa aet da gerc'hat ar fals Roue Yon.
Rak met tegouezh gante nep esurt drouk-aventur
E vin-me glac'haret gant an dieplijadur.

NEM

Un dra dreist-ordinal ma vefe c'hoarvezet
Na droug na gwell ebet, Aotrou, gant ho Priñsed.
Berrek int da lakeat an douar da grenañ...
Bezit 'ta divorc'had war ee, m'ho ped amañ.

UR FLOC'H

Ma vefe 'n em lakeat ar Pevar Mab Emon
Da ñea kas gante ar fals Roue Yon
A-dre daouarn ho tud, 'm aus son, va Impalaer,
E c'hellfe bezañ bet etreze ur gwellaer.
Rak Rolant, pell a zo, a glask aprou Renod,
'vit gouzout pehini a vo ar gwellañ paotr.

EIL DIVIZ

(Mojiz a zegouezh, gwisket e pelexin)

MOJIZ

Doue Holl-C'halloudek, Mestr an Nañv ha'n douar,
A beden, Charlamagn, d'ho peurgargañ a c'hloar.
M'hoc'h asped gant doujfañ, o Impalaer gwirion,
Da sellout a-druez hag a gompasion
Duzh ur pelerin paour diskaret gant kleñved :
Diouerout a ra din ha bevañe ha yec'had.

CHARLAMAGN

Ne c'hellan ket fiziout, trucherien, ennoc'h-c'hwî,
Abaoe m'on bet tromplet gant ar sorser Mojiz.

MOJIZ

Evit bezañ Mojiz den fall ha milliget,
Ne d-ec ket eveltañ an holl belerined.
Me 'm aus mui a ezhom da gaout aluzon
Eget n'em aus ezhom da ober treizon.
- Bez' e oa c'hoazh ganin pevar belerion all.
Siwazh ! Lazhet int bet gant meur a hailhon fall
E-kichen Montalban. Hervez tud ar c'hanton
E oa 'n hailhoned-se ar Pevar Mab Emon.
Hag unan 'oa gante a zo anvet Mojiz.
Hennezh en deus brevet din va holl izili.
Bazhetet on gantañ, troet ha distroet,
Ken ez on bet seizet en doare ma walet !
Rak-se hoc'h aspedan, Aotrou an Impalaer,
Da gestizañ 'r re-se, pa n'hellan hen ober.

NEM
Aotrou, ar pelerin a barlant gant rēzon;
Gouezet an deus, sur, resev an aluzon.

CHARLAMAGN
Dal hanter-kant louiz acur 'balamour d'ez komzoù !

MOJIZ
C'hwi a zo providaŋs ar paour war an hentoù !

CHARLAMAGN
Petra 'fell dit-te c'hoazh, pelerin, diganin,
Ma chomez evel-es, pag da selloù ouzhin ?

MOJIZ
Evit kement am eus baleet dre ar bed,
Biskoazh va daoulagad n'o bet konsideret
Ur Roue a vefe ken meurdeuzus ha c'hwi !
Rak-se 'm eus plijadur ouzh ho konsideriñ !
C'hwi à zeu da sklaeriañ dreist hoc'h holl sujeded
Evel ma re an heol en a vrasañ sklaerded !

CHARLAMAGN
Klask a rit, pelerin, lakaat lorc'h em c'halon
Da chinañ diganin un tamm kolasion !
Duk Nēm, kerc'hit dezhañ peadra da zebriñ
Ma paouezo da sellout ken truezus ouzhin !

NĒM
Mont a ran da gerc'het evitañ peadra...
Dalit, pelerin paour, friko da verennañ.

MOJIZ (Dutañ e-unan)
Kement-mañ am eus bet etav evit talvoud.
N'ez in ket, a welan, hep pourvezañs am roud !

TREDE DIVIZ

(An hevelap re - Rolant hag ar re all gant Richard)

CHARLAMAGN
Ret eo soñjal pelec'h ez eo manet hon tud.
Met me o gwel arvu evel dre ur burzhud !

ROLANT
Greet hon eus ur veaj, Aotrou an Impaler,
Ha n'eo ket, am eus aon, da blijout deoc'h nemeur !
Kemezet hon bijs ar fale Roue Yon
Nemet eo bet laeret gant Pavar Mab Emon
Hag o deus greet kement dre holl nerzh o armoù
M'o deus en diframmet a-dre hor c'hrabanoù.
- Evit reiñ koulekoude un dra 'levenez deoc'h,
Richard, mab da Emon, a zo deut an e lec'h.

CHARLAMAGN
A ! Va niz ker Rolant, laouen e lavarin,
Ne dalvfe ket hen nac'h, ho peaj a blij din !
- A ! Richard, kozh hailhon, ezru eo an amzer
Ma vo ret dit gouzafiñ ar pouez eus va c'hounner.

RICHARD
Kait ha me vo Ronod ha Boïard e buhez
Ne refot din nep droug. - Me ho tisfiz da se !

CHARLAMAGN
Hag out ken divergant dont c'hoazh d'em disfiziañ !
Abalamour da se, me rey da grougañ !

RICHARD (O ansout Mojiz)
Kent ma vin-me krouget, Charlemagn, ha c'hwi 'glev ?
Me a welo kentoc'h ho krougañ c'hwi e bev !

CHARLAMAGN
Pensae ! Kozh mab ar c'hagn ! Evelse eo dit-te
Parlant ken divergant e dirak ar Roue ?
Warc'hoazh kentañ sur-mat, kerkent ma vo leiniet,
War lein Menez Fokan e vefot-hu krouget !
(Mojiz a ye e-maez sioulrik)

PEVARE DIVIZ

(An hevelap re, nemet Mojiz)

CHARLAMAGN
Na, gwelomp bremañ piv a grougo an traitour
- C'hwi, Beranjar, paogwir ez oc'h deut d'am aikour,

Me ho ped da grougañ Richard, Mab da Emon
Hag ho po douaroù Bro-Flandrez, va mignon.

BERANJER

Ret e vefe ho pe evidon disprizafe
Pa gredit va lakaat e servij ar potaße !
Ne grougin na Richard nag hini all ebet.
Gourc'hemennit traoù all, e vefot servijet.

CHARLAMAGN

It da grougañ Richard, me ho ped, Idelon,
Ha me a roic deoc'h rouantelezh Gwaskogn.

IOELON

Diskargit ac'henon, Aotrou, a gement-se.
Ur wech all, m'hoc'h assur, e rin ho polontez.

CHARLAMAGN

Deoc'h e tamaller, Djer, war blaenn Vokouleur,
Ho pefe espeznat Renod hag e vreudeur.
Rak-se, mar hoc'h eus c'hoant da vezañ din mignon,
It raktal da grougañ Richard, mab da Emon.

DJER

Ha c'hwi 'soñj 'on ken sot, lavarit din, Charlez,
E Krougfen-me Richard, 'zo va c'henderv-gompez ?

CHARLAMAGN

M'ho ped, va niz Rolant, c'hwi 'zo den a galon,
Hag a zo enebour da vugale Emon ?...

ROLANT

Ne grougin ket Richard, va Eontr, va Roue :
Prometet 'm eus dezhañ en dije e vuhez.

CHARLAMAGN

Ra viot milliget, hailhoned didalvez,
Pa ne fell ket deoc'h-hu ober va bolontez !
- Salaün, c'hwi 'zo bet dalc'hmataz un den fidel
Hag a zalc'h dindanon ar vro a Vreizh-Izel;
It da grougañ Richard, me ne fell d'az re-mañ,
Hag e vefot pelloc'h diskarg d'am servijañ.

SALAÜN

Impelaer Charlamagn, me raic se dinec'h
Gant ma zefot un dra hag e lavarit deoc'h.
Krougañ 'rin-me Richard war lein Menez Fokon
Gant ma tefot ganin ivez da gompagnon.
Ha mar fell da Renod ha d'e genderv Mojiz
En lemal diganin, c'hwi 'zeuy d'am skoazellañ.
- Mar ne rit kement-se, me a lavar dichek,
Ne grougin ket Richard, pa 'm be holl vad ar bed !

CHARLAMAGN

It d'ar groug, kansilhez ! pa ne sentit ouzhin.
- Me ho ped, duk a Nêrn, deuit d'am freslziñ !
(Ar Roue ha Nêrn a ya e-maez)

PEMPVET DIVIZ

(Hevalep re nemet ar Roue ha Nêrn)

OLIER

Droug bras 'zo e Charlez ar wach-mañ, Aotronez,
Biskoazh n'em eus en gwelet ken ferve ha feteiz !

RICHARD A NORMANDI

Gwelout a rit bremañ : 'balamour deoc'h, Richard,
'eus etra ar Roue hag e dud tabut start !
Mar ne c'hellomp ober deoc'h salviñ ho puhez
Ne vimp ket da damall, test oc'h a gement-se !

RICHARD

Me ho ped, Aotronez, n'an em drubuilhat ket :
Ha pa ven-me kaset evit bezañ krouget,
Ha me pignet er skeul, em bo c'hozh esperañs :
Evit kement-se holl, n'am bezo nep c'fañs.
Mojiz em eus gwelet em c'hichen ez gentaoù,
A oa deut da c'houzout panaos edo an traoù.
Hag em eus ar gredann ne vin ankounac'haet
Na gant va breur Renod, na gant e vignoned.

PEVARE TADLENN

(O tagouzhout e traon Menez Fokon)

KENTAÑ DIVIZ

(Mojiz, Renod war gein Boiard, Alard, Gichard.- Soudarded)

MOJIZ Kerkent ha tarz h an deiz e vo Richard krouget.
Setu ni ar wech-mañ, Renod, tost d'an andred.

GICHARD Degouazhet omp amañ 'raok tud an Impaler,
Hag esperañs hon eus da savetast hon breur.
Kuzhomp amañ er c'hoad, ha bezomp war hon gward
Pe da goulz e taouer evit krougañ Richard.
Ha neuze p'o gwelimp o tonet war amañ,
Ez nimp a vagad evit en dilivrañ.

RENOD An ali e zo fur. Rak-se, va mignoned,
Kuzhomp amañ er c'hoad, hep ober trouz ebet.

ALARD Amañ 'traon ar menez, choemp 'ta da c'hortoz.
Pegwir hon eus kuitast Montalben dec'h da noz
E reio kalz a vad dimp mont da ziskuilhañ.
Prest e-walc'h e tizfen menel kousket amañ !
(Gourvezañ e zeont er c'hoad, hag a-raok nemeur a
vanint kousket)

PEMPVET TADLENN

KENTAÑ DIVIZ

(Charlamagn hag an duk a Nêm)

CHARLAMAGN

Petra 'dalv din bezañ Impaler ne Rous,
Bezañ savet uhel e-kreiz ar Vajsete
Ha kaout kalz a dud kelonek war va zro
Pa ne garont sentiñ ouzh va gourc'hemannoù ?
Deoust eta, duk a Nêm, me a c'houlann amañ,
Ne gavfen ket un den a yafe da grougañ
Richard en amprevan war lein Menez Fokon,
En deus greset gaou ouzhon e kel lisa fêson ?

NÊM

Ma cufen, Impaler, n'ho pefe droug ouzhin,
E lavrfan un dra e zo mat, a gav din.

CHARLAMAGN

Hoc'h ali, duk a Nêm, e zo bet fur dalc'hmat :
Lavarit sklaer eta ar pezh a gavit mat.

NÊM

Mar grit krougañ Richard, mab d'an duk a Emon,
Ho pezo nec'hamant e lisa a fêson,
Rak an Tadoù a Frañs a zo kerent dezhañ;
Biken ne bardonint war deuit d'en krougañ.
- P'emañ an ho kalloud Richard, va Impaler,
Roit urzh da Renod hag ivez d'e vruudeur
Dont o-zri da stouñ dirak ho Majestez
Da ober deoc'h al le eus a sujedigezh.
Mibien Emon, m'han asur, Impaler galloudus,
A rain kement-se, hag e viet eñrus.
Grit dezha dic'heousañ ar gaou a deus-l greset
Deoc'h an hoc'h armoù en ozer dremenet,
Ha dont d'ho serviñs ar peuzrust 'o buhez,
Hag e lekfat Richard neuze e liberte.
Mar grit-se ho pezo schuet ur brazal
A zo kiriek, siwez, da galz tud da verval.

CHARLAMAGN

Tevit war gement-se ! Koll hoc'h amzer a rit
Rak Richard, m'hen tous, a rank bezañ krouget.

NËM

Me 'lavar fraez ha sklaer deoc'h hep bezañ treitour
Ne refot evelse nemet sachañ labour.
Daouzek vloaz 'zo bremañ e reomp-ni brezel
Da vugale Emon, hor c'herent naturel.
Mar bijemp bet keit all war ar Serazines
Hor bija niver bras anezhe kristenet.
Bresoc'h anor ve dimp 'n em genn evit ar feiz
Eget ober brezel da dud eus hon lignez.

CHARLAMAGN

Nëm, me a lavar deoc'h, mar d-on Roue e Frañs,
Richard a rank bezañ krouget ouzh ar potañs.

NËM

Hogen pa lavarit 'fell deoc'h e gastizañ,
Dalc'hit-en er prison d'ihanañ da vrasañ
M'en devo paourentez bete fin e vuhez :
C'hwi ho pezo warnañ taolet kastiz neuze !
Rak pa vezo maro, Richard 'n deus c'hoazh kerent
A zo tud kalonek hag a zo hir o dent.

EIL DIVIZ

(Hevalep re - Ripuz, krog e Richard aezet - Actronez all)

RIPUZ

Aotrcu an Impalaer, Richard an tamm hailhon
Eo en deus bet lazhet va soutr Ganelon.
Me 'ginnig e grougañ. Hag ar Priñs Bertelod
Dre un taol displeal 'vos lazhet gant Renod.
Ha Foukez hag Hernier hag an Duk nob Grifon,
A oa holl anavet evel tud a galon.
Mibien Emon 'zo bet an Ankou d'ar re-se.
Met emberr me baso da unan anezhe.
- Rak-se, va Impalaer, roit din soudarded,
Ur bagad tud dispont, kalonek hag armet,
Hag e krougin Richard hep doujañ tamm Renod.
Mar kar diskouez e fri e ray un afer sot,
Rak me en lakeio ivez da gontrepouez.
Gant Richard ouzh er groug - hag e vezimp kitez !

CHARLAMAGN

A ! Ripuz, den leal ! C'hwi a zo va mignon !
Mar grit-se me zoio deoc'h Marseilh ha Toulon !
Ha c'hwi, Kont Galeran, ha c'hwi, Duk Izakar,
It ivez gant Ripuz, 'balamour ma'z oc'h kar.

GALERAN

Krougañ 'raimp Richard war lein Menez Fokou
Pa vezo ouzh er groug vo laouen hor c'halon !

QJER

Me hoc'h all, Ripuz, pa c'houlannit kordenn,
D'ober diouzh ho kouzoug muzul al lagadenn,
Rak mar tagouezh Renod, pa Vojiz e gander, v
Deoc'h-c'hwi e vezo graet pezh a soñjit ober.

(Holl ez sont e-maez, nemet ar re a dle krougañ Richard)

TREDE DIVIZ

RIPUZ

Ara, kerzhit, Richard, etrezek ar menez
E-lec'h ma vo ret deoc'h achuiñ ho puhez.
Ha c'hwi a wel du-hont, Richardig, ur potañs
'Vo warnañ da viken bremañ ho tremez ?

RICHARD

M'ho pefe madelezh da zont d'am dilivrañ
Me 'rofe deoc'h kement em eus war ar bed-mañ.

RIPUZ

Ha pa rofec'h din-me kazañ ma'z eus e Frañs,
Me rank ho kwelout atag e kroug ouzh ar potañs.
Pignit eta er skeul, ma vefot strobilhet :
Poent bras eo peesañ deoc'h pezh hoc'h eus gonezet !

(Lakaat a ra dezhañ ar gordenn an e c'houzoug, hag a ra
dezhañ pignat er skeul)

RICHARD

Ret eo eta mervel. Ne ren forzh evit-se !
Hogen peogwir n'hoc'h eus ouzh va c'horf hep truez,
'balamour da Zoua, gant doujañs ma ho ped,
Soñjit em ene baour gant glac'har treantat.
Ne c'houlennan nemet un hanter-eur hepken
Kent ma varvin, evit ober c'hoazh ur bedenn.
Gant va mamm-gozh, gwechall, he deskie gant fevor,
Ha bemdez he lavaren abaoe, en enor

D'an Aotrou Sant Richard, mignon bras da Zoue
Ma roio din ar c'hras da salviañ va buhez.

RIPUZ Nann ! Nann ! N'ho pezo hanter-eur na kard-eur !
Ret mat eo kas da benn urzhioù an Impalaer.

GALERAN Ripuz, me hoc'h asped, eus a greiz va c'halon,
Da reiñ amzer dezhañ d'ober e orêzon.

RIPUZ Hast eta, reuzeudig, ha na vez ket ze hir :
Lavar prim da bedenn e daou pe e tri c'her.

RICHARD (a ziskenn diouzh ar skeul. Daoulinañ a ra da lavarout e
bedenn. Treiñ a ra e benn a-wechoù da sellout en-dro dezhañ.
Komz a ra kreffoc'h-kreffvañ).

O Doue dreist-muzul, Hollc'halloudek, hollbad.
C'hwi hag hoc'h eus krouet kement tra a zo met;
C'hwi hag a zegasas Ho Mab an Eil Ferson
Er bed-mañ, dre ar boan da baeañ evidon.
C'hwi hag a ziwallas Daniel ar Profed
Gwechall an ur c'havern e puñs al leoned !
C'hwi hag a zilivras ivez tri baotr yacuank
Er gêr a Vablon en ur forniad tan-flamm.
Ar bobl a Izrael, Moïsez, Aaron,
Hag a oa mevelien dindan ar Faraon,
C'hwi a reas dezhe, dre Ho nerzh, Ho vertuz,
Em silañ eus Bro-Ejipt ha treuzañ ar Mor Ruz.
C'hwi a dennas Jonaz eus kreiz korf ar Balen.
- O bremañ, va Doue, selaouiñ va fedenn !
Ho pet ouzhin truez, va Salver, me ho ped,
Pa'z eo ret din mervel, ha me 'kreiz va yec'hed.
Ho pet truez ouzhin, va faeron Sant Richard,
Peogwir on dilezet gant (a-bouez e benn) Renod !...ha Boiard !
(Boiard, o klevout e anv, a sko gant e dreid d'an douar,
ken e strink an tan. Grizinkal a ra spontus !)

RICHARD (izeloc'h e vouezh)
C'hoazh e larin ur ger kent eget ma varvan,
P'am bezo kemezet un nebeut va alan !
(Boiard a ro un taol-troad d'e vestr evit en dihuniñ)

PEVARE DIVIZ

RENOD (Spouzonet, a sav, a denn a gleze, hag a youc'h)
D'an armoù, Aotronez, da zilivrañ Richard !
Aon am eus em c'halon e vemp re ziwezhat.
(Kemer a reont o armoù)

RIPUZ Eürus oc'h-hu, Richard ! ha bremañ me a wel
E vefot dilivret, ha me 'ranko mervel !
Ho pet ouzhin truez, Richard kaezh, me ho ped;
Me a oueze ervet e vijec'h dilivret.
Mar 'm eus ho tegaset da grougañ d'ar potañs,
Ne oa nemet evit sentif ouzh Roue Frañs.

RICHARD Kement-all a druez am bo ouzhoc'h, Ripuz,
Eval m'ho poe ouzhin... ne vit ket morc'hedus !
Rak birviken Renod ne anzavin da vreur
Mar ne ra ho krougeañ war an taol hag an eur !

GALERAN (D redek kuit)
An neb en deuas c'hoant da salviañ e vuhez
A ranko he gonit bremañ a veg botez !

MOJIZ Deuit amañ, Richard, me ho tierein,
Ma krougimp en ho lec'h Ripuz ar furlukin.

RENOD Me ho ped, Aotronez, liet ganin an enor :
Bourev va breur 'fell din kastizañ gant rigor.
(Lazhañ a ra Ripuz gant un taol kleze)
It, Ripuz, da c'houlenn ho kopr ouzh Roue Frañs,
Goude c'hoantaat stagañ va breur ouzh ar potañs !

ALARD Hemañ 'zo un taol brav ha soutil c'hoarist.
Lavarit din penaos ez oc'h bet dihunet ?

RENOD P'en deus klevet Boiard va breur paour o huchal,
En em lakaas gant nerzh ivez da c'hrizinkal,
Hag en deus ouzhpenn-se roet un taol troad din.
Kement-se eo an deus gret din-me dihuniñ.

MOJIZ A ! Boïard, ar marc'h mat ! Meulet ra vo Doue
O vezañ bet krouet ul loen evel-dout-te !

RICHARD Me 'schije ho poa kreñn ankouast ac'hanon !
Ar wech-mañ, mardouchik, eo bet tomm-bras warnon !
Birviken ne oufen reiñ deoc'h-hu da grediñ
Pegement a debut ha pebezh fachiri
'zo etre ar Roue hag holl dud ar palez :
Abalamour din-me emaint holl gwall-zieas.
An holl Dadoù a Frañs o deus graet o gwellañ,
Klasket o deus an tu evit va dilivrañ.
Rek-se e fell din mont dianav betek kêr
Evit trugarekaet Salaün hag Ojer,
Da zegemenn dezhe ne d-on ket bet krouget...
O klevout kement-se e vezint frealzet.

ALARD Gwell risklus eo, Richard ! Diwallit adarre
Ne gouezfec'h c'hoazh ur wech e galloud ar Roue !

RENOD F'en deus da vonet, me 'lezo anezhañ.
Dalit eta va c'horn, ha mar bezit e poan
Pe e-kreiz an danjer, c'hwezhit annañ timat :
Va zud ha me da c'hortoz 'chomo amañ er c'hoad.

RICHARD Dilhad hag armoù Ripuz am eus c'hoant da gaez,
Ma tromplin ar Roue hag e holl varoned.
(Gwiskañ s ra dilhad hag armoù Ripuz)

o o

P E M P V E T T A D L E N N

K E N T A Ñ D I V I Z

(Ojer, Salaün, ha Richard)

OJER Aon am eus, Salaün, 've bet ze ziwzhet
Renod hag e vreudeur da zilivrañ Richard.
Mar d-int bet dilerc'het da reiñ dezhañ sikour,
Emañ bremañ krouget gant Ripuz an treitour.

SALAUN N'hoc'h eus ket peadra da vorc'hediñ eus-se !
Keit ha ma vo Renod ha Boïard e buhez,
Pa ve pignet er skeul, prest da vezañ krouget,
Birviken evit-se n'en devo droug ebet !

OJER (O welout Richard o tont, gwisket gant dilhad Ripuz)
O ! Maro eo Richard ! Me 'wel erru Ripuz
O tonst war amañ, divergont ha lorc'hus !...
- Chomit ! n'it ket pelloc'h, Ripuz, traitour, bouzev !
Krouget hoc'h eus Richard ? Respontit ! Ha c'hwi 'glaw ?
Den ebet nemedoc'h ne d-aje d'e grougañ.
Met me e werzho ker e vizo deoc'h bremañ !

RICHARD Paouezet va c'henderz ! Me ne d-on ket Ripuz !
Me avat eo Richard - bezit eta Jesus.
Dilivret on-me bet, trugarez d'am breudeur,
Ha Ripuz kastizet hep daloesñ nemeur !
- Ha ne felle ket din mont pelloc'h gant va hent
Hep ho trugarekaet, strezoc'h va c'hazent.

OJER Sevrit 'ta ho tokezn, ha diskouezet ho ponn !

RICHARD Hag e rin eur, Ojer ! Dinoc'h bras ha laouen !

o

EIL DIVIZ

(Charlemagn o tegouezhout, hag ur pennad goude, Renod hag e dud)

CHARLAMAGN

Erzu eo 'ta Ripuz goude krougeñ Richard ?
Ar wech-mañ omp disamm diouzh ar c'hozh tamm kanfard !
- Ojer, petra 'fell deoc'h da ober d'an den-se ?
Mar grit nep droug dezhañ, e kollfot ho puhez !
Tostait amañ, Ripuz, ma pokin deoc'h gant joa,
Pa hoc'h eus graet un taol a zo eus ar c'haerañ.

RICHARD

Na dostait ket re, rak n'on ket an traitour !
Me eo a zo Richard, ho prasañ anebour !
Ripuz a zo chomet war ar menez em lec'h,
Ha me a zo deut espres da lavarout se deoc'h.

(Seniñ a ra gant e gorn. Renod hag e dud a zegouezh.
An daou rummad a chom ur pennad sioul, tal ouzh tal)

RENOD

Trevez, mar plij ganeoc'h, o Impalaer Charlez,
Ken em bo lavaret un dra deoc'h-hu feteiz !

(Daoulinañ a ra)

Daouzek vloaz 'zo bremañ 'skuilhan daeroù bemdez
Peogwir ne c'hellomp ket gonit ho karantez.
Setu ni harluet ganeoc'h pell diouzh hor bro,
Bet omp 'kreiz ar c'hoedoù, en danger a varo...
..Pa hoc'h eus bet lemet diganimp hon danvez,
M'ho ped da vihanañ, list ganimp hor buhez !
Hogen mar d-oc'h, Actrou, re gounnaret ouzhin,
Pardonit d'am breudeur, pa ne bardonit din.
Kuitaat a rin ar gêr. Mont a rin diarc'hen
Hag an ur glask va boued, da ober pinienn
Ha da bediñ Doue, va Roue, evidoc'h,
Mar bez ho medelezh reiñ d'am breudeur ar peoc'h.

CHARLAMAGN

Na chomit ket aze, Renod, da ravodiñ.

(Mojiz a zo ast sioul da droc'hañ kerdenn teltann ar Roue.
Homañ a gouezh a-blat d'an douar gant trouz)

Sellit, va mignoned, pezh en deus graet Mojiz !

MOJIZ (Kreñv, da Renod)

It-hu da Vontalban, Renod ! It en ho tro !
It gant ho tud a-rack, ha me ho telerc'ho !

(Renod a lamm war Voïard, hag e tec'hont holl)

TREDE DIVIZ

(Tud ar Roue a zo sellhet war Vojiz)

OLIER

A ! Mojiz ! Tizhet oc'h ar wech-mañ an ur pleg !
Kent ma'z efot ac'han, e vo torchet ho peg !

MOJIZ (D 'n em zifann)

Aotronez ! Aotronez ! Ententit rñzon vat !
Arabab dont warnon evelse a vagad !

OLIER

Na lezit ket da zont d'ho lazhañ war ar plas :
En em rentit dre gear, marteze ho po gras.

MOJIZ

Me 'n em rent, Olier, nemet gant an diviz
Em bezo va buhez.

OLIER

- Hag ho pezo, Mojiz.
Ret e vo deoc'h avat, pe'z oc'h va frizonier,
Touet leal din-me, e feiz e varc'heger,
Ne glaskfot ket diflipañ a-maez eus ar prizon
Hep goulenn va c'hoñje ha va fermision.

MOJIZ

E-leal, Olier, me 'ra ar bromese
Ne d-in ket diganeoc'h hep goulenn ho kofje.

OLIER

Deuit ganin bremañ, Mojiz, mar plij ganeoc'h.
Ar Roue vo laouen o larout ur gear deoc'h !

PEVARE DIVIZ

CHARLAMAGN

A ! Kozh sorser Mojiz, setu 'ta c'hoarvezet
Un dra hag am boa-me pell a zo c'hoantaet !
Erru eo an amzer bremañ, majisien,
Ma rin-me da grougañ evel un anduilhenn !

MOJIZ

Me ho ped, Charlamagn, lezit ho kourdrouzoù :
N'int mat nemet evit spontañ bugaligoù !
Evit kement a rit a c'hourdrouzoù bremañ
Me a welo warc'hoazh, kent sav-hael, Montalban.

CHARLAMAGN

Ne ri ket, m'han toue ! Den fall ha kozh sorser !
Rak me 'raio ma vi krouget e-benn emberr.

MOJIZ

Me 'lavar reizh ha fraez, dichek, e berr gomzoù.
Ne spontan ket nemeur gant ho kontadennoù !
- Renod a lavaro gant kalz a wirionez
Ne gredas ket Charlamagn va c'hrougañ war an deiz !

OJER

Evit bremañ, Mojiz a berlant gwir ha reizh :
Mar bez krouget fenozh, n'hon devo nemet mez.
Neuze e lavaro Renod hag e vreaudeur
Hon devo bet-ni aon oute, va Impalaer,
Ha n'hor bo ket kredet krougañ Mojiz an deiz.
- Lezit-en da c'hortoz warc'hoazh ar beurevezh.

CHARLAMAGN

A ! Ojer, tromplet oc'h, dont da soñjal penaos
E vec'h eur da zerc'hel Mojiz e-pad en noz.

OJER

Mar kar prometiñ chom, e kredimp anezhañ.

CHARLAMAGN

Nann ! Nann ! Kemmed biken na fizian mui ennañ !
Rak-se, va Baroned, am aus-me divizet,
Chom hep tamm na takenn ken a vo bet krouget.

MOJIZ

Pa'z eo ret din mervel, va c'hrougit war an deiz,
Ma vo diouzh un nozvezh astennet va buhez.

CHARLAMAGN

Ac'hanta, m'ho lezo, gant ar gondision
'Kavfot unan bennak evit ho kosion.

MOJIZ

Ne vo ket kosion a raio diouer din.

CHARLAMAGN

M'ho tisfiz da gaout an disterañ hini.

MOJIZ

Pa 'zeuis d'en am reif deoc'h-hu, Priñs Olier,
Ho pos prometet din, e feiz a varc'heger,
E komzjec'h evidon fetez ouzh ar Rous...
Deuit da gosioniñ bremañ evidon-me.

OLIER

Hen ober a rin, Mojiz, hervez va fromese,
Me e vo kosion evidoc'h d'ar Rous.

MOJIZ

Aotronez, m'ho ped holl, ho pet ar vadelezh
Dont da gosioniñ evidon un nozvezh.

NËM

Ober a raimp, Mojiz, gant ar gondision
Ne ziflipfot ket kuit hep hor permision.

MOJIZ

E feiz a varc'heger, me hen tou war al lec'h,
Ne 'z in ket kuit ac'han hep kimiadiñ deoc'h.

CHARLAMAGN

Eveshait petra 'rit, me ho ped, Aotronez !
'maoc'h o lakaat war var hoc'h holl vad, ho puhez,
Evit un den felllek e rankez da grougañ.
Rak-se, mar d-a en hent, c'hwil 'bae evitañ !

RICHARD A NORMANDI

Peogwir eo an divizoù e ra ar marc'hadoù,
Ar pezh 'zo graet zo graet : ni zo kosionoù !

MOJIZ Me ho ped, Charlamagn, pa 'z on kosionet,
Grit me'm bezo fenozh gwale mat da gousket.

CHARLAMAGN
Penaos ! Na daoust ha te, sorser fall didalvez,
'vefe c'hoazh ken hardis da c'houlenn ur gwale ?

MOJIZ Pa n'em eus da vevañ nemet un nozvezh mui,
Me lavaro deoc'h, Aotrou, em eus azhomm diskuizh.

CHARLAMAGN
Me 'roio dit diskuizh sur fenozh, kozh treitour !
En ur gwale, avat, ha ne vo ket re flour !
- Kerc'hit-hu din diouzhtu ar chadennoù houarn
Ma vezo uhelaet e dreid hag e zaouarn,
Ha neuze va staget amañ ouzh ar piler,
Ma kousko diouzh e sav, pa'n deus c'hoant da ober !

GALERAN Setu amañ, Aotrou, ar c'hreñvañ chadennoù.
Mar d-eo Mojiz sorser, lazomp-en d'o aprou !

CHARLAMAGN
Area eta, Mojiz, p'hoc'h eus c'hoant da gousket,
Eo ret ober diouzhoc'h, ma vefot kontantet.
Uhelaet e vo deoc'h ho korf gant chadennoù
Hag a vo manifik deoc'h-hu da lifselioù.
A ! Kozh laer achantour ! Bremañ daoust d'hoc'h ardoù
Ez on sur ac'hanoc'h en desped d'ho troioù !
- Ret eo, va Baroned, chom war vale fenozh.
Ma ne d-in ket ivez kennebeut da renoz.
Eveshait ervat an den fallakr Mojiz
Ma vo krouget warc'hoazh kent eget dijuniñ.
(Azezañ e ra)

MOJIZ Me 'bromet deoc'h, Charlez, dirak ar briñsed-mañ,
E tebrin lein warc'hoazh e kastell Montalban.

IZAKAR Nebaon, ne refot ket, sorser fall ha treitour,
Pa ve kement diaoul 'zo o tonet d'o sikour.
(Azezañ e ra an Aotronez)

MOJIZ (A grog d'ober e ardoù)
Marellon, Goberton ha Chiminelom
(Raktal e koezh ar Roue hag e holl dud kousket mik)

PEMPVET DIVIZ

MOJIZ
Daoust eta, Belzebut, Mamon ha Belfegor,
Ha ret e ve d'ho mignon koll bremañ e enor ?
Ha c'hwi, Asmodeus, Astarot, Salberi,
Deut holl d'am skoazellañ, ma teuy an trec'h genin !
Sikourit 'ta Mojiz da derriñ an houarn
A zo lakaet dezhañ war e dreid ha daouarn !

(Amañ e ra un taol nerzh, hag e torz e chadennoù)

O ! O ! Paotr a-walc'h on ! Torret ar chadennoù !
Me 'reio da Charlez hiraat e vuzelloù !

(Sellout a ra en-dro dezhañ)

Kerkoulz marc'had em bo kemer kalz 'vel nebeut,
Graet 'vin koulskoude laer, ha pa'z on deut 'on deut !
Arabab e varve Rous, Priñs na Baron
Hep n'o dije o lod holl e-barzh an Trikon !

(Kemer a ra kurunenn ar Roue ha klezeier an Tadoù a Frañs)

Bremañ pa'm eus sammet niver a glezeier,
Ma kurunenn Charlez, e kerzhan prim d'ar gêr.
'C'hanta, Mojiz, va faotr ! Goude oas prizonier
Setu te kurunet en ur momed-amzer !

(Lakaat a ra ar gurunenn war e benn, ha hejañ a ra ar Roue)

Me ya en hent, Charlez, Impalaer, Roue Frañs !
Met arabab 've deoc'h c'hoari hoc'h ignorañs,
Lavarout 'ven aet kuit hep kemeret konje...
- Me 'zo ho servijer ! Ken a vo 'ta goude !
Taolit pled evalkent chomfac'h re hir kousket..
Ember pa zihunfot, e vefot astonet !

(Mont a ra kuit gant ar gurunenn hag ar c'hlezeier)

C'HWEC'HVET DIVIZ

(Charlamagn hag e holl dud, kousket. Ar Roue a zihun da gentañ, hag a ya davet ar re all d'o hejañ.)

CHARLAMAGN

O ! O ! Tadoù e Frañs, dihunit, me ho ped !
Mar ne deuit d'am sikour, ez on dizesperet !
- Ha me ouzh o gerwel, ne zihun c'hoazh nikun,
Sorset int koulz ha me ! Doue, pebezh fortun !
- Me 'm eus anavezet gwechall ul louzaouenn
A lavarer 'zo mat da zihuniñ un den.

(Mont a re da gerc'hat ur bod linad, hag e teu da harlinkañ
o fri d'e dud gant e louzaouenn, ma tihunont holl en ur strevial)

NËM

Souezhus eo lavarout ne pebezh c'hoant-kousket
A zo kroget ennon en taol hag er momed !..
- Lavarit din, Aotrou, pelec'h emañ Mojiz ?

CHARLAMAGN

Pelec'h emañ Mojiz ? Piv hen goer koulz ha c'hwi ?
Ma karjec'h dec'h da noz va lezel d'e grougañ
Ne vijemp ket goapaet en doare-mañ gentañ !

ROLANT

Dilivret hoc'h eus-en ? Lavarit din, Ojer ?

OJER

N'em eus ket, m'hen touer, a faiz a verc'heger !

CHARLAMAGN

Ma ne ran forzh ebet pelec'h eo 'n em glenket.
C'hwi 'ranko e rentañ p'hoc'h eus kosonet !

ROLANT

Klevit 'te Charlamagn, c'hwi a oa gant Mojiz
P'edo o vont en hent, kerkoulz ha ma camp ni !
Hag evelae, mar karjec'h bezañ hon dihunet
M'hon bijs rektal anezhañ arzetet !

NËM

Lavarit, Salaün, pelec'h 'mañ ho kleze ?

SALAÜN

Nag hoc'h hini, duk Nëm, pelec'h emañ ivez ?

RICHARD A NORMANDI

Ra yelo gant an diaoul, ar grougadenn sorser !
Rak setu ast gentañ ivez hor c'hlazeier !

CHARLAMAGN

Ha me, daoust ha pelec'h emañ va c'huzunenn ?
Aet eo ivez gentañ ! A ! Pebezh diaoul a zen !
- Evit ar wech-mañ 'vat e rankan ssantiñ,
Pa welan e pe c'hiz omp tretet gant Mojiz !
- C'hwi Nëm, ha c'hwi Richard, Ojer ha Salomon,
Peogwir oc'h holl kerent da vugale Emon,
Ho teputiñ a ran da vont da Vontalban...
- Lavarit da Renod, ar c'hentañ ar gwellañ,
E rin trevez gentañ ur pemp bloavezh pe c'hwec'h,
Ma rent va c'huzunenn hag ho klezeier deoc'h.

OJER

Ni 'raio ar vaaj 'n hoc'h anv, hor pever.
Me 'gred e raio Renod un darn eus hon lavar.

S E I Z H V E T L O D E N N

A R S E Z I Z W A R V O N T A L B A N

A N E M G A N N E T R E R E N O D H A R O L A N T
H A K R O U G E T E V O R I C H A R D A N O R M A N D I ?

K E N T A Ñ T A D L E N N

K E N T A Ñ D I V I Z

(Charlamagn, Nêm, Salaun, Richard a Nozmandi, Renod)

CHARLAMAGN

Na pelec'h eo manet va fevar gannader ?
Mall am eus d'o gwelout o tegouezhout er gêr.
Met setu int erru pa gomzer anezhe,
Ha Renod, a welan, a zo ivez gante

NÊM

Graet hon eus, Impalaer, brav-mat hor c'hefridi;
Ha bet hor goulennoù hep diouerout hini.
Ha Renod e-unan a zo deut ho pete
Da zivizout penaos e vo graet an treta.

CHARLAMAGN

Dre Sant Denez a Frañs ! Krak ha krenn hen touan,
Ne fall din-me ober nep seurt emglev gantañ !

SALAUN

Daoust, Actrou 'n Impalaer, ha c'hwi un den leal,
Ho pe graet dimp ober ul le gaouist ha fall ?

CHARLAMAGN

Saxmonit, Salaun, kement ha ma karfet,
Me raio koulskoude ar pezh am eus soñjet.

RICHARD A NORMANDI

Ne d-eo ket, a dre sur, da c'houzañv diamegale
Eo deut Renod ganimp davedoc'h, Rous Frañs !
Dre m'ho pos prometet ober emglev gantañ
'Em eus en alist da zont betek anañ.

CHARLAMAGN

Ne dalvfe ket han nac'h, pall a zo am boa c'hoant
Da zarc'hel em galloud Renod an isolant !

QJER
Selaquit, Impalaer, biken ne bezmetimp
Ober droug da Renod, dre ma'z eo deut ganimp.
Richard, an Duk a Nêrn ha Salaun ha me
Kentoc'h a nac'ho krenn servij' ho Majestez !

CHARLAMAGN

Palateta morron ! Nag eo fae ganin-me
E ve ar sujeded a ve mestr d'ar Roue !
- Erru eo an amzer er wech-mañ sur, Renod,
Ma werzhin deoc'h maro va niz ker Bertelod
Hoc'h eus lazhet gwech all dre un taol treizon.
Met bremañ m'ho talc'ho da vzeiniañ er prizon !

RENOD
Impalaer Charlamagn, mar d-on deut ho pete
N'eo ket evit gouzañv gourdrouzoù evalse !

CHARLAMAGN

Traitouriezh 'zo bet, n'eus ket didemalloù !

RENOD
Disvarnomp kement-se diwar nerzh hon azmoù...

CHARLAMAGN

Hag e raimp, Renod, m'hen promet deoc'h ervat !

RENOD
Piv, Aotrou, a zalc'ho penn din-me en argad ?

ROLANT

Aotrou an Impalaer, m'ho ped, evit va lod
List ganin an enor d'en em gann ouzh Renod !

RENOD (D'e vreudeur ha da Vojiz)

Etre Rolant ha me e vezo echuet
Ar brezel hag a zo pell a zo komañset.
N'ouzon ket evit gwir penaos vo 'n disparti.
Ma ne zistroan ket, gant doujañs m'ho supli,
Frealzit va fried, mignonad, hep dale;
Evel gwir dud leal, savit va bugale.

(Pignat a ra war e varc'h)

CHARLAMAGN (da Rolant)

Degouezhet eo ar c'houlz, Rolant, da vezañ trec'h,
Dre 'n tan a zo 'n ho kalon hag an nerzh 'zo 'n prec'h.

Emaoc'h o vont da stoum ouzh kreñvañ marc'heger
A zo war ar bed-mañ, hervez a lavarer...
- Met ar pezh a ra din dont da skuilhañ daeroù,
'mañ ar gwir gant Renod ha ganin-me ar gaou.
Keuz bras am ous zoken o vezañ asantet
D'an emgann etrezoc'h...met pa eo graet eo graet.

ROLANT

Bet asur, va eontr, eo ur glac'har hennezh,
Ober din 'n em gannañ enep ar wirionez !
Ma 'm biije gouezet, m'hen lavar deoc'h skleer mat,
Ne asantjen biken gant Renod an argad,
Rak Doue a zo reizh. Renod 'zo kalonek !
...Met bolontez Doue bezet graet em andred,
Ha ret eo kas da benn pezh a zo lavaret.

(Pignat a ra war e varc'h)

CHARLAMAGN

Me ho ped, va Doue, Mestr an douar ha'n Neñv
Da reiñ ar c'hraz d'am niz ma c'honezo an trec'h.

RENOD

Arsa eta, Rolant, ma 'z oc'h den a galon,
Deuit d'en em aprou ouzh Renod, mab Emon !
Pell a zo ho poa c'hoant da ober kement-se ;
Ret eo deoc'h kontañtñ bremañ ho polontez !

ROLANT

Ya, Renod, ur c'hoant bras em aus a bell amzer
Da c'houzout ha gwir eo ar pezh a lavarer :
Rak c'hwi hoc'h eus ar vrud e-touez an dud pell 'zo
Da vezañ kalonek, mar d-eus den e nep bro !

RENOD

Roland, me 'm aus ar gwir, ha c'hwi hoc'h eus ar gaou !

ROLANT

Disvarnomp kement-se etrezomp, ni hon daou !

(Skeif a ra gant e c'hoaf)

Ha c'hwi a oar bremañ ha pounnez eo va goaf ?

RENOD

Ne vefot ket pell, Rolant, e vefot paet mat !

(Skeif a ra d'e dro)

ROLANT

Bete bremañ, Renod, ez omp an em baet !

(Derc'hel a reont)

ROLANT Setu ni war ar poent da lazhañ hor c'hezeg,
Ha biken ne gavimp re all kerkoulz hag i.
Diskennit, mæz karit, war droad da ergadif.

RENOD Me 'heulic hoc'h ali, Rolant, war gement-se.
Alo ! troad d'en douar, hep ober digarez !

(Diskenn a reont)

ROLANT Pa'z omp em aprouet ervat gant hor goafioù,
Deomp bremañ da c'hoari ur barti klezeioù.

RENOD En doare ma karfet me c'hoario ganeoc'h.

(C'hoari ar c'hleze a reont)

Me 'gred hoc'h eus kavet ar pezh a felle deoc'h !

ROLANT 'N em gannomp korf ouzh korf; lezomp hor c'hlezeier.

RENOD Hervez ho plijadur, Rolant, se a zo sklaer !

(Gouren a reont. Renod a samm Rolant war e choug,
hag en kas etrezek e vreudeur)

Ar wech-mañ, Rolantig, e-leal, ho talc'han !
C'hwil 'ranko dont ganin da gstell Montalban !

ROLANT (En em denn eus divrec'h Renod, hag a samm hemañ d'e dro, evit
en kas etrezek ar Rous)

O ! ne d-in ket, Renod, me viro ouzhoc'h se !
Hogen me ho rento prizonier d'ar Rous !


RENOD (A ziflip eus divrec'h Rolant)

Ha kavet hoc'h eus-hu 'vit ar wech-mañ ho par ?

ROLANT Biskoezh daou evaldomp ne vos war en douar !
Holla ! Trevez, Renod, poent eo dimp diskuizhañ !

RENOD Me 'oa prest da c'houlenn ouzhoc'h hevalep tæ.

(Diskuizhañ a reont)



Gann etre Rolant ha Renod

NĒM

A ! Roue Charlamagn, c'hwi hoc'h eus pec'het bras
Lakaat d'en em lazhañ amañ dirak ho fas
Gwellañ daou varc'heger a vefe e buhez !
Ur wech bennak ho po keuz bras a gement-se !

CHARLAMAGN

Me a ya da bediñ bremañ va Redemptor
Ma vezo echuet ar stourmad gant enor !

(E dud hag eñ en em laka war o daoulin)

O Tad Hoo-C'halloudek, va Doue, va C'hrouer,
Grit ur sell a-druvez ouzh an daou varc'heger !
Deut d'o tispartiañ a-raok fin an devezh
Ma n'en devo nikun na dizenor na mezh.
Ha grit bremañ dezhe, m'ho ped, va Redemptor
Peurechuiñ o daou an emgann gant enor !

MOJIZ (En ur c'horn distro)

Ho konjuriñ a ran, va idoled eürus,
Pluton hag Apolon, ha c'hwi Mercurius,
Da lakaat tud Charlez bremañ da repoziñ,
Din da c'hoari un taol hervez va faltazi !

(En un taol-krenn, e teu ken teñval an amzer ma ne weler
banne. Holl e vanont kousket nemet Mojiz, Renod ha Rolant)

RENOD

Pelec'h emac'h, Rolant ? Ha posubl 've penaos
E ve ret dimp kuitaat hon emgann gant an noz ?

ROLANT

E feiz a varc'heger, ne welan mui banne !

RENOD

Paouezomp an emgann, mar d-eo ho polontez.
Me a gar va enor. C'hwi a gar hoc'h hini.
Pa n'hellomp stourm leal, eo gwelloc'h aretiñ.

(Menel a reont kousket d'o zro)

MOJIZ

Bremañ int kousket holl. Me, gant un taol ampart,
' zegaso Charlamagn ganin war gain Boïard.
Mar gellan e glenkañ sioul ha kloz er c'hastell,
E ray peoc'h gant Renod, pe e ranko mervel.

(Sammañ a ra ar Roue war gain Boïard)

Evidoc'h da vezañ, Charlamagn, kousket-kloz
Me 'raio deoc'h bremañ ober ur veaj-noz,
Etreza Montalban da gastell va c'herent
Da ober peoc'h gante en drouk-desped d'ho tent !

(Dihuniñ a ra Mojiz Renod hag e dud)

Pegement a rofec'h, lavarit, kendirvi,
D'an neb a zegasfe hoc'h enebour deoc'h-c'hwi ?

RENOD
Anacudek 'vafemp, ha me ha va breudeur,
Ma c'hallfec'h degas dimp amañ en Impalaer !

MOJIZ
Deut ganin, mignoned, me 'm eus ur prizonier
A roio deoc'h ar peoc'h a-raok nabeut emzer !
(Kas a reont ar Roue kousket etrezek Montalban)

Lezit-en da gousket. Emberr pa zihuno,
Ez efot ho pevar davetañ war un dro.
Aspedit anezhañ d'ober peoc'h ganeoc'h.
Me a gred e raio, rak bez' en devo nec'h.
Me 'ya da ziskuilzañ bremañ, va c'hendirvi.
P'oa graet an afor-se, bremañ 'on disoursi.

GICHARD
Kemerit ho tiskuilzh, m'ho ped, va c'henderz ker;
E-kreiz hon nec'hamant ez oc'h bet hon salver.
(Mont a reont kuit gant Charlamagn, holl nemet
Mojiz. Hemañ, e-lec'h mont da gousket a gomz outañ e-unan)

EIL DIVIZ

MOJIZ
Ar wech-mañ eualkent e c'hallan asuriñ
E ray an Impalaer peoc'h gant va c'hendirvi.
Rak pa 'm eus en rentet dezhe da brizonier
Pe dre gaer pe dre heg, e ranko hen ober...
- Hogen poent eo, Mojiz, e chanjfec'h a gundu :
Dilezel ar pec'hed ha bevañ er vertuz;
Rak mervel e ranker uz wech, ha rentañ kont
Dirak ar Barner reizh - ha nouze 'vo ar Spont !
Pa soñjan em spered na pet a dorfedioù,
Pegan lies a vuntz, ha pet a wallurioù
'Zo graet 'balamour din e rouantelezh Frañs,
E frañh va ene beour em c'hreiz gant ar greveñs !

Rak o tennañ kastiz eus a vero va zad
Ne ouzon pet mil den o deus skuilhet o gwad,
Hag ez on penn-kiriak eus al lazhadeg-se !
Peneoc 'ta kredfen mont hep spont dirak Doue ?

(Lakaat a ra dilhad penitiour)

Pell diouz ar bed tromplus hag e holl vanite
Me 'ya d'ul lec'h distro da servijañ Doue.
N'em bezo da zebriñ nemet gwizioù louzoù,
Ma rin gwir binijenn evit va fec'hedoù.
- Kenavo, kendirvi, marc'hegerien dispart !
Pa n'em gwelfot pelloc'h, e ranno ho kalon...
Levenez ha glac'har am eus ouzh ho kuitaat
'Vit mont d'ur peniti kuzhet e kreiz ar c'hoed,
Ha mont da vizitañ kêr drist Jeruzalem
Hag ivez ar C'hraou Sakr e kêrig Betleem;
Diloer ha divotoù, da bediñ war ar plas
Ma voe ganet Jezuz, hag el lec'h ma varvas.
- Met kent eget kuitaat, va Salver benniget,
' taoulinen da c'houlenn gwir bardon d'am pec'hed.

(Deoulinañ a ra)

Doue bres Abraham, o c'hwi Krouer ar bed;
Grit ur sell e-druez warnon, na me ho ped !
Asantiñ 'ran a galon gouzefiv pep seurt poanioù,
Kement a blijio deoc'h, hed ha hed va deizioù.
'N em zibober a ran dimeus an holl skridoù
Am eus bet graet dreze ken fall sorserezoù.
A-vremañ e tougin, e-lec'h "an Igronus",
Al levr sentel-meurbet 'zo anvet "Skouer Jezuz",
Hag e-lec'h an "Alberz", "Kuzunenn ar Werc'hez".
Dreilhañ 'ran dindanon va levrioù sorserezh.
Dinec'h a ran e-greñn ivez an Drouk-Spered
Koulz hag e holl ardoù, am eus gwechall heuliet.
Pardon a c'houlennan da gentañ ouzh Doue,
Hag ouzhoc'h, kristenien a zo amañ hizie.
Gres dimp d'en em welout asamblez o repoz
Goude ar vuhez-mañ, e gloar ar Baradoz.

(D'an taol a henter-hoz, ez a e-maez)

(Sonerezh. An deiz a sav tamm ha tamm)

E I L T A O L E N N

(Er c'hastell)

K E N T A Ñ D I V I Z

RENOD
 Maulat ra vo Doue hag ar Werc'hez Santal,
 Evit ar wech-mañ sur, eo echu d'ar brezel !
 Hogen en em glevomp strezomp va breudeur :
 Daoust pegen krizh eo bet 'vidomp en Impalaer
 E tileomp gant enor en doujañ koulskoude
 Dre ma'z eo hon Aotrou ha Mestr a-berzh Doue.

RICHARD
 Me 'lavar va soñj, va breudeur, berr ha berr,
 Rak chom da glask pelloc'h a vefe koll amzer :
 Charlez a gounnare pe n'halla va c'hrougañ,
 Me a ginnig ober hevelop tra dezhañ !

CHARLAMAGN (O tihuniñ)
 Arsa, pe 'on dihun, pe 'on 'kreiz un hufvra ?
 N'ouzou daoust pe c'hoarvez an eil pe egile !...
 Seblantout a ra din, tro-war-dro pa sellan,
 E vefen-me amañ e kastell Montalban ?
 - A ! an diaoul inkarnet, Mojiz, kozh achantour !
 Degaset on ganit a-kreiz va anebour !
 Met, mar d-on Impalaer ha Roue kurunet,
 Birviken peoc'h ne ran ken a vi-te krouget !

RICHARD
 Kerkoulz ober outañ abred 'vel diwezhat...
 N'hor bo ket peoc'h anez. Gwelout a rit ezvat ?

CHARLAMAGN
 Ha c'hwi a soñj, Renod, dre m'emaon en ho ti
 E rin nep tra ebet enep d'am faltazi ?
 Birviken ne rin peoc'h gant ho predeur na c'hwi
 Nemadoc'h a rentfe din-me rektal Mojiz.

RENOD
 Levaret em eus deoc'h, ne d-ao ket a-vremañ,
 Birviken deoc'h Mojiz evit peoc'h ne rentan !

F O S O N (O tastaet ouzh Renod)

Me 'lavar deoc'h, Renod, ha gant kalz a c'hlec'har,
 Ez omp holl a Vojiz, em eus son bras, war var.
 Rak war-dro hanter-noz em eus-en bet klevet
 O vonet diganemp sioulañ m'en deus gallet,
 Gwisket an un doare, hervez a gava din,
 Ha'vel ouzh un armit pe ouzh ur pelerin.

RICHARD (A dosta ouzh ar Roue gant e gleze noazh)
 O Roue displeal, o den pennek ha krizh,
 C'hwi eo a zo kirieg m'hon eus kollat Mojiz !

RENOD
 Hala ! Me eo ar mestr ! Hag a ro urzh, Richard,
 Da glenkañ ho kleze ha da chom sioul, kanfard !
 Rak daoust ma'z eo kouszhet 'n hor galloud ar Roue,
 Eo ret mirout doujañ evitañ koulskoude !

(Renod en em strink d'an daoulin)
 C'hoazh ho pedan ur wech gant doujañ, Impalaer,
 D'hon degemer 'n ho kras, ha ma ha va breudeur.

CHARLAMAGN
 Rolant, ne dalv netre. Mar ne rentit Mojiz,
 Birviken ne rin peoc'h gant ho predeur na c'hwi !

RENOD (O sevel)
 Neuze 'ta, Charlemagn, peogwir n'eo ket d'ho kred
 Ober ar peoc'h ganimp dre ho polontez vat,
 It pa blijo geneoc'h strezek hoc'h arme.
 An tremen a zo digor deoc'h gant pep surentez.
 Rak ni ne d-omp ket tud a gement a garfe
 Rediañ an Impalaer enep d'e volontez.

RICHARD
 Ra vezi milliget, Renod, den diskiant,
 Me lezez da vont kuit hon anebour gwashañ !
 Mar gellfe hon tizhout, eñ, dindan e c'halloud
 E rafe hon stagañ raktal ouzh peul ar groug !

RENOD
 En drouk-deaped d'az peg ez aio kuit, Richard !
 - Aotrou, na me ho ped, pignit war gain Voïard.
 - Marc'heg, kasit ar Roue betek penn a arme
 Gant doujañ hag enor hag a pep surentez.

Kasit ar gurunenn, ar c'hlezeier ivez,
Ma vo pep tra strezomp gwirion, leal ha reizh !
(Charlamagn a ya e-maez)

RICHARD
Ma ! Ac'han d'ar wech-mañ ne ouien ket, Renod,
E vijec'h bet un den ken dibosell ha ker sot !
Diwallit ! Ar fallakr-se 'zo ur Roue dic'hred
O klask rentañ bepred an droug evit ar vad !
Evidon, birviken ouzhoc'h-c'hwi ne sentan
Pa ne fell deoc'h va lezel d'en em venjiñ outañ !
(Mont a ra e-maez, droug bras ennañ)

TREDE TAOLENN

KENTAÑ DIVIZ

CHARLAMAGN (D'an Aotronez o tont da benn an hent dezhañ)
Gwelloc'h eo din lezel va c'hurunenn Roue,
Kent biken ne refen emglev gant seurt tud-se !

ROLANT
Ar wech-mañ, va eontr, o tlean lavaret
Ez oc'h un den pennek, dibleg hag aheurtet !
Biskoazh tud ne welis ken leal o c'halon
Evel ma'z eo Renod hag holl vibien Emon !

CHARLAMAGN
Hole ! Va Baroned, ma ra ouzhoc'h difenn
E komzfec'h avelse birviken em c'hichen,
Ken em bo diskaret Renod hag e vreudeur...
...Ha dont a rin e-benn, e feiz a Impalaer !

EIL DIVIZ

(Hevelep re, hag Emon)

EMON (O tegovezhout)
Salud deoc'h, Charlamagn, Impalaer, Roue Frañs !
Ma 'zo deut deveoc'h gant enor ha doujañs

Da c'houzout hag echu eo bremañ ar stourmad
Krog pevarzek vloaz 'zo enep va mibien vat.

CHARLAMAGN

Feiz avat, duk Emon, n'eo ket peurechu c'hoazh,
Met echuet e vo e-raok ma vo warc'hoazh.
- C'hwi, Emon, n'hoc'h eus ket dalc'het d'ho promese
Da zonet d'am sikour enep ho pugals.
Pardonñ a ran deoc'h an amzer dremenet.
Met bremañ, duk Emon, e renk'fet divorc'had
Reiñ din-me ho skoazell da zont da zistrejñ
Ho mibien o fevar, ha kastell Montalban.
- Urzh a roan d'an holl ma vo 'r c'hastell kelc'hiet !
Mont e-barzh, dont e-maez, a vo oute harzet...
Gant an diouer a voued e rankint femañ
Ma varvint gant an neon, pe neuza, 'n em rentañ.

EMON

Pell amzer 'zo, va Roue, em eus deoc'h prometet
(Rak-se kalz a dud fur o deus va zemallet,
Ha lavaret ne oan 'met un tad dinatur)
Dont da ober brezel d'am fevar krouadur.
Met pa'm eus graet al le dirazoc'h, Roue Frañs,
E talc'hin mat d'am ger, pa ve din dismegeañs.

CHARLAMAGN

C'hwi'vezo, duk Emon, e karg a'n ijinoù.
Lakit enne mein bras da frêzañ 'r megorioù.

EMON

O Dous ! Impalaer, deoust ha c'hwi koulskoude
A refe din dispenn kastell va bugale ?
Plijet lakeat un' all e karg a'n ijinoù,
Pa hoc'h eus divizet diskar ar megorioù !

CHARLAMAGN

Lakit evezh, Emon, ne dorrfec'h-hu ho le !
Mar ne rit va lavar, ho pa keuz goude-se !

PEVARE TAOLENN

KENTAÑ DIVIZ

(Renod hag e dud, treut, du, gwisket fall)

- RENOD
Siwazh ! Gent glac'her bres e laron, va breudeur :
Bezañ kollet Matiz eo hor brassañ gwalleur !
Hennezh hon diw...lle... Bremañ e seblent din
E vo ret em rentañ, pe verzvel gant femin.
Souden n'hon devo ken tamm boued na tamm bevañs.
Hag endro d'ar c'hastell emañ tud Roue Frañs.
- RICHARD
O tic'houzougañ Charlez, mar karjec'h va lezel,
Me 'm bijs echuet 'benn bremañ ar brezel !
- RENOD
Me 'oar ervet, Richard, ez on bet faziet.
Met keuz a vez warlerc'h : ar pezh 'zo greset, zo greset.
- KLARA
Siwazh ! Diwezhet oc'h bremañ d'en em demall.
Mar d-oc'h bet faziet, bet furoc'h ur wech all.
Setu gant an naon du omp gwan ha dinerzhed,
M'hon eus poan bres zoken o tonet da gerzhed.
- EMONIG
Penaos, va zadig kaezh, ha ret 'va koulskoude
E tefemp dra an naon d'echuiñ hor buhez ?
Rak setu ni war yun un devezh hed-ha-hed...
- Na pegoulz 'ta, va zad, e c'hallfemp kaout boued ?
- RENOD
Rannañ 'za va c'halon gant an dristidigezh
Pa n'em eus tamm bevañs da reiñ d'am ziegezh !
- ALARD
Deut ganin, va breudeur, ma raimp un toull don
Evit beziañ ar ze 'zo marvet gant an naon.
C'hwez ar c'horfoù maro 'zo ken kreñv er c'hastell
M'eo barrek da lakeat un den yec'h da verzvel...
- Diwadomp ha sallomp hor c'hezeg goude-se
Ha debromp anezha 'vit astenn hor buhez.

RICHARD

Me 'zo prest da gentañ da ziwadañ va marc'h
Ha da zebriñ diwarneñ 'laiz va c'hoñ sur a-walc'h !
Ret a vo dimp goude digeriñ ar porzhioù
Da laerez da Charlez darn 'e bourvezañsoù.

PEMPVET TAOLENN

KENTAÑ DIVIZ

(Charlamagn hag e dud)

CHARLAMAGN

Arse 'ta, duk Emon, ha greset an ijinoù
Ma vezo da Renod diskaret e dourioù ?

EMON

Penaos e c'hallit-hu bezañ kriz ha kruel
Da c'hourc'hemenn d'un tad distrujañ e vugel ?

OJER (da Charlamagn)

Ra vezo milliget ar momed hag an eur
Ma tifennas Renod ouzh Richardig e vreur
Troc'hañ deoc'h ho kouzoug p'edoc'h e Montalban;
Ne vijec'h ket bremañ o c'hourdrouz anezhañ !

CHARLAMAGN

Peoc'h ha sioul, Baroned ! An neb e zisente,
Me a droc'hfe e benn dezhañ gant va c'hleze.

NËM

Na fulozit ket, Aotrou, gwaskit war ho kounnar.
Ni 'ray ho polontez, mar d-ee ret hen ober.

GALERAN

Setu bremañ, Aotrou, kerc'hat an ijinoù.
Pa garfot gourc'hemenn, e krogimp d'o aprou.

CHARLAMAGN

Ac'hanta, duk Emon, lakit enno ar vein.
Hogen grit evezh mat da vizañ war al lein
Da ziskar an douzell a zo war ar c'hastell
Ar peurrest 'vo diskaret goude hep dala pell.

(Mont e reont kuit, nemet Emon ha Galeran)

EMON
Me, glac'hazuseñ tad a gement 'zo er bed,
Pa ranken distrujañ en neb am eus ganet !
(Tennañ a reont)

GALERAN
Evit an taol kentañ, hennezh a zo set mat.
Mar kendalc'homp, e vo Montalban prest e-blat !
Teolomp war an dourell mein bres hag alies,
Hag e vimp mignonad d'an Impalaer Charlez.

(Teurel a reont mein war ar c'hastell gwashoc'h
egot biskoazh)

EMON
Ne 'hazr mui va c'halon ouzh o farsekutiñ.
Ne 'glevan er c'hastell nemet forzh, nemet kri !...
..A-walc'h a zroug o deus en daiz-mañ gouzañvet.
Lezomp-i un nebeut en o fasianted.
(Paouez a reont. Galeran a ya kuit, hag Emon a chom
e-unan)

C' H W E C' H V E T T A O L E N N

KENTAÑ DIVIZ

(Renod hag e vreudeur)

RENOD
O Roue Charlamagn, kalon dinaturet !
Milliget vo an eur ma'm eus hoc'h esarnet !
Setu hoc'h ijinoù o tiskar va c'hastell
Ha ni holl marnoniet ha daz da vervel !

ALARD
Renod, c'hwí 'roes uzñ da lazhañ hor c'hazeg;
Nemet ho marc'h Boiard, hennezh 'zo bet miret.
Da grefvaat hor c'halon, diwedit dimp ho marc'h.

RENOD
Evit va marc'h Boiard, ne ziwadin ket c'hoazh !

EMONIG
Tedig ! Roit ho marc'h, ma vezo diwedit
Da astenn hor buhez hirañ ma vo gallet.

RENOD (Dilevar, a ya davet Boiard. Hemañ a ra jestroù truezus.
Sellout a ra ouzh e veatr, e znoulegad beuzet a zastroù.
Poket a ra da Renod. En em strinkañ a ra d'an deoulin
dirzañ. Renod, frailhet e galon gant ar glac'her, a
skuilh daeroù, hag a lavar gant enkreiz :)

Siwazh ! Marc'h kalonek, ne dalvez da netra
E refez din gouelañ, pa'z eo ret da lazhañ !
- Met gwelout 'ren an dour o tont ez taoulegad.
- Nann, ne varvi ket c'hoazh, m'hen promet dit sur mat !

RICHARD
Ha c'hwí 'lezo da vervel pried ha bugale
Evit dont da vireut ur c'hozh marc'h e buhez ?

RENOD
Ne greden ket, va breur Richard, e vec'h ken kriz
Da ober din lazhañ va Boiard 'vit debriñ,
Hag hen bet alies, e ouzoc'h kouls ha me,
Gantañ deoc'h ha din-me rekourzet hon buhez !

ALARD
C'hwí 'zo krishoc'h, Renod, eget n'so ul loupard,
P'hon lezit da vervel evit espern Boiard.

RENOD
A-walc'h va marteze, 'vit kaout un tamm boued,
Ma teufemp da wadañ Boiard en e vorzed,
Ha lakaat ar gwad-se neuze da burediñ,
Ha goude e c'hallfemp eta dont d'en debriñ.
(Gwadañ 'ra Boiard)

GICHARD
Roit din-me ar gwad da gas da burediñ,
Ma 'gerfe e va poazh. Mall am eus da zebriñ.
(Debriñ a reont)

RENOD
A drugarez Doue, setu dimp ar wech-mañ
Hep lazhañ va Boiard, peadra da vevañ !
- Klaskomp c'hoazh 'ta gwelout hag eñ a losko gwad
Ma vezo puredet.. Meurbet en kevomp mat !

(Mont a zeez c'hoazh d'e wadañ, met ne zeu bezed ebet ken)

Evit toulleñ Boiard, ne zo benne gwed mui :
Dere eo gent an naon da vervel koulz ha ni !

SEIZVET TAOLENN

KENTAÑ DIVIZ

(Emon, e-unan - hag Djer o tagoushout)

EMON Doue ! Pebezh glac'hez ! Pebezh gwall avantur
'zo c'hoarvezet ganeoc'h, va fevar grouedur !
C'hwil 'zo marc'hegerien kalonek ha disper
A gement a gavfad neblec'h war an douar.
Met daoust d'ho nerzh-kalon, e walan koulskoude
E rankit dre an naon schuil' ho puhez.

DJER (A zo deut sicoulik, hag a gomz a vouez izal)

Va eontr ker Emon, me a ve ali deoc'h,
P'hoc'h aus kalz pourvezañs, da reiñ dezhe dinoc'h.
Mar gra c'hoazh ar Roue deoc'h tennañ warnezha
Me am aus bremaik soñjet ur finese :
Lakit kig ha bara e-barzh an ijinoù
E-lec'h lakaet ar vein.- Den n'hen gouezo, m'hen tou !
Tennit neuze warne liesañ ma c'hallfet.
Setu 'n doare-se e vezint dinaoniet !

EMON Va niz fur, Kont Djer, hoc'h ali a zo met
Hag eürus bras 'on ouzh ho trugarekaet.
Deut, mar plij, d'am sikour : ni skoio peadra
Da astenn o buhez ur miz da vihanañ.

EIL DIVIZ

(Hevelep re - Charlamagn hag e dud)

CHARLAMAGN (o tastaet)

Arsa, ne walan ket e vefe nep seblant
E teufe Mibien Emon buan d'en em rentañ !

EMON Kent ma en em rento hini aus va mibien
E teuint da grignat ar c'hig war o eskern.

CHARLAMAGN

Rak-se, Emon, pa'z eo ho mibien ken rebel,
Lakit main en ijin da ziskar ar c'hastell !

DJER

Arsa eta, Emon, lakomp main en ijin,
Pa'z eo ken sot Renod da c'hortoz e rivin.
Ha me ho sikouro da ziskar Montalban :
Ret mat eo hen ober er wech-mañ, e walan.
- Tec'hit, tec'hit, Aotrou, ha c'hwil-holl, Beroned,
Rak mar chomit anañ, marteze vac'h glozet.
(Charlamagn hag ar re all a deoc'h un tammig)

TREDE DIVIZ

EMON

Lakomp da gentañ en ijinoù bara
Ma vo isouen Renod o tonet d'an tañva.
Ha goude kement-se e lakaimp ar c'hig.

DJER

Entent a ran, va sontr, met komzit goustadik.
(Teurel a reont boued er c'hastell gent an ijinoù)

PEVARE DIVIZ

(Charlamagn hag e dud e dosta)

CHARLAMAGN

Ne walan ket e teu d'en em rentañ buan
Renod nag e vredeur na kastell Montalban.

IOELON

Tromplet oc'h penn da benn, m'asur deoc'h, va Rous,
Mar kredit e ra droug Emon d'e vugala,
Rak e-lec'h lakaet main e-barzh an ijinoù
Da ziskar da Renod ouzh treon e vagozioù,
En deus lakaet enna kalz e gig ha bara.

CHARLAMAGN

Lavarit, duk Emon, ha gwir so kement-mañ ?

EMON

Impalaer Charlamagn, ma 'ziskleerio fraez-met
Ne glaskin nep digarez 'vit ar pezh 'm eus graet mat !
An dour 'zo naturel dezhañ dont da c'hlebiañ,
Ha d'an arc'h bezañ yen, hag an ten da dommañ.
Dre-se e tiskleerian eo un dra naturel
D'un tad e pep degouezh reiñ sikour d'e vugel.
Ha pa ven dispennet e bev, kig ha kroc'hen,
Birviken e-vremañ ne rin droug d'as mibien.

CHARLAMAGN

Den eskumuniget ! Afronter ! Kozh treitour !
Penevadout em boa trec'het va anebour !

NËM

Aotrou, lazit Emon bremañ da vont d'ar gêr.
Kredit ouzhon, Aotrou, hennezh so ho tever.
Mar en deus klesket tu da vag' e vugale,
Na Doue na den fur n'an tamallo e se.

CHARLAMAGN

It, afronter Emon ! davet ha kwzeg d'ar gêr,
Ha lavarit dezhi ez oc'h hep heritier,
Rak esperañs em eus e c'hellimp brav ha mat
A-rook nemour amzer tegañ ha pevar mab !

EMON (A stou dilevar dirak ar Roue; ha goude e salud an Tadoù a Frañs)

Tadoù a Frañs, m'ho pad da gemerout truez
E-keñver va mibien, e zo eus ho lignez.

o

EIZHVET TAOLENN

DIVIZ

(Renod hag e dud o tabriñ, e-leiz e voued en dro dezha)

ALARD (O schuiñ e bred, a lavar gresoù)

A drugarez Doue, va C'hrouer banniget,
Eo troet hor c'hañvoù brumañ e joasted :
'Kreiz ma kouezhe warnomp tour Kastell Montalban,
P'edomp war-nes mervel gant dienez ha poan,
Setu ni adarre adsavet en ur stad,
A drugarez Doue, ma en em gavomp mat !

RICHARD

Mar tizhomp c'hoezh Charlez tro-war-dro d'ar c'hastell,
E vo ret e grougañ ouzh ur peul-kroug uhel !

RENOD

Kalon bremañ, va zud ! D'an armoù pep hini !
Ha kouezhomp hall warne evel war ar bleizi.

NAVET TAOLENN

KENTAÑ DIVIZ

(Tud Charlamagn, o tabriñ ivez)

FOSON (O tegouezhout)

Impalaer Charlamagn, ma 'gev din en dro-mañ
Ne van kan un den bev e Kastell Montalban.
Pe i e zo aet kuit, pe i e zo maro.
Ne walan den ebet anezha war en dro.
(Klevout e reer an drompilh)

SALAUN

Koulskoude an drompilh a gleven o c'hoari.
(Ar porzh a glever o tigeriñ)
Ha bremañ, keeroe'h 'zo, ar porzh o tigeriñ.

EIL DIVIZ

RENOD (E penn e arme, a zeu e-maez ar c'hastell)

Salud deoc'h, Charlamagn, Priñsed ha Baroned,
Bezomp enebourien pe n'hellomp mignoned !
- Ret eo dimp, va breudeur, lakaat dir en avel :
Ret mat eo ar wech-mañ pe drec'hiñ pe verzal !

RICHARD A NORMANDI (A sailh war Renod)

Bec'h eta, Frañsizien, d'ar pevar Mab Emon !

FOSON

Nebaon, ni 'roio deoc'h labour 'leizh ho kalon !

CHARLAMAGN

Dre ma'z omp sourprenet, n'hellomp 'met gouzañv gwall.
Gwelloc'h 'n em denañ kuit, ha gortoz ur wech all.

(Ar Frañsizien a dec'h, nemet Richard a Normandi)

RENOD

C'hwï a zeuio ganin, Richard a Normandi.
Ret eo deoc'h 'n em rentañ kuit a zigerezif !

RICHARD A NORMANDI

Renod, deoc'h 'em rentan evel ho prizonier.

RENOD

Desped em eus va c'hwï 've tapet, va c'henderz.

RICHARD

Ya 'vet ! Rak ar wech-mañ e rankfot-hu sarten
Ober dimp kaout peoc'h, pe e kollfot ho penn !

RICHARD A NORMANDI

Mar hoc'h eus nep tabut gant ar Roue a Frañs
Ne dleit ket warnon distoural ho verjañs,
Dreist-holl abalamour ma'z on eus ho lignez !

RENOD

Richard, ne zan nep fozzh pelloc'h eus va lignez !
Mar ne zît dimp kaout ar peoc'h gant Roue Frañs,
Me lakay ho krougeñ emberr ouzh ur potañs.

RICHARD A NORMANDI (Goude bezañ chomet nec'het ur pennad)

Sekretour, me ho ped, raktal, hep koll amzer,
Da vonet eus va ferzh, davet an Impalaer,
Ha lavarit dezhañ dirak an Tadoù Frañs
E vin krouget didruez emberr ouzh ar potañs
Mar ne gar ober peoc'h gant bugale Emon.
Lavarit dezhañ c'hoazh en pedan a galon,
Da gaout medelezh da zonét da soñjal
Er servijoù rentet ha bremañ ha gwechall.
- Setu aze petra hoc'h eus da lavaret.
Degesit din respont buanañ ma c'hallfet.

AR SEKRETOUR

Duk nobl ha galloudek, Richard a Normandi,
Me a ya da vonet raktal em c'hefridi.

DEKVET TAOLENN

DIVIZ

CHARLAMAGN

Bez' em eus, Aotronez, glac'har ha melkoni,
Rak ma'z eo kemeret Richard a Normandi.

AR SEKRETOUR (D tagouezhout)

Salud deoc'h, Impalaer, Priñsed ha Baroned !
Deut on-me davedoc'h 'vit un afer breset
A-berzh ho mignon bras, Richard a Normandi.
Setu e berr gomzoù pezh e lavaras din :
Nemet e rafec'h c'hwï peoc'h gant Mibien Emon
E vo krouget Richard hep truez ne pardon.
Savet eo ar peul-kroug evit en distrujeñ;
Rak-se soñjit ha c'hwï ho pe truez outañ.

CHARLAMAGN

Lavarit, sekretour, eus va ferzh da Renod :
Hervar ma labour e ray un afer sot.
- Hogen ne gredan ket e va ken hardis-se :
Ober droug da Richard ha va ofañs-mañ !

AR SEKRETOUR

Selaouit, Impalaer, Prised ha Baroned :
Mar bevit er soñj-se, sur-mat ez oc'h tromplet !
Mar ne bardonit ket Renod hag e vreurdeur
E vo krouget Richard a-barzh ma vo nemeur !

CHARLAMAGN

Ne oar ket prest da se, va c'hredit, Aotrouez !
Ne gredfe ket Renod ober din e giz-se !

RODLANT

Penaos ? "Ne oar ket prest", Aotrou, a lavaret ?
Me a responto deoc'h, dichek ha digaked :
Daoust e c'hallit krediñ Renod ho respetfe,
C'hwi dalc'hmet ha dibaouez o klask kaout e vuhez ?
Mar bijen-me Renod, m'hen lavar deoc'h hardis,
E tistrujfen rektal Richard a Normandi.

AR SEKRETOUR

Roit din ur respont, Aotrou an Impalaer,
Evit kas da Richard, rak an amzer 'zo berr.

CHARLAMAGN

Lavarit da Richard, didro ha dichipot,
Ne ran-me van ebet a c'hourdrouzoù Renod...
Lavarit da Renod ivez eus va ferzh-me,
Mar gra droug da Richard, en devo keuz goude.

AR SEKRETOUR

Pegen fall ar c'helou, 'rankan koulskoude mont !
Renod a raio goep o klevout ho respont...
Kenevo, Impalaer, Prised ha Baroned,
Ha Doue d'ho miro e peoc'h hag e yac'hed.

UNNEKVET TAOLENN

DIVIZ

(Renod hag e dud. Richard a Normandi chadennet. Ar sekretour.)

RICHARD

Richard a Normandi, bremañ ni a welo
Hag ho mignon Charlez prestik ho sikouro.

AR SEKRETOUR (O tont tre)

Ne c'hallen ket, Aotrou, mirout a skuilh deeroù
Pa zeuan da soñjal lavarout ar c'helou
Am eus da zegemenn, Richard a Normandi,
A-barzh er Roue Charlez, an den fallakr ha kriz.
En pedet em eus bet, eus a greiz va c'helon,
O'ober en ho reked peoc'h gant mibien Emon.
Mat e-lec'h ma selaou ha reiñ din va mennad,
Ez eo neuze rektal 'n em lekaet da c'hospaer !
Ho kave, emezañ, den diskiant ha sot
Mar teuec'h da spontañ rak gourdrouzoù Renod.
- Deoc'h-hu, Aotrou Renod, e ra ivez difenn;
Arebab deoc'h ober da Richard nep anken.
- Setu va c'hafredi aze e berr gomzoù.
Glac'haret on o reiñ ken truezus keloù.

RENOD

Hep doujañ da Charlez na d'an Tadoù a Frañs,
Me a ray ho stegañ, Richard, ouz ar potañs !

RICHARD

Kuit da glesk digarez na kement all a dro,
Deuit eta, Richard, pe neuze m'ho treidio !

DADUZEK VET TAOLENN

DIVIZ

(Charlamagn hag e dud - Richard a Normandi ouzh troad ar groug war ar voger.)

IZAKAR
War ar voger e welan eo sonnet ar potañs
Evit krougañ Richard. Na pebezh dismegañs !

GALERAN
Impalaer Charlamagn, c'hwi 'zo den aheurtet,
Lezel krougañ Richard, unan ho mignoned !..
Ha c'hwi deoc'h ar galloud da zont d'en dilivrañ !
Setu-efñ war ar skeul. Ha krediñ 'rit bremañ ?


RICHARD A NORMANDI (Pignet er skeul)

A ! Roue Charlamagn ! Daoust ha c'hwi koulskoude,
Goude bezañ mil gwech bet e riskl va buhez
'vit souten war ho penn ar gurunenn a Frañs,
A lezfe va c'hrougañ bremañ war ar potañs ?
Pa ne vefe hepken nemet ar goulioù
Am eus e-barzh va c'horf e kalz a andrejoù,
Am eus bet resevet e vidoc'h en arme,
Ar re-se ho tamallo, den kriz, dirak Doue !
- Bremañ 'vat, duk e Nêrn, Rolant hag Olier,
Galeran, Izakar, Salaün hag Ojer,
Holl e walit ur skouer pebezh anaoudegezh
Na petra 'c'honezer o servijañ Charlez !

OJER
Me 'c'houlenn 'berzh an Nefv mil boan ha mil gwalleur
D'en neb a zalc'ho mui ouzh tu an Impalaer !
- Kerkoulz a rafe dimp, ma vemp ni e deñjer !
- Rak-se me 'dou bremañ, e feiz a varc'hager,
Birviken va c'hloze ne vo 'n e servij mui,
Peogwir e lez krougañ Richard a Normandi !

CHARLAMAGN

N'emaon ket, Ojer, e poan ac'hanoc'h-c'hwi,
Nag ivez ho kleze, kennebeut e hini !



Richard ouzh troad ar groug

NÊM

En taol-mañ, Impalaer, e rankan lavarret
Ez oc'h-c'hwi un den kriz, diboell hag aheurtet !
Gant ho fallagriezh, ho penn fall, ho veñjañs,
Oc'h kiriek da varo kant mil a dud e Frañs.
Nep servij a-vremañ ne rentin deoc'h biken
Pa ne zilivrit Richard, e feiz a duk a Nêm !

CHARLAMAGN

C'hwi, ar mignon a garen eus a greiz va c'halon !

SALAUN

Pa ne rit ket ar peoc'h gant bugale Emon,
Pa lezit distrujañ Richard a Normandi,
Klaskit mignoned all. Me n'on mui hoc'h hini !

OJER

Setu ni, Aotronez, a ul lavar hon tri :
Ne c'hellomp servijañ pelloc'h un den ken kriz.

ROLANT

Me ne brometan ket mui eget ar re all,
Chom pelloc'h e servij un Roue displeal.
Pa'z eo ken kaledet en e fallagriezh
En dro-mañ en deus krenn kollet e holl furnez.

OLIER

Mar karjemp bezañ deut pell 'zo d'en dilezel,
En dije gant Renod echuet ar brezel.

OJER

Me 'ya da vonet kuit. Deuet neb a garo.
Keuz en devo Charlez pa vimp aet diwar-dro.

NÊM

Kenavo deoc'h, Aotrou, pa'z oc'h ken aheurtet.
Grit bremañ diouzh ho penn hag a-dreuz hag a-hed.

(Ar Varoned a ya kuit)

CHARLAMAGN

M'hen toue dre va septr, va galloud ha va gloar !
Abaoe ma'z on ganet ha deut war an douar
Biskoazh ur seurt anken n'em boa bet gouzañvet :
Setu me dilezet gant va holl Varoned !

IZAKAR

Klevit mat, Impalaer, dija int erru pell.
Mar roit o mennad, eo poent bras o gervel.

Dre ma'z int kounnaret, e talc'hont gant o hent.
Kerzhout a reont prim, ha n'eo ket ober fent...

CHARLAMAGN

A ! Roue Charlamagn ! Homañ ar velkoni !
O rankout ober peoc'h enep d'am faltazi !
- Galeran, it warlerc'h Rolant hag Olier,
Ha Ném ha Salaun hag al lorc'hue Ojer,
Ha lavarit dezhe hep na brud na safar
Em eus-me divizet e refen o lavar.

GALERAN

O devezh a zudi hag a wir levenez
Hon eus ranket gortoz e-had pemzek bloavezh !
(Mont a ra war-lerc'h ar Varoned)

TRIZEK VET TAOLENN

KENTAÑ DIVIZ

(Renod hag e dud - Richard a Normandi)

RENOD

Ur gwall dra eo soñjal, Richard a Normandi,
Na pegement a boan, a nec'h hag a soursi
Eo klask lakaat Charlez, ar Roue aheurtet,
Da blegañ da ur peoc'h gant an holl c'hoantaet !

ALARD

Biskoazh ne voe er bed Roue nag Impalaer
A reje dre benn-fall ken lies a walleur.

RICHARD

Mar en kvfen evel ma 'm eus bet e gavet
Me 'n drailhfe ken munut evel ar boued-pesked !
- C'hoazh ur wech ho pedan, Richard a Normandi,
Abalamour ma'z oc'h unan hor c'hendirvi,
Pa ho tilez Charlez, dilezit-en ivez,
Ha m'ho lekaio c'hoazh en ho liberts.
- Krouget e viot raktal, mar ne rit kement-se !

RICHARD A NORMANDI

Gwelout an eil kenderz o krougañ egile !
Ne gradfen birviken ho pe ar goustiañs
Da stagañ ho kenderz e kroug ouzh ar potañs !

RICHARD

Grin, e feiz a Richard ! Pa ne fell deoc'h sentif
M'ho krougo ouzh ar paul uhelañ ma c'hellin !

RICHARD A NORMANDI

Neuze, grit a garfot. Prest kloz 'on da varvel.
Da Zoue ha d'am Priñs e vin bepred fidel.

EIL DIVIZ

(Hevelep re - Ojer o tegouezhout)

OJER

Ur c'helou eürus, dudiüs ha laouen,
A zeuan, Actronez, amañ da zegemenn !
A drugarez Doue, an daiz-mañ eo 'n hini
Ma vo skoulmet ar peoc'h 'tre ar Roue ha c'hwi !

RENOD

Ojer, va c'henderz ker, peogwir oc'h kannader,
Lavarit din petre a fell d'an Impalaer,
E teufamp da ober - ha ma hoc'h asuro
E vezint start d'ober, pe me sur o graio.

OJER

Peoc'h a ray ar Roue ganeoc'h, mibian Emon,
Mar asantit heuliañ peder gondision :
Ar gentañ eo homañ : ez efot ho pevar
D'ober sujedigezh d'e Vajestez, hep mar.
- An eil diviz : Renod, bremañ c'hwi a gao
Ho marc'h d'an Impalaer da ober a garo.
An trede : ho preudeur a ranko da viken
Servijañ Roue Frañs evel o souveran.
Ar bevare : Renod, c'hwi 'yelo diarc'hen,
Ar peurrest ho puhez, da ober pinijenn.

RENOD (O pouezañ e c'herioù)

Va c'henderz ker Ojer, ne lavarit netra
N'en d-on raktal bremañ, prest da sentif outañ.
- Petra 'lavarit-hu, c'hwi ivez va breudeur ?

AN TRI BREUR

A feiz ! Ober ur wech peoc'h gant an Impalaer !

RENOD (Da Richard a Normandi)

Richard a Normandi, bremañ, a wir galon
E c'houlennan ouzhoc'h pardon Mibien Emon.
Rak m'hon eus gouzdroutet da gaout ho puhez
E oa evit klask peoc'h e raemp kement-se.

RICHARD A NORMANDI

Me oar ervat, Renod, hag ho pardon a se.
Santout a-walc'h a raen e oa ho polontez.

E I Z H V E T L O D E N N

KLOZADUR

A R P E O C ' H - M A R V R E N O D

K E N T A Ñ T A O L E N N

D I V I Z

(Renod hag e dud)

RENOD (Gwisket evel ur penitiour)

Klevit mat, va fried ha va bugale gaezh :
Setu un deiz a joa hag a d'istidigezh.

KLARA

Aotrou Doue ! Renod, petra eta 'eus c'hoazh
Ma'z eus ennoc'h bremañ ur chenchamant ker bras ?
Perak ne wiskit-hu ho tilhad kaer dukal
Pa rit peoc'h gant Charlez d'echuif ar brezel ?
N'hoc'h eus ket meritad ar maro, a gav din,
Mar d'eo ret deoc'h dougen dilhad ur pelerin !

RENOD

Itron nebl ha gwirion, m'ho ped, 'n em frealzet,
Ret eo kas bete'r penn ar pezh 'zo lavaret.
E-pad ar brezel-mañ, war lies a dachenn
'eus bet skuilhet stêriadob a wed ar gristenien,
Graet ken ruz ha skarlek gant ar gwad ar yeot glas.
Siwazh, va fried kaezh, war-se 'on kablus bras,
Hag em eus kinniget päll a zo d'ar Rous,
Mar karje ober peoc'h gant va breudeur ha me,
Ez afen diarc'hen hag en ur glask va boued
Da c'honit kent mervel gwir bardon d'am pec'hed !

EMONIG

Alas ! Va zadig kaezh, homañ ar galoned !
Va izili a gren, birviñ a ra va gwad !

YONIG

Arabat eo, va zad, ez afac'h hoc'h-unen.
Hon list da vont ganeoc'h, peogwir omp bras bremañ !

RENOD

Doue ha va Ael mat a vo en hent ganin.
Pedit holl ovidon ha na ouzlit ket din.

KLARA Kenevo, va fried ! Kenavo ar retonn !

AN DAOU VUGEL

Kenavo, tadig kaezh, en ur boket d'ho tozn !

E I L T A O L E N N

(Lez Charlamagn)

KENTAÑ DIVIZ

RICHARD A NORMANDI (Daoulinet)

A ! Perak n'em eus-me komzoù flour Kikeron
Hag un teod alaouret ha furnez Salomon,
'vit ho trugarekaat, Roue hag Impalaer,
Evit ar vadelezh hoc'h eus bet em c'heñver !

CHARLAMAGN

Asur, assur, Richard, tommik eo bet warnoc'h !
Evit ho tigrougaf e asantan d'ar peoc'h.

E I L D I V I Z

(Richard a Normandi a sav - Renod hag e vreudeur o tegouezhout, a
zaoulin d'o zro)

RENOD

O Roue galloudek, va Mestr ha va Roue,
Setu ni dirazoc'h, ha va breudeur ha me.
M'ho ped a wir galon d'hon pardoniñ bremañ...
Boïard ha va breudeur a zeu d'ho servijañ,
Ha me, hiviziken, a yelo hep 'em glemm
Da c'honit va bara ha d'ober pinijenn.

CHARLAMAGN

O marc'heger leal, Renod, pa ho kwelan,
Ne c'hellen ket mirout bremañ d'hoc'h admirañ,
Na pe welan un den a zo ken jenerus,
Hag a zo ken doujus, ken eoun, ken gresius !

RENOD

Actrou, me e gerje, evit survad va bro,
Em bije graet ar peoc'h ganeoc'h pemzek vloaz 'zo !

RICHARD

Kredit mat, va Roue, n'eo ket gant son razoc'h
Hon eus-ni asantet ober ganeoc'h ar peoc'h !
Va breur Renod a oa nec'het e gouatiañ
Goude bezañ lazhet kamant a dud e Frañs,
Met biskoazh ne voemp kreñvoc'h eget hiziv an deiz !

RENOD

Va breurig kaezh Richard, na gomzit ket a se !
- Va Roue, ho pet soñj em gwreg, em bugale,
Hag ivez em breudeur.

CHARLAMAGN

- N'ho pet ket a vorc'hed.

RENOD

Kenavo, Tadoù 'Frañs, Priñsed ha Baroned !

AN TADOU FRAÑS

Kenavo 'ta Renod !

RENOD

- Kenavo, mignoned !
- O Boïard ! Pebezh keuz pa'z eo ret da zilez !
Rak kant gwech ec'h eus din rekourst va buhez !
- Kemerit va Boïard, Actrou, mar plij ganeoc'h.

CHARLAMAGN

Kemerit-en, Rolant va niz, p'en roan deoc'h.

RENOD

Dalit eta va marc'h, den jenerus Rolant.
Biskoazh ur marc'h ken mat n'eus bet war ar bed-mañ.
- Pa 'm eus kimiadet digant an Impalaer,
E kimiadin ouzhoc'h bremañ, o va breudeur !
Kenavo, va breur Alard. - Kenavo, va breur Gichard,
Kenavo deoc'h ivez, va breur yaouank Richard.
Glac'har 'zo em c'halon pa rankan ho kuitañ,
Ha pa soñjan ennoc'h, em eus gwir galoned !

(Renod a ya kuit)

RICHARD A NORMANDI

Renod a zo un den ar seurt na weler ket
Nemeur en amzer-mañ o vevañ war ar bed !

RICHARD

O Doue, va C'hrouer ! Posubl e ve penaos
E ve aet kuit hor breur evelse 'kreiz an noz !

TREDE TAOLENN

(Dirak porzh kêr. Noz)

DIVIZ

(Renod; ar porzhier)

RENOD

Digorit din an nor, mar plij ganeoc'h, porzhier,
Rak c'hoant em eus bremañ da vont e-maez aus kêr.

AR PORZHIER

Pelec'h amac'h o vont ? Lavarit, va mignon...
Lakaït evezh mat : diwellit a'l laeron !

RENOD

N'eus forzh, va mignon ker; me a fiz e Doue.
- Lavarit d'an dud mirout ar soñj ac'hanon-me.
A-vremañ em buhez n'am gwelint birviken,
Emaon o vont a-bell da ober piniñenn,
E-lac'h m'en devo c'hoant an Doue Eternel,
Rak me am eus bet graet da galz a dud mervel.
- Dalit, va mignon ker, dalit va diamant.
Hennezh a dalvez sur kalz eour hag arc'hant :
Pa'm boa-me en pzenet, e koustas din mil skoed.
Deoc'h en roan, porzhier, evit netra ebet.

AR PORZHIER

Aotrou, ho trugarez ! Me 'bedo hon Salvar
Evit ma teufot c'hwil buan ha yac'h d'ar gêr.

PEVARE TAOLENN

(O sevel Iliz Sant-Per e kêr Kologn)

KENTAÑ DIVIZ

(Ar vasnerien)

AR MESTR MASONER

Hastomp 'ta labourat, me ho ped, va zud ker,
Ma vo savet buan un iliz da Sant Per,
Rak krefiv eo al labour ganimp er mare-mañ,
Hag hon eus un ti c'hoazh d'ober er miz kentañ !

AR MASONER (Dilabour)

Ya da ! Ma vije mein, Aotrou Mestr-Masoner,
Met an darbarerien a glemm 'int re bounner...

EIL DIVIZ

(Hevelap re, ha Renod)

RENOD (Pa eo degouezhet, eo aet da zaoulinañ dirak an Aotrou vras.
Neuze ez a devet ar Mestr-Masoner)

Salud deoc'h ha doujañs, Aotrou Mestr-Masoner.
Me garfe labourat evit Iliz Sant Per.

AR MESTR MASONER

It eta ca mignon, ha sikourit bremañ
Al lezireien-se da zegas ar maen-mañ.

RENOD

Va Mestr, ne dalv ar boan skuizhañ an dud kaszh-se :
M'en kerc'ho va-unan. Krefiv a-walc'h on da se.

AR MESTR MASONER

Mar n'eus den d'ho sikour, e chomo aze c'hoazh,
Rak n'ouzoc'h ket, moarvat, eo ar maen pounner bras.

(Renod a zoug ar maen)

C'hwi eo ar c'hrefvañ den em eus gwalet biskoazh.
 C'hwi 'zo gwall-labourez, hag ho nerzh a zo bras,
 P'hoc'h eus gallet dougen ur maen evel hemañ !
 Pevar oa bet dija, na oant ket evitañ !
 (Ar vesonerien a labour bremañ. Renod a darbar mein
 bras dezha)

TREDE DIVIZ

(An darbarerien)

KENTAN DARBARER

An den bras-se a zo ken kreñv hag ul leon.
 Ober a ra pep tra hervez c'hoant e galon.
 Kement a ra labour 'val ma refe pemp den
 Ha ne blij den d'ar Mestr nemetañ hep mui ken.

EIL DARBARER

Gaou a raio ouzhip. Mankout 'rey dimp labour.
 - Met an em ententomp evit an em sikour :
 Ret e vo dont a-benn da c'hellout e lazhañ.

KENTAN DARBARER

Pa en kavimp kousket, neuze 'vo ar gwellañ.
 Met tavomp holl war-se; mizomp hon sekredoù.
 Rak eoa e vo ur re amañ ouzh hor selaou.
 (Pacuez a ra al labour. Mont a reont holl e-maez,
 nemet Renod)

PEVARE DIVIZ

RENOD

Amañ e-tal ar stêr eo brev da ziskuilzhañ.
 Vad a rey din gourvez 'ped un eurvezh bremañ.
 (Gourvez a ra. An Darbarerien a ruih ur maen bras
 war a benn d'e lazhañ. Neuze en stlapont er stêr.
 Ur sklaerijenn a sav : an darbarerien, spontet gant
 ar pezh e welont, a red kuit)

P E M P V E T T A B L E N N

(E-kichen ur feunteun)

DIVIZ

(Breudeur Renod, hag ur c'hlasker-bara)

RICHARD

P'emaomp e-kichen ur feunteun degouezhet,
 Greomp un tamm diskuizh da derrañ hor sec'hed.
 E-keit-se, marteze, hon devo an eurvad
 Da glevout diwar Renod hor breur ur c'halou mat.

(Ur c'hlasker-bara a zegouezh)

A-belec'h e teuit, va mignon kaez Doue ?
 Hag ur c'halou bennak ho pefe a-nevez ?

AR C'HLASKER-BARA

Eus bro an Alamagn e teuan, va mignon,
 Eus ar gêr a Groin, e-kichen kêr Kologn.
 Eno em eus klevet niver a vuzhudoù
 Grest gant un den maro dre nerzh e vertuzioù,
 Ma lavare en holl e oa ur ramz, serten,
 A oa bet darbarer gant ar vesonerien.
 Hennañ a oa un den eus ar galonekañ,
 A zouge keit ha dek eus ar re nerzhuseñ.
 Mestr ar vesonerien a oa laouen gantañ,
 Met an darbarerien 'doe gwarizi outañ,
 Ha setu etreze karkent e tivizjont
 Klask en tu d'e lazhañ...hag ober a rejont.
 Ha goude, e stlapjont e gorf e-barzh ur stêr.
 Chom a reas war c'horre (dre vuzhud, se 'zo sklaer)
 Ur sklaerijenn a sav en-dro d'ar c'horf santal
 (Dre vuzhud, a dra sur, a-burz an Eternel).
 Kaset e voe 'n ur c'harr evit bezañ beziet
 En Iliz-Veur Kologn, dre urzh ar Varonad.
 Hep paouz ur gemmed, ar c'harr avat a redas
 Ken e voe e kêr Kroin... Eno, krek, a chomas !
 - Kement-se 'm eus klevet o tremen dre 'r broioù.
 Setu 'ta, Aotronez, va nevezintioù.

(Ar c'hlasker-bara a zalc'h gant e hent. Breudeur Renod
 a chom dilaver ur pannedig)

GICHARD
Marteze eo hon breur, hon eus pell 'zo klasket,
Eomp adarre en hent, evit mont da walet.

C'HWEC'H VET TAOLENN

(Diabarzh Iliz Kroin. Korf Renod a zo dizolo war ar vaskaof. An
Arc'heeskob Tuxpin hag ar Varoned a zo war-dro.)

KENTAÑ DIVIZ

KENTAÑ BARON
Piv an den beuzet-mañ ? Ha c'hwi 'oar, mignoned ?

EIL BARON
Siwazh, va mignon kaezh, an dra-se n'ouzon ket.
E gavet hon eus bet, e-barzh an dour stlapet,
Ha dre ur c'hrae-Doue, war c'horre oa chomet.

KENTAÑ BARON
Pe anv en deus-en, mar d-eus hini en goar ?
Ret e ve, a gred din, un den santel, hep mar !

TREDE BARON
Na ouzon ket a-grenn piv a reer anezhañ.
Met un divroed eo a oa deut d'ar vro-mañ ;
Evel darbarer 'oa en Iliz Veur Sant Per.
(Setu am eus klevet) abaos nebeut amzer.

EIL DIVIZ

(Hevelsp re - Breudeur Renod a zegouezh, hag a sell
ouzh ar c'horf.)

RICHARD
Va breur ! Piv an treitour en deveus ho lazhet ?
Ret eo evet kredañ n'hoc'h anaveze ket !

ALARD
O ! Mezo eo hon breur ! Setu ni glac'haret !



AN ARC'HESKOB (D'ar Varoned)

Bremañ sur, Aotronez, e welimp, me a gred
Ar pezh hor boa c'hoant bras pell a zo da welet,
Rak an Aotronez-mañ 'zo degouezhet amañ
A gredan a anav piv ar c'horf santel-mañ.

(Da vreudeur Renod)

Aotronez, pardonit ar pezh a lavaran :
- Arabat deoc'h keuziañ d'an den ken santel-mañ,
Rak ho preur 'zo ur sant a zo er Baradoz
Tost da Zoue bremañ o kemer e repoz...
- Piv oc'h, mar plij ganeoc'h ? Piv 'reer anezhañ ?
'vit skrivañ e anv war e vaen-bez bremañ.

ALARD

Aotrou 'n Eskob, pa fell deoc'h gouzout hon lignez,
Peseurt anv a raed eus ar c'horf santel-se :
Ni a oa pevar breur, m'hen lavar deoc'h bremañ.
Hennezh a oa anvet Renod a Vontalban...
- Ya, hennezh eo Renod, a oa hor breur henañ,
Kalonekañ marc'heg a zo bet er bed-mañ.
Anavezet eo bet ar pevar Mab Emon
Ha komzet anezhe e-barzh meur a ganton !

AN ARC'HESKOB

O Renod eürus ! Ar gwellañ marc'heger,
Marv e servij Doue o sevel Iliz Per !
Klevet em eus sur komz a Vugale Emon !
Pa eo Renod hemañ, eo laouen va c'halon,
Rak eürus e vo 'hed ar beurbadelezh
Asamblez gant ar Sent ha gant an holl Aelez.
- Eomp da ganañ 'n ofis 'vit an den Santel-mañ
'vo beziet en Iliz an Itron Varia.

(Sevel a reer ar c'horf en ur ganañ "In Paradisium"...)

SKRID-BEZ RENOD A VONTALBAN



Ar Marc'heg kalonek, Renod a Vontalban,
Goude e holl boanioù a ziskuizh er bez-mañ.
Bretoned jenerus, pedomp a wir galon
Jezuz-Krist, hon Salver ha gwir Roue an Tron
Pa vezo deut an eur dimp da gitaat ar bed,
Da vont en e gichen e Palez an Dreinded.

A M E N

o

T A O L E N N

Lodenn Gentañ
LOHIER LAZHET GANT BEUVED

P.

5.

Eil Lodenn
MARV BEUVED HAG HINI BERTELOD

23

Trede Lodenn
KASTELL ROCHEFORT

53

Pevare Lodenn
DIMEZI RENOD HA REDADEG AR GURUNENN

81

Pempvet Lodenn
TREITOURIEZH ION - PLAENENN VOKOULEUR

105

C'hwec'hvet Lodenn
HA KROUGET E VO RICHARD HA MOJIZ ?

139

Seizhvet Lodenn
AR SESIZ WAR VONTALBAN

167

Eizhvet Lodenn
AR PEOC'H - KIMIAD HA MARV RENOD

197

)))o(())o(((

o

Rummad Kozh.

3 lur.

- | | | |
|-------|--|---|
| iv.1. | Ar C'hembraeg hag ar Skol. | 3 |
| 2. | Kelennadur ar Frizeg. (<u>diviet</u>) | 3 |
| 3. | Douaroniezh Vreizh, gant A.Guilcher, eus ar Sorbonne | 3 |
| 4. | 3 0 0 Divinadell. (<u>mouladur nevez ha kresket</u>) | 3 |
| 5. | Rimadelloù hag <u>Unangomzou</u> . | 3 |
| 6. | Kudennoù ar Skolioù er Slesvig. | |

Rummad Nevez.

- | | | |
|---------|--|----|
| 1. | Skol Sant Erwan. (<u>diviet</u>) | 5 |
| 2. | <u>Nedeleg en Breizh, Pevar fezh-c'hoari, gant Jarl Priel</u> | 5 |
| 3. | Danevelloù diwar-benn Skol Sant Erwan hag ar Bleuñ-Brug. (<u>diviet</u>) | 3 |
| 4. | <u>Kontadennoù Kozh ha Nevez, ul levr klok da gelenn ar yezh er gêr hag er skol, gant Ar. Ar C'halvez.</u> | 7 |
| 5. | Danevelloù a bep seurt. | 3 |
| 6. | Daou vloavezhiañ e Skol Sant Erwan. (<u>diviet</u>) | 6 |
| 7/8 | Krennlavarioù Dastumet ha renket gant F.Kervella. | 4 |
| 9. | Kenaouennoù Santel ha Komplidoù ar Sul, gant M.Glanndour | 5 |
| 10. | Ar C'hembraeg hag ar Skol, gant Ar. Ar C'halvez. | 4 |
| 11. | Face au Problème de la Culture dans la Bretagne d'aujourd'hui. | 3 |
| 12. | Ar Brezhoneg er Skol. | 3 |
| 13/14. | <u>AL LENNEGEZH VREZHONEK DRE AN TESTENNOU</u> , levrenn gentañ, gant Abeozen. | 8 |
| 15. | Prizoniad ar C'haokaz, gant Tolstoï. | 3 |
| 16. | Breizh hag ar Bed, gant Herve Konan. | 4 |
| 17/18. | <u>AL LENNEGEZH VREZHONEK</u> , gant Abeozen. | 8 |
| 19/20. | <u>EVEZHIADENNOU WAR C'HERIADUR R.HEMON</u> , levrenn gentañ, gant F.Kervella. | 8 |
| 21. | Mae 1963, Pennadoù a bep seurt. | 3 |
| 22/23. | <u>EVEZHIADENNOU WAR C'HERIADUR R.HEMON</u> , eil levrenn, | 8 |
| 24. | Dek Pezh-c'hoari evit ar Skolioù. | 4 |
| 25. | Tri Fezh-C'hoari, gant ar Breur Konstansius ha Klaoda 'r Prad. | 4 |
| 26. | Pezhioù-C'hoari, gant Dir-Na-Dor (E.Ar Moal) | 4 |
| 27. | <u>MOUEZH SANT ERWAN</u> , Niv.1. (Kannadig Breuriezh St Erwan) | 3 |
| 28/29. | <u>GWIR VRETONED</u> . Mouladur Bras Notennet. | 6 |
| 30. | <u>MOUEZH SANT ERWAN</u> , Niv.2. | 3. |
| 31. | Penaos Niveriñ, Kontañ ha Muzuliañ e Brezhoneg, gant Kelennerien CBER. (eil mouladur, kresket ha gwellaet) | 3 |
| 31 bis. | <u>300 Divinadell</u> , mouladur nevez ha kresket, Rummad Kozh niv.4. | 3 |

32/33. LA DANSE BRETONNE, gant E.GALBRUN. (advouladur dre offset) 12 lur.

34. Mouezh Sant Erwan, niv.3. 35. Mouezh Sant Erwan, niv. 4 3 lur

37/38. AR PEVAR KAB HEMON, berraet hag adkempennet gant P.BOURDELLES. 21^a paj. 13 lur.

1,50 lur. G W I R V R E T O N E D . hepken.

moulet, ment godell.

10 sk: 13,50 lur -- 20 sk.:25,50 l. -- 30 sk.:36 l. --40 sk.:45 l.

50 sk; 50 lur. --- mizou-post 10 % ouzhpenn. franko pa baer en ur

c'houlenn: chekenn pe dimbroù-post.C.C.P. Revue SKOL, 1911 06,Rennes.

Rener-mercour-mouler :

Direct.-Gérant-Imprim.: Arn. LE CALVEZ, Crec'h-Avel-LANNION, 22

Dépôt légal: 2-e trimestre 1967 ---- N°C.P.P.P. 35 323.

